



LEVR

KARTIKO

REIZET GANT

AN OTRO F. GUILLOUZIC

KURE ZANT ERVOAN (MINIHY)

ZANT-BRIEC

ENN TI

R. PRUD'HOMME

Mouler-Levrer

LEVVR

KANTIKO

REIZET GANT

AN OTRO F. GUILLOUZIC

Kure Zant-Ervoan (Minihy)



ZANT-BRIEK

ENN TI RENÉ PRUD'HOMME, MOULER-LEVRER

1894

EUR GIR BENAG

AROG AR C'HANTIKO

A bep amzer a zo bet kanet kantiko en iliz ; el lezen goz kouls ha breman a vije kanet kantiko, ha darn anhe a ve kanet bepred (vel ma c'heo ar psalmo a ganer er gouspero d'ar zul).

Ar zent a zo bet en hon rog war an douar a blijed d'he kanan kantiko hag alian an dud da ganan. N'eo ket hepken war an douar, er baradoz zoken a gan ar zent kantiko vit meuli an Otro Doue ; agant-se, pe ganomp-ni kantiko na reomp nemet heuil skouerio ar zent. Gwir eo ive penoz pa nefe an den eun dra benag da ganan en em gav joausoc'h ; hag eun dra vad eo kanan vit pellat an drubuill, an dristidigez hag ar boan-spered.

Ar c'hantiko, pe voint disket ha kanet mad, a gemero plas ar zonio fall a zo ken noazuz d'ar re ho c'han ha d'ar re ho c'hlev. Ar c'hantiko ho choausao, a douseo ho spered ; ouspen-ze, hoc'h instrui hag ho kelen a reint ; dreiz-he a ganfet meulodio an Otro Doue war an douar da c'hortoz kanan er baradoz.

Laket eta ho spered hag ho kalon da ganan ar c'hantiko-man, vit ma c'heint don en ho spered, ha ma vo touchet ho kalon gant-he ; evelse a gresko karante Doue en ho kalon hag a labourfeet gant muoc'h a nerz hag a fianz evit mad hoc'h ine.

Ar c'hantiko-man, vit bean kanet mad a gle bean kanet gant kalon ; ret eo zantout pezh a ganer, vit rei da zantout


d'ar re-all. Dre-ze evit lakat anhe ezetoc'h da ganan ec'h eo laket an tonio war ar gan-blen vel a levrio oferen. An darnvuan anhe a gle bean kanet gorrek ha frez vit rei d'intent erfad d'an oll petra a ganer.

Aman zo laket eun ton vit pep kantik, med n'eo ket ret kanan anhe war an tonio-ze, bean zo kals a donio all hag a zo kenkoulz vel ar re-man ; pep hini gle kanan vel ma ve kanet er barouz lec'h a man.

N'eo ket diez diski an notenno nag an alc'hoerio pe nefe pep hini he levr ; chetu aman ar seiz noten : Do, re, mi, fa, sol, la, si, ... do.



Do, ré, mi, fa, sol, la, si, do. Do, si, la,
Me ga- ro Dou- e da gen- tan, d'an eil e




sol, fa, mi, re, do.
ka- rin ma ne- san.

Daou alc'hoerio a zo, alc'hoerio do, hag alc'hoerio fa.

Alc'hoerio do :  Alc'hoerio fa : 

An eil alc'hoerio do a izela pep noten a ziu renk war skeul ar gan ; hag an alc'hoerio fa a uhela pep noten a ziu renk ive.

Chetu aman talvoudegez an notenno : Bean zo reo hir ■■, reo verr ■, ha reo krenn ■■ ; eun noten hir a dal diou grenn ; eun noten grenn a dal diou ver ; eun noten gant lost ■ a dal unan grenn hag unan verr, ret eo zellet erfad ouz ze, rag na chomer ket ken pell war eun noten ver vel war unan hir. Awejo a laker ive eur bemol d'ar si ; ar bemol a izela an noten deuz eun hanter ton.



O Breiz- i- zel, douar zan- tel, klev da vu- gel.

TOLEN

DA LARET PENOZ EO LODENNET AR C'HANTIKO

- I. D'ar Spered-Zantel.
- II. Evit ar venediksion.
- III. Evit an oferen.
- IV. Evit ar gomunion.
- V. Pinijen ha kontrision.
- VI. Ar finveo diwean.
- VII. War ar Fe.
- VIII. Ar Zul.
- IX. An Avent.
- X. An Nedelek.
- XI. Ar Rouane.
- XII. Hano Jezuz.
- XIII. Ar Basion.
- XIV. Ar Groaz.
- XV. Pask.
- XVI. Asansion.
- XVII. Pantekost.
- XVIII. Gouel ar Zakramant.
- XIX. Gouel an oll Zent.
- XX. Pask ar vugale.
- XXI. Ar Gonfirmasion.
- XXII. Breuriez ar fe.
- XXIII. En enor d'ar Werc'hez.
- XXIV. En enor da Zant Jozeb.
- XXV. En enor da Zantez Annan.
- XXVI. En enor d'an El mad.
- XXVII. En enor da Zant Ervoan.
- XXVIII. Kantik ar Pab.

KANTIKO BREZONEK

I. — PEDEN D'AR SPERED ZANTEL



Spe-red-Zan-tel, Spe-red a skle-ri-jen, Pli-jet gan-ac'h,
en-omp breman disken, A skleri-jen karget hon spe-
re-jo, A ga-ran-te tommet hon cha-lo-no.

An ebestel en eur zal unanet
A dan ho kras hoc'h euz bet oll karget,
Bet evidomp hevelep madelez
Ne d-omp hep hoc'h nemet zempladurez.

Gwerc'hez Vari, esperanz ar pec'her
Pedet Jezuz ho mab hag hon Zalver
Gret d'hon spered kompren komjo Doue
Ha d'hon c'halon ho miret goude-ze.

II. — EVIT AR VENEDIKSION

1. — Adoromp oll.



A-do-romp oll er za-kramant an O-ter Gwir Vab



Dou-e Je-zuz hon mestr hon Zalver, Spe-re-jo e-vu-
 ruz, prinsed deuz he balez, a-do-ret-han gan-imp meu-
 let han da ja-mez, meu-let han da ja-mez.

Dre drugare evid-omp oll inkarnet
 Dre garante en hosti ez-oc'h kuzet.
 Deut eta ma Jezuz deuz an oter ho tron
 Da rei d'imp oll breman ho penedikSION
 Ho penedikSION.

Enor a gloar ha karante eternal
 D'an Tad, d'ar Mab, ive d'ar Spered-Zantel.
 Meulomp hag adoromp tri ferson en Doue
 En-pad an oll amzer hag en eternite
 Hag en eternite.

2. — Adeste.



Kris-te-nien, pobl e- vruz, bu-ga-le da Je-zuz, Deut
 a- doromp hon Tad karan-te- zuz. Hen eo hon rou-e
 ha roue an E- le. A-doromp-han a galon, A-do-
 romp-han a galon A-doromp-han gant gwir de-vo-si-on.

O pebez karante oc'h euz, Zalver ar bed,
 Da chom gan-imp en hosti konsacret.
 Dont a ret bemde 'vit mezur hon ine,
 Ni hoc'h ador a galon (*bis*),
 Ni hoc'h ador gant gwir devosion.

Stouet oll d'an douar dirag ho majeste
 Ni hoc'h ador Jezuz, gwir Vab Doue.
 Reit d'imp, ni ho ped, ho penedikSION,
 Ni hoc'h ador a galon, (*bis*)
 Ni hoc'h ador gant gwir devosion.

3. — Arog kuitat an iliz.



Je-zuz Zal-ver a-do-rabl zellet ho pu-ga-le, Stou-et
 a-man d'an douar di-rag ho ma-jes-te. Hoc'h a-do-ri
 a-re-omp deuz a greiz hon c'ha-lon, Hon zel-let gant
 tru-ga-re ha ro-et d'imp par-don.

O Doue a garante, burzud a vadelez,
 Evit nerzan hon ine e teuet en hon zouez,
 Laket en hon c'halono eur garante nerzuz
 Hag ho karfomp dreist peb tra, hag a vefomp evruz.

Bemde a skuillet war-n-omp leun a vadelezo,
 Enpad hon bue ive bemde ni ho meulo.
 Na petra a refomp-ni vit ho trugarekat?
 Ni a ro d'ac'h hon c'halon, hon anoudegez vad.

Me a laka ma fianz Gwerc'hez en ho sikour
 Plijet ganac'h ma nerzan eneb ma enebour,
 Pa deui ma heur diwean, m'ho ped mam a drue,
 Obtenet d'in da vean en env gant an ele.

Zant Jozeb, pried Mari, tad mager da Jezuz
 Ni fell d'imp hoc'h enori, patron karantezuz,
 Pa vomp galvet gant Doue, patron ar maro mad,
 Deut gant eun dorn a drue, zerret hon daoulagad.

4. — Arog kuitat an iliz.

Kent ho kui-tat Je- zuz hon O- tro, E c'hou-lennomp
 oll ho pennoz ; A-man e le- zomp hon c'ha-lo-no,

Hon di-wal-let a- hed an noz.

O Mari hon mam muian karet
 Roet d'imp ho pennoz ive ;
 'Vit hon mirout diouz an drouk-spered
 Chomet en kichen hon gwele.

Ha c'houi, Jozeb, tad leun a drue
 Bezet bepret hon fatron mad ;
 Deut bemnoz hag en fin hon bue
 Da zerri d'imp hon daoulagad.

O El mad, mignon karantezuz,
 Hon diwallet ha de ha noz ;
 Pa deui hon maro, pedet Jezuz
 D'hon digemer er baradoz.

5. — Da Jezuz war an oter.

A vre-man be- teg ar ma-ro. Meulomp Je- zuz hag
 he ha-no, Ra vo ka- ret en peb am-zer, Hag a-do-

ret war an O- ter.

Ma Jezuz d'ar bobl zo aman
 Stouet dirag-hoc'h o kanan
 Teurveet rei, gant ho pennoz,
 Nerz d'ho serviji de ha noz.

Enor d'an Tad ha d'ar Spered
 A beurz ann dud hag an Eled.
 Ha da Jezuz gwir Vab Doue
 Er zakramant a garante.

III. — EVIT AN OFEREN

War an ton zo arog, pe war an hini deu warlerc'h.

Ofromp da Zoue 'r zakrifiz
 Na zo netra a gen kaer priz.
 Evel Jezuz krusifiet
 En oferen reprezantet.

A greiz ma c'halon ec'h ofran
 Gant ar beleg an ofern-man
 'Vit enori vel m'eo gleet
 Tri ferson zantel an Dreinded.

Dre an ofern-man e fell d'in
 Trugarekat ma Mestr divin,
 Ma c'harget en deuz a c'hraso
 Hag a bep sort madobero.

Pad an ofern, o ma ine,
 Laka da spered gant Doue,

Ankoa afero ar bed-man
 Evit jonjal hepken en-han.
 O Gwerc'hez Vari, ma itron,
 Ma El mad ha ma zant patron,
 Oll zent hag ele evuruz
 Ma rekomandet da Jezuz.

Goulet evid-on digant-han
 Ma vin en-pad an ofern-man
 O sonjal en he basion
 Hag ar spered hag a galon.

Dre 'n ofern em euz c'hoant ive
 D'ho trugarekat, ma Doue,
 Dimeuz ar garante dener
 A peuz bet dalc'hmad em c'hen-
 [ver.]

Jezuz, dre verit ho maro,
Pardonet d'in ma fec'hejo,
Roet d'in zikour ho kraso
Da heuil erfad hent an envo.

Ofr a ran c'hoaz ar zakrifiz
Evit ezomo an lliz,
Evit ar Pab, an lkibien
Hag evit an oll gristenien.

Reit ive, me ho ped, Jezuz,
Reit d'an iliz eur peuc'h paduz,
Reit sklerijen d'ar baianed
Ha gwir fe d'an hugunoded.

'Vit an anaon, ma Jezuz,
Bezot ive trugarezuz,
Ho dilivranz a c'houlennan
Dre an oferen a glevan.

Breman zouden, o ma Zalver
A diskenfet war an oter,
Gret ma vin prest korf hag ine
D'ho tigemer gant karante.

Enor ha gloar da Doue 'n Tad,
D'ar Spered-Zantel ha d'ar Mab,
Da Jezuz-Krist gwir Vab Doue
Er zakramant a garante.

Petra eo an oferen.

Mar fell d'ac'h kle- vet pen-da- ben Vel m'eo gle- et
an o- fe- ren Gret en- hi pe- den a ga- lon War
vis- te- rio ar ba- si- on.

Barz an oferen a weler
Marv ha pasion hon Zalver.
Heuilomp-han etagant glac'har
Dre hon spered war ar c'halvar.

Ar beleg en traou an oter
A ra d'imp gwelet hon Zalver,
Er jardin en he orezon
Oc'h antren en he basion.

Er *Gonfiteor* a welet
Mab Doue d'an douar stouet,
O pidi, o c'hoezan ar goad
Evit paeon hon gle d'he Dad.

Pa bok ar beleg d'an oter
A drabiz Judaz hon Zalver.
Pa ia d'al levr ar Judevien
A deu d'hen eren gant kerden.

Ha d'an *Introit* a welet
An oll dismeganz ho deuz gret,
Da Jezuz en eur vont d'he gas
Deuz ar jardin da di Annas.

D'ar *c'hirie* zant Per ter gwej
Gant aon rag eur jervijerez
He vestr mad a zianzavaz
En ti ar pontif Kaifaz.

Ha d'an *Dominus vobiscum*
Ec'h anav Per he grim enorm,
Ha pa zell he vestr mad out-han
En em denn ermez da ouclan.

D'an *Oremuz* ar zoudarded
Ho deuz bizaj Jezuz mouchet.
Goulouet a grach, a dolio,
'Neur laret : divin piou a sko.

D'an Abostol a oe kaset
Da di Pilat gant zoudarded,
Eno eur vanden falz-testo
Hen tamal a gals a grimo.

Pa distro da greiz an oter,
E oe kaset c'hoaz hon Zalver
Deuz ti Pilat da Herodez
Ouz he wall-dreti hep paouez.

En aviel eo goapeet
Gant Herodez hag he brinsed,
'Vit eun den zot eo kemeret
Ha da di Pilat hadkaset.

Pa ve'r c'hali dizoloet
Jonjet eo Jezuz diwisket,
Barnet da vean skourjeet
Hep true, gant ar zoudarded.

Pa ofr ar bara hag ar gwin,
Ho pezet glac'har ha chagrin,
Dispennet eo korf ho mestr mad
Gant ar skourjeo ru a wad.

Pa ve goloet ar c'hali,
Da Jezuz ar vourevien gri
A laka eur gurunen spern
War he ben beteg an eskern.

Goalc'hi ra he daouarn neuze,
Rag Pilat a oalc'haz he re
Evit diskoe n'hen c'have ket
Koupabl da vean kondaonet.

D'an *Orate fratres* Pilat
Diskoe Jezuz d'ar bobl ingrat

Leun a wad hag a c'houllo
O sonjal touch ho c'halono.

Ar Barner fall, hep konsianz,
D'ar *Prefas* a ro he setanz
A gondaon Jezuz da vervel
Hep snjet war eur groaz huel.

D'ar *Zanctuz* e c'halfet jonjal
En joa vraz ar judevien fall
Hag humilite hon Zalver
A zent hep klem ouz ar barnet.

D'ar *Memento* a doug he groaz
War vene kalvar gant poan vraz,
Dinerzet dre forz koll he wad
A ia 'vit koean bep kamad.

Daou dorn ar beleg astennet
War ar c'hali a ra gwelet
Ar Veronik karantezuz
O tizec'han bizaj Jezuz.

En-pad ar goureo jonjet
E man' balamour d'ar pec'het
Ar vourevien gant tacho braz
O stagan Jezuz ouz ar groaz.

Pa zav ar beleg an hosti
Ha pa zav ive ar c'hali
Ar groaz en he flas zo zavet,
Deuz ar goullo goad a red.

En eil *Memento* a c'houlenn
Pardon evit ar bec'herien,
Ha d'ar vourevien Mab Doue
A bardon ho fec'het ive.

Pa sko'r beleg war he galon
Al laer dew a c'houlenn pardon
Ouz Jezuz vit he bec'hejo
Hag eur plas gant-han en envo.

Jonjet c'hoaz en-pad ar Bater
Seiz komz diwean hon Zalver.
Ha pa ve an hosti torret
Jezuz war ar groaz zo marvet.

Pa lekeer barz ar c'hali
Eul lodennik deuz an hosti,
A ia he ine d'al limbo
Da vet ineo an tado.

D'an *Agnuz Dei* a welet
An env hag an douar spontet ;
Hag ive kals a Judevien
Oc'h ober eur gwir binijen.

D'an *Domine non sum dignus*
Oe sebeliet korf Jezuz,
Ha d'ar gomunion neuze
A oe laket ebarz ar be.

Pa ia d'al levr, deut da welet,
Ec'h eo Jezuz resuscitet ;
D'an *Domnuz vobiscum* breman
En em ziskoe ar wej kentan.

An oll orezono goude
A diskoe an daou-ugent de

Ma chomaz gant he diskibien
Vit ho diski hag ho c'helen.

Dominus vobiscum er fin
A diskoe d'imp hon mestr divin
O pignal he unan d'an ee
Gant ar zent koz hag an ele.

Pa ro ar venediksion,
C'houi jonjo gant devosion
Er Spered-Zantel o tiskan
Er zal war ben an diskibien.

Pedomp-han ive da disken
War-n-omp en fin an oferen
Ma c'helfomp dalc'hmad evelt-he
Heuil lezen an Otro Doue.

Pa vo achu an oferen
Chomet da laret eur beden
Evit trugarekat Jezuz
Da vean ken madelezuz.

IV. — EVIT AR GOMUNION

Me gred ferm hep dou-tanz e- bet Ec'h an da re-seo
en ef- fet Je- zuz gwir den ha gwir Dou-e Er Za-
kramant a ga-ran-te.

Doue leun a berfeksion
Me ho kar a greiz ma c'halon,
Ha ma nesan garan ive
Abalamour d'ac'h, ma Doue.

Allaz, allaz, petra on me
Da dostad ouz-oc'h ma Doue
Ne d'on nemet eur pec'her kez
Ha c'houi zo leun a zantelez.

Ma Doue me zo glac'haret
D'ho pean kement ofanset,
Hag e fell d'in en gwirione
Lakat gwelloc'h urz em bue.

Kridi a ran, o ma Doue
A galon hag en gwirione
Ar pezh oc'h euz d'imp revelet
Ha dre hoc'h iliz diskleriet.

Ma Doue ma oll esperanz
Mont a ran d'ho kad gant fianz,
Rag c'houi a zo fidel d'ho ker,
Oll c'halloudek, mad em c'henver.

Ah ! pebez dezir em euz-me
Da reseo bara an ele,
Dizec'han ran gant ar zec'hed
O c'hortoz tostad d'ho panked.

Deut eta, Jezuz, ma Doue
Deut muan karet ma ine,
Ma c'hellin tanva hep dale
Ho madelez, ho karante.

Goude ar Gomunion.

Doue eternal leun a c'hloar
Krouer an env hag an douar,
M'hoc'h ador breman em c'halon
Gant respet ha devosion.

Penez ellin-me, ma Doue,
Trugarekat ho majeste,
Na welan netra em ine
Nemet pec'het ha paourante.

A greiz ma c'halon, ma Doue,
 M'ho kar hag ho karo bemde
 Abalamour ma veritet
 Dreist peb tra oll bean karet.

Me ofr em flas, Tad eternal
 Jezuz ma mestr, ho Mab zantel,
 Me ofr c'hoaz deuz ma faourante
 Ma c'halon, ma c'horf, ma ine.

O ma Jezuz, zellet ouz-in,
 Ha reit d'in ar pez a fell d'in
 Reit d'in 'r c'hras d'ho karet bepred
 Hag ar c'hras n'hoc'h ofansin ket.

Me ho ped, zent ha zentezed,
 Ha c'houi oll ele biniget
 Prestet d'in-me ho karante
 'Vit trugarekat ma Doue.

2. — Ele deuz ar Baradoz.

E-le deuz ar ba-ra-doz zel-let pe-bez e-nor
 A-ra d'imp er Za-kra-mant Je-zuz hon re-demp-tor
 Eur wej e-vit hon prenan ec'h eo bet in-kar-net
 Hag e-vit dont d'hon ma-gan en em in-karn bepred.

DISKAN

Mari, gwir vam da Jezuz, Mari ma mam dener,
 Ma zikouret da reseo ho Mab ha ma Zalver ;
 Me ne d-on ziouaz netra, netra nemet pec'hed,
 Med en-hoc'h ec'h, esperan, o ma mam biniget.

Krouer an env, an douar, war an oter bemde
 Dre gomz nerzuz ar beleg a disken deuz an ee,
 Eun Doue kalz hueloc'h evit ar firmamant
 En em izela dindan speso ar zakramant.

Eun Doue na chanj kamet en-pad an oll amzer
 Eun Doue war bal he zorn a doug ar bed antier,
 En em lez dre ar beleg da vezan diblaset
 Evit disken en kalon ar paouran zo er bed.

O mirakl ar zouezusan entre ar miraklo,
 O burzud na hell kompren ar c'haeran sperejo ;
 Evit gonid kalono ho pugale ingrat,
 Ho maget, o ma Jezuz, gant ho korf hag ho koad.

Nan, evit eur mab unik ar vam an deneran
 Biskoaz na zantaz kement he c'halon o toman ;
 Goude ken braz karante, piou 'ta helfe refuz
 Konsakri he oll galon d'ho karout, ma Jezuz.

Mar d-eo dister kalono ar zent hag an ele
 Evit karout eun Doue ken dign a garante,
 Penoz e prizet, Jezuz, dre ar gomunion
 En kalono ken dister dont da ober ho tron.


Penoz a gredfomp eta en kreiz hon c'halono
 Ha goude bean bet gret kement a bec'hejo,
 Mont da reseo eun Doue 'neuz hon frenet ken ker,
 Hon c'halono zo, ziouaz ! re ien en he genver.

Kouskoude, Zalver Jezuz, pa laret d'in tostat
 Ouz ar banket dispar-ze a ret evit hon mad,
 Gant ho komz oll-c'hallouduz netaet ma ine,
 C'houeet en-hi, me ho ped, tan ar wir garante.

Breman zouden 'n em c'halon, daoust d'am oll bec'hejo.
 Jezuz a ia da disken gant he oll denzorio,
 Ha kenkent ma ine paour a vezo unanet
 Gant ine Jezuz ma mestr ha ma muian karet.

Prestet d'in ho tiouaskel, ma el mad zoursiuz
 Ma nijin evel eur goulm entre divrec'h Jezuz,
 Me rai d'ean ma c'halon, hen rai d'in he hini,
 Neuze me vo evuruz, didrouz ha dizoursi.

3. — Deut oll.



Deut oll ha deut gant fe, deut d'ar banked pre-si-uz,

Galvet oc'h gant Dou-e da dibri ouz tol Jezuz, Jezuz

Ba-ra-doaz an i-ne a chom gan-imp noz de.

Mar c'hoantaet mado, aman gavfet an tenzor
 Ho lakei da vezan pinvikoc'h evit ar mor, — Jezuz,
 Perc'hen an oll vado
 Ha mestr an oll c'hraso.

An arc'hant hag an aour na nint nemet paourante
 En kichen an tenzor a ro d'imp-ni Mab Doue — Jezuz,
 A ro d'imp he oll vad
 Evit hon pinvikat.

Er banked c'houi gavo he gorf, he wad, he ine
 Gant he divinite ha gant he oll garante, — Jezuz,
 Gwir joa hon c'halono
 Ha Roue an envo.

Bemde war an oter a disken deuz an envo
 Vit magan hon ine ha toman hon c'halono — Jezuz,
 Oan humbl, dous ha tener
 En kenver ar pec'her.

En kreiz ar baourante a deuaz war an douar.
 Hag evit hon prenan e varvaz war ar c'halvar, — Jezuz,
 Breman man en envo
 Ha 'barz hon ilizo.

Barz an iliz eta, er zakramant an oter
 E c'hellomp oll pidi hag adori hon Zalver — Jezuz,
 Kad diant-han hon mennad
 Hag he drugarekat.

Oll zent ha zentezed roet d'in ho karante
 Ma c'hellin evel-d-oc'h karet dalc'hmad ma Doue, — Jezuz,
 A c'houlenn ma c'halon
 Evit ober he dron.

Deut eta ma Jezuz, rag c'hoant en euz ma ine
 Da danva eur wej c'hoaz ar zakramant dispar-ze, — Jezuz,
 Dre ar gomunion
 Diskennet em c'halon.


Ziouaz d'in pa zellan ma fec'hejo tremenet
 Na gredan ken tostet ouz ho panked biniget, — Jezuz,
 Ouz-in ho pet true,
 Pareet ma ine.

Ar glac'har em c'halon, dirag-oc'h on daoulinet
 Evit goulenn pardon, me ho ped, ma chilaouet, — Jezuz,
 Mar pe ar vadelez,
 Pardon d'ar pec'her kez.


Gant fianz e c'hellin tostet ouz an dol zantel
 Pa neuz d'in pardonet ma oll bec'hejo marvel — Jezuz,
 D'ean ma c'harante
 Beteg fin ma bue.

KANTIKO A DRUGARE GOUDE AR GOMUNION

1. — Meulomp oll,



Meulomp oll da ja-mez Jezuz hag he va-de-lez, Meu-



Biskoaz tad na oe gwelet
Ken mad d'he vugale,
Ken zoursiuz noz-de
D'ho diwall korf ha spered.

Mil benoz d'ac'h, o Jezuz
Me n'em ro d'ac'h a grenn
D'ac'h e vin da viken
Ma Zalver karantezuz.

Plijet ganac'h, o Jezuz,
Krenvat ma c'harante,
Ia, me garfe ive
Skuill ma goad evit Jezuz.

Pegouls e vo 'ta, Jezuz,
Torret ma chadenno
Hag ec'h in d'an envo
D'ho meuli bepred, Jezuz.

Ra vezo meulet Jezuz
Dre-oll, da bep mare,
Ni bemnoz ha bende
Meulomp-oll, meulomp Jezuz.

Skuill a ret gant abondanz
Ilo kras breman war-n-hon,
Renet war ma c'halon,
Gret en-hi ho teumeuranz.

C'houi eo ma nerz, ma skoazel
'Kreiz poanio ar bed-man,
Ar c'hras c'hoaz a c'houlun
D'ho karet beteg mervel.

Zent hag ele evuruz
Pedet evid-omp-ni,
Ma c'hefomp 'veldoc'h-c'houi
D'an env ive gant Jezuz.

M'ho ped, Jezuz, chilaouet
Ar beden a ran d'ac'h
Goul a ran nerz dianac'h
Da diwall deuz ar pec'het.

Me gano pad ma bue
Hoc'h oll madelezo,
Gant ar zent en envo
Me gano c'hoaz trugare.

2. — Da Jezuz trugare.

War don : *Ele deuz ar barados.*

Trugare d'ac'h ma Jezuz, evuruz on breman
Diskennet oc'h 'n em c'halon, c'houi hepken a garan
Dreist oll vado an douar, d'ac'h e vin da viken,
M'ho ped ive d'am c'hemer en env en ho kichen.

Me hoc'h ador, ma Jezuz, deuz a greiz ma c'halon
C'houi eo Doue ma c'houer, c'houi zo den evel-d-on,
Dont a ret er zakramant evit magan an den,
Eun Doue, pebez burzud, ken izel a disken.

Dister e oac'h en eur c'hraou en kreiz al loened mud,
Dinerz ouz ar groaz staget ha nac'het gant an dud,
Aman, pa zellan ouz-oc'h, izeloc'h ho kwelan
Ha pa chilaou ma diousskouarn, mouez ebet na glevan.

Pa 'jonjan ez oc'h Doue, e krenan dirak-oc'h,
Er c'hraou ha war an oter na meuz ken aon rag-oc'h,
Trugare 'ta ma Jezuz da vean diskennet
En hon zouez en iliz-man, da chom gan-imp bepred.

Na n'all ket ma daoulagad miret da skuill daero
Pa jonjan n'ho madelez, ma Jezuz, ma otro ;
Pa welan ar garante oc'h euz en hon andret
Ni pere goe ken liez en drouk hag er pec'het.

D'ac'h eo an erv hag ar greun, ar prad hag al loened,
Ni zo mevelien ho ti, ziouaz, ien ha skornet,
Skornet gant an avel gwe a deu deuz an ifern,
Lec'h, mar na memp ho sikour, e kouezfomp bern-war-
[vern.]

Miret hon zeod 'n hon geno evit na finvo ket
Da gomz dirag hon breudeur komjo an drouk-spered,
Renet hon daouarn, hon zreid, ha dreist-oll hon ine
Ma vo hon erv eün ha blod ha leun a freuz goude.

Ha goude bean bevet gant furnez er bed-man,
Ha bean stank ho pedet en hoc'h iliz aman,
Dirag ho tron en envo d'ac'h c'hoaz ni a gado
Kan an anoudegez-vad vel ma kaner eno.

3. — Kantik a drugare.

Meulomp oll hi-rie Jezuz leun a de-ne-ri-di-gez, Meulomp oll hi-rie he dousder hag he ga-ran-te. Dont a ra dre va-de-lez E-barz hon c'ha-lo-no 'Vit kris-ki hon zan-te-lez A ro d'imp he c'hraso.

Jezuz, pastor mad,
Ma joa ha ma c'honzolasion
Jezuz, pastor mad,
C'houi eo ma Zalver ha ma zad.
Daoulinet dirag ho tron
Leun a humilite,
Ni gan a greiz hon c'halon
D'ac'h-hu mil drugare.

Ma mestr biniget,
Nerz ha muian karet ma ine
Ma mestr biniget
En-hoc'h am bo fianz bepred.
Kaer ho deuz eneb d'in-me
An oll drouk-sperejo
Ober brezel hep true,
Jezuz ho diskaro.

Karomp 'ta Jezuz,
Klaskomp an tu da blijout d'ean
Karomp 'ta Jezuz
Hag hon lako oll evuruz.
Hen eo hon mignon gwellan
Hon gwir madoberour,
Hag an tad an teneran
Bepred prest d'hon zikour.

Petra e rin-me
Evit paeen ho madelezo ?
Petra e rin-me ?
En em rei oll d'ac'h, ma Doue,
En ho servij, ma otro,
Em euz bet tanveet
A bep sort plijadurio,
Ar gwir evuruzted.

Mestr oll c'hallouduz	C'houi a deue d'am difen	
Ganac'h vin evuruz da viken,	Keit a oann c'hoaz bugel,	
Mestr oll c'hallouduz	Bet ive ma c'hurunen	
Dalc'het ma ine vertuuz,	An de renkin mervel.	F. G.

4. — Gwerz an ine devot.

Eun de-zir braz em euz da vir-vi-ken da ga-ret.
Je-zuz gwir Vab Dou-e ha ma Zal-ver bi-ni-get.
Diskan.
O ma Je-zuz, o ma c'haran-te, Be-zet em c'halon
ha bemnoz ha bemde.

Ma Jezuz, c'houi zo mad, c'houi a zo trugarezuz,
Ma Jezuz, c'houi zo dous, c'houi a zo karantezuz.

C'houi oc'h euz ma c'hrouet, ha c'houi am dalc'h en bue
C'houi ro mado ar bed kenkouls ha re an ine.

Re aliez, ziouaz, em euz bet drouk-impliet
Ar graso em euz bet vit gonid an Evruzted.

Meur a wej em euz bet torret ho kourc'hemeno
Ha bet n'em roet re d'ar bed ha d'he afero.

Med breman, ma Jezuz, me a ro d'ac'h ma ine
Ma c'horf ha ma c'halon 'vit ar rest deuz ma bue.

O pebez karante oc'h euz-hu bet ma Zalver
Da vean bet skuillet ho koad evit ar pec'her.

Gwasan drouk zo er bed eo ar pec'het milliget,
Ar pec'het neuz lazet ma Redemptor biniget.

An ine ar c'haeran mastaret hant ar pec'het
 A zo dirag Doue euzuz vel an drouk-spered,
 Diganac'h, ma Jezuz, pardon a c'houlennan c'hoaz,
 Pa n'eo ma fec'hejo 'n euz ho staget ouz ar groaz.
 Diouz ar pec'het dalc'hmad me a diwallo breman,
 Med reit d'in ho sikour da hars da goean en-han.
 Pegouls eta, Jezuz, pegouls a vo digoret
 An env 'vit ma resev, hag ec'h ellin ho kwelet.
 Me na mo nep despet evit kuitat an douar,
 Hast enr euz d'ho kwellet da virviken en ho kloar.
 Jezuz, reit d'in ar c'hraz da vervel n'ho karante
 Vit ma c'hellin en env ho meuli gant an ele.

5. — Da Jezuz Roue ha Tad.

Diskan.

E-nor ha gloar da vir-vi-ken Da Jezuz-Krist Dou-e ha
 den, Krouer an oll grou-a-du-rien. Gwejall he vrec'h
 en euz ha-det Ust d'an dou-ar leun a stered, Heol ha
 loar i- ve a neuz gret.

An Ele a neuz c'hoaz krouet Kaeroc'h evit heol ha stered, D'he jerviji dre-oll er bed.	Gant eur gomz hepken a lakaz An douar da ruillal er mor braz, Hag ar mor n'he lec'h a chomaz.
----------------------------------------------------------------------------------------------	-----------------------------------------------------------------------------------------------------

War ar parko zec'h ha hudur A hadaz eleiz a c'hlazur 'Vit rei d'al loened magadur.	Mervel er groaz war ar c'hal- [var Evit bugale ken digar, Stag ho c'halon ouz an douar.
An den a zo bet gret gant-han, Kement hon deuz a zo d'ean Kouls er bed-all vel er bed-man.	Chom noz ha de war an oter Dindan speso mud ha dister, Gant aon da spontan ar pe- [c'her.
Ha de ar varn, hen a hinjo Hag a draillo vel ma karo Heol ha stered, bew ha maro.	Ha goude eun neubet poanio Skanyeet dre gals a c'haso A digor d'imp dor an envo.
Na gallouduz eo 'ta Doue Na krenv eo c'hoaz he garante Na peuz nemet tol ple da ze.	Gwerc'hez Vari, mam douz ha [mad
Diskan en eur c'hraou evid-omp. Bevan paour ha dister 'vel- [d-omp,]	Deut gan-imp da drugarekat Jezuz hon roue hag hon tad.
Gant he gomz kelen ac'hanomp.	

6. — En enor da Galon Jezuz.

O Kalon Zakr euz ma Jezuz Kalon meurbed ka-ran-
 te-zuz Plijet re-seo me ho su-pli, An de-zir em euz
 d'ho meu-li.

Diganac'h, ma Zalver Jezuz E teu d'in ar graso nerzuz A grenva kement ma ine, A gresk ive ma c'harante.	O Kalon zakr, c'houi zo eun or Hag a welan bepred digor 'Vit degemer ar bec'herien Pa fell d'he ober pinijen.
------------------------------------------------------------------------------------------------------------------	------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------

Ganac'h e kavomp ar mado
A digor d'imp dor an envo,
Ar mado a memp bet kollet
Ken aliez dre ar pec'het.

Bet on, ziouaz, o ma Zalver,
Dianoudeg en ho kenver,
Zellet ouz ma ine ingrat,
Distrei a ran a galon vad.

Torret em euz lezen Doue
Kant ha kant mil gwej em bue,
Anzav a ran, bet on ingrat,
Trezet em euz kalon ma Zad.

Pa-z-oc'h ken mad en hon
Bet true ouz-in, ma Zalver,
Gant fianz e teuan d'ho kad,
Rag c'houi a zo eur pastor mad.

Daoulinet aman d'an douar,
Hon c'halon rannet gant glac'har
Laromp gant eur vouez truezuz:
Pardon, pardon, Kalon Jezuz.

Pastor mad c'houi oc'h euz
An danvad a oa dianket,
Evel-t-han ni c'houlenn pardon,
Digoret d'imp-ni ho kalon.

Me garfe gant ma goad goalc'hi
Ma maliz ma ingratiri,
Da vianan me ho gouelo
Beteg an heur deuz ma maro.

Ouspenn-ze, en hoc'h ilizo
Gant fe a rin ma fedenno,
Ha gant eur gwir devozion
Me ielo d'ar gomunion.

D'an oferen ec'h in ive
Gant respet hag humilite
Eno ec'h ofrin d'ho justiz
Ho kalon zakr en zakrifiz.

Unanomp breman hon moezio
Ha laromp dre hon c'hantiko:
Gloar d'ho kalon, Zalver Jezuz,
Gloar da Vari, mam druezuz.

DA GALON JEZUZ

Evel diskan e c'heller kemer : O Kalon zakr.

La-ret am euz a grenn em spe-red Karet ho ka-lon
ma Jezuz, Rag en dro d'in kaer am euz zel-let ouz an
oll dreo ga-ran-te-zuz Ne-tra na drec'h war ho ka-

ran-te Nag en env na war an dou-ar, Na fell ket e-
ta e ve-fen me O chom ouz-oc'h ien pe glouar, O
chom ouz-oc'h ien pe glou-ar.

2. C'houi oc'h euz dibabet an danve
A vev em izili breman,
C'houi oc'h euz krouet d'in ma ine
Evit m'oc'h anavin gant-han ;
Ha goude ken dispar donezon
Hoc'h euz gret eur burzud neve,
Kuzet oc'h euz en-hon eur galon
Ma c'hellin ho karet ive. (bis)
3. Kemeret hoc'h euz bet en hon zouez
Daouarn da c'houren ouz Satan,
Daoulagad da glask emesk an drez
An denved touellet gant-han,
Diskouarn evit klevet hon c'hlemmo,
Eur vouez da rei d'imp ali mad,
Hag evit zantout hon ezomo
Eur galon dom ha leun a oad. (bis)
4. Lein ar c'halvar a zo bet ruet
Gant ar goad zakr a divere
Dre bemp gouli truezuz meurbed
Dimeuz korf zakr an Den-Doue,
Kri oa gwelet ar pastor mad-ze,
Stag ouz ar groaz entre daou laer,
N'eo ket an tacho eo he dalc'he,
Med he garante n'hon c'henver. (bis)
5. En ilizo aboe keit amzer
Zul-gwej m'ho kalver, e teuet,
'N em blijout a ret war an oter

Evel en env gant an eled.
 Ho prasan plijadur kouskoude
 Eo disken en hon c'halono
 Ha meskan gant goad ho pugale
 Ar goad a red en ho mempro (*bis*).

6. Goude madobero ken zouezuz
 En andret eur pec'her ma-z-on,
 Na c'houlet digan-in, ma Jezuz,
 Netra ken nemet ma c'halon,
 D'ac'h he roan breman, da viken,
 Renet ebarz ha miret-hi
 Me varvo zioul ha dianken
 Gant ho kalon bew em hini (*bis*).

V. — WAR AR BINIJEN HAG AR GONTRISION

1. — Vit amzer ar binijen.

O ma Je-zuz che-tu deut an am-zer
 Da bar-do-ni da c'hla-c'har ar pe-c'her
 Nan, bi-ken mui bu-gel in-grat Na dreu-zin dre ar
 pec'het Ka-lon ma Zad, ka-lon ma Zad.

DISKAN: *Parce Domine, parce populo tuo...*

2. D'ac'h, ma Jezuz, pa-z-on koustet ken ker,
 Dre ho maro pa-z-oc'h bet ma zalver,
 Pa-z-oc'h marvet evid-omp oll,
 Na lezet ket ma ine da vont da goll (*bis*).
3. Gwir vab prodig, aman war ma daoulin
 M'ho ped, Jezuz, ho pet true ouz-in,
 Gant ma daero ha gant ho koad
 Ma goalc'het, ma hadgoalc'het, oan dous ha mad (*bis*).

2. — Kelennadurez war ar govizion.

Rog tos-tat ouz ar bi-ni-jen, l'emp tra a neuz e-
 zom an den Mar neuz c'hoant da ve-an en stad d'o-
 ber eur go-vi-zi-on vad.

DISKAN

Zantez Mari, Mam da Zoue,
 Ouz ar pec'her ho pet true,
 Ma zikouret, mam dous ha mad
 D'ober eur govizion vad.

Da gentan 'n em examinet
 War ar pec'hejo oc'h euz gret,
 D'an eil goulet gant gwir glac'har
 Pardon ouz Krouer an douar.

Neuze refet a greiz kalon
 Eun akt a wir gontrision,
 Ha d'an drede a brometfet
 Na hadkouetfet ken er pec'het.

D'ar beveded, ret eo kovez
 Hoc'h oll bec'hejo hep nep mez,
 Ha gant kals a humilite,
 Hep klask tro ha hep digare.

D'ar bemped neuze a refet
 Kement a vezo d'ac'h laret
 Gant ho kovezour ; evel-se
 En em lakfet en gras Doue.

Goulet gant Doue sklerijen
 D'ober erfad hoc'h examen,
 Hag eur gontrision barfet
 War gement pec'het oc'h euz gret.

C'houi n'em examino neuze
War oll gourc'hemeno Doue
War re an Iliz, ha goude
War an œuvro a drugare.

War ar pec'hejo kapital
Hag ive war ho techo fall,
Ha war oll deverio ho stad,
Mar na ret ket ho karg erfad.

Goude ma po anaveet
An oll bec'hejo oc'h euz gret
Mar man ar glac'har 'n ho kalon
Ouz Doue a c'houlfet pardon.

Jonjet penoz eo ar pec'het
Brasan droug a zo war ar bed,
'Vit-han an ifern zo krouet
Ha Jezuz war ar groaz marvet.

Pa po n'em examinnet mad
A c'helfet mont da govesat,
War an daoulin en em lakfet
Gant humilite ha respet.

Tostat gant fe ha fianz vraz
Ha gret 'n eur gomanz zin ar groaz
Goulennet he venoz ive
Gant ar beleg zo 'n plas Doue.

Neuze hep hoc'h avertisa,
Hepken beteg *mea culpa* ;
Ar *gonfiteor* a larfet,
Evel ma eo bet d'ac'h disket.

Laret an amzer zo aboe
Ma oac'h bet o kovez are,
Mar ho poa bet an absolver,
Ha mar peuz gret ho pinijen.

Diskleriet neuze gant fianz
Kement zo war ho konsianz,

Laret distag ar wirione
Hep nac'h netra deuz ho pue.

Diwallet gant ar vez da guz
Ar pec'hejo muan mezuz
An diaoul a glask ho spontan
Na ret ket a van diont-han.

Diskleriet hoc'h oll bec'hejo
Gant ar pez ho dizhanvalo,
N'esaet ket nag ho gwasat
Na ken neubet ho bianat.

Ouspen a renket lavaret
Pet gwej oc'h euz gret pep pec'het,
Pa n'ouzer ket an nombr erfad
A lerer pet gwej tost da vad.

N'izkuzet kamed ho pec'het,
Laret han evel ma eo gret,
Na damalet netra da den
Na na gontet ket a dreo ven.

Pa po gret ho kovizion
Gant gwir geün ha kontrision,
Achet ar *gonfiteor*
Ha chilaouet ho kovezor.

Evez a gleet da lakat
Da chilaou kement aviz mad
A rei d'ac'h a beurz hon Zalver,
Resevet-he oll gant dousder.

Mar gav ho kovezour ve mad
Evid-oc'h gortoz eur pennad
Hep rei d'ac'h c'hoaz an absolver,
Gortozet hep klem an termen.

Mar neuz ar beleg d'ac'h laret
Dont c'hoaz d'he gad, na vanket ket,
Ha gret evit mad hoc'h ine
Kement zo ret war-ben-neuze.

Goulet pardon ouz ho nesan
Mar oc'h euz bet gret gaou out-han
'N he gorf, 'n he vad pe 'n he ine;
Ret eo rapari kement-se.

Mar hoc'h euz he dra kemeret
Pe miret hep ma oa gleet
Ez oc'h oblijet d'he rentan
D'he berc'hen, ar c'hentangwellan.

Mar oc'h, ziuouaz d'ac'h n'em laket
En okazion a bec'het
A renket a-grenn he zerri
Ha pellat dalc'hmad diont-hi.

Ret eo d'ach kuitat ar pec'het
Oc'h d'ean ar muan techet,
Rag na gleet espern netra
Evit dont d'en em gorrija.

Ha pa peuz bet an absolven
N'ankoet ket ho pinijen,
Heuillet erfad ar remejo
Reit d'ac'h eneb d'ho pec'hejo.

Dalc'het jonjmad deuz an treo-man,
Mar na ret ket pez zo aman
A c'helfec'h, elec'h ar pardon
Resev ho kondaonasion.

Ha chetu aze ar feson
D'ober eur gwir govizion,
Ha d'en em lakat c'hoaz en stad
D'ober eur gomunion vad.

3. — Distro ar Pec'her.



Je-zuz hon Zal-ver, Bet tru-e ouz ar be-c'he-rien Ni



1. Mari mam dener
Avokadez ar bec'herien
Plijet ma zikour dre ho peden
Da distrei ouz Doue a-grenn,
Mari mam dener.
2. Poent eo d'id, pec'her,
Da Zoue digeri an or
Pa ra da Zalver d'id an enor
Da c'houlen digan-id digor,
Poent eo d'id, pec'her.
3. Aboe pell-amzer
Dianket ha re dibreder
Ez tevoa dilezet da Zalver
Ken mad kouskoude 'n ez kenver,
Aboe pell-amzer.
4. Distro ouz Doue,
Ha d'ean beteg ar maro
Chom fidel, heuil he c'hourc'hemeno
Ha birviken n'az tilezo,
Distro ouz Doue.
5. Kreiz tan an ifern
A vo tolet ar bec'herien,
Mar na reont ket a binijen,
Korf hag ine voint da viken
Kreiz tan an ifern.
6. Gant daero a geün
Ha zakramant ar Binijen
A bardon Doue d'ar bec'herien

A deu da derri ho chaden
Gant daero a geün.

7. Zentomp hep dale
Ouz mouez hon mestr hag hon barner
Re diwead a vo ar pec'her
Pa deui an anko d'he gemer,
Zentomp hep dale.

8. Ar vue gristen
A zo gwej douz ha gwej kalet,
Med mar peuz c'hoant da vean zalvet
Dalc'hammad ha pen-da-ben heuillet
Ar vue gristen.

9. Poanio ar bed-man
Zo neubet a dra evid-omp,
Hon zilvidigez gant-he refomp
Mar eo vit Doue a zoufrop
Poaño ar bed-man.

10. Adaleg hirie
Eo zuroc'h d'in heuil mouez Doue
Rag an de arc'hoaz n'eo ket d'in-me,
Urz-vad a lakin em bue
Adaleg hirie.


11. Ni veulo Doue
En env hed an eternite
En touez an oll zent hag an ele
Mar renomp erfad hon bue
Ni veulo Doue.

F. G.


4. — Desped an den zo kouett er pec'het.



A vi-a-nig am euz pec'het Hag o-fan-set ma Doue



Ma i-ne paour am euz la-zet, Ziouaz, pe-bez koll



d'in me.

DISKAN

Gwerc'hez Vari leun a drue
C'houi a zo ma mam bepred
Gwelet a ret stad ma ine
Gret ma kuitain ar pec'het.

Piou a chencho ma daoulagad
En diou feunten a daero
Ha ma daero en daero goad
Da ouelan d'am fec'hejo

Kouls 'zo bet e oan meurbed ker
Da dri ferson an Dreinded,
Med breman dizen ha pec'her
Da Satan me zo gwerzet.

Skrivet kaer a oa ho hano
Em ine net a bec'het,
Breman ec'h on leun a viso,
Pegement on me chenchet.

Ia evit eun netra, ziouaz,
Am euz bet zakrifiet
Mado ha n'ho devoa biskoaz
Ho friz en-touez treo ar bed.

Gras, ma Jezuz, gras, ma Zalver,
Gened kentan ma ine,
Penez ha petra da ober
'Vit ho kaout adare.

Perag n'eo ket deut hep damant
Ar maro kri d'am gervel

Diwar min-font ma badeiant
Pe mailluro ma c'havel.

Neuze da vianan, ma Doue,
Na mije ket bet tennet
Koler ma mestr ha ma roue
Ziouaz, evel am euz gret.

Mignoned traitour d'am ine,
Ma enebourien touet
Nag a c'hlac'har a goust d'in-me
D'ho pean anaveet.

Teodo trempet en ampoezon,
Poezon ar punz infernal,
C'houi 'n euz mastaret ma c'halon
Dre bep sort kentelio fall.

Da fonz ma c'halon ec'h int et,
Evel grouiet int ouz-in,
D'ho zrec'hi, Zalver biniget,
Roet nerz ha skoazel d'in.

Met deut on da c'houlen pardon
Diganac'h, Doue a c'hloar ;
Gant ar geün hag ar rann-galon
Ec'h on stouet d'an douar.

Ma Doue reit d'am daoulagad
Daero a wir binijen
Gret d'in gouelan a galon vad
Ma dizurjo da viken.

Ret eo d'in 'n em gasat bepred
Ha diwall d'en em espern
Ma c'hellin bean prezervet
Deuz poanio kri an ifern.

Me eo an danvad dianket
Retorn a ran c'hoaz d'ho kad
Jezuz, ma Zalver binijet,
Med breman vin fur dalc'had.

Pardonet oc'h euz da Zant Per.
Hag ive d'ar Vadelen,
Pardonet d'in, o ma Zalver
Biken n'oc'h ofansin ken.

5. — Keün ha fianz ar pec'her.

Dou-e gwir bri-ed D'an i-ne-o, C'houi c'heuz ma
c'hrouel, C'houi c'heuz ma fre-net, C'houi c'heuz ma
c'hrou-et, C'houi am zal-vo.

Diskan

Gwerc'hez viniget,
Mam druezuz.
Me am euz lac'het,
Hen gout mad a ret
Me am euz lac'het
Ho mab Jezuz.

Aboe pell amzer,
N'ellan ket nac'h
Ec'h on, ma Zalver,
Ziouaz, eur pec'her,
Ec'h on, ma Zalver,
Enebour d'ac'h.

Eur bugel tec'het
A di he dad
Eun danvad kollet
Ha pell dianket
Eun danvad kollet
A zo bet kad.

Ia, me zo chomet
Bete vremen
Re bell abeurtet
Ebarz ma fec'het,
Re bell abeurtet,
Chanj a renkan.

Pignomp, ma ine,
War ar c'halvar
Gwelomp eun Doue
Leun a garante,
Gwelomp eun Doue
En he c'hlac'har.

He dreid zo treuzet
Gant an tacho,
He gorf dispennet,
He ben kurunet,
He gorf dispennet
Gant ar foueto.

Zell-han diwisket,
Zavet er groaz
He daouarn staget,
He goste touillet,
He daouarn staget
Gant tacho braz.

Me eo, ma Doue,
Me ma unan
Am euz hep true
Dre ma gwall-vue,
Am euz hep true
Kresket ho poan.

Me wel pardonet
Ar mab prodig
Meur den a bec'het
Eur plac'h dirollet
Meur den a bec'het,
Eul laer publik.

C'houi a zo bepred
Eur gwir Zalver
Na c'houlennet ket
A ve den kollet
Na c'houlennet ket
Koll ar pec'her.

D'ho treid e pohan
Gant Madelen,
Re a dalean.
Re bell a dalc'han,
Re a dalean
Ma finijen.

Gened koz bepred,
Bepred neve
Poent eo ho karet
Zalver biniget
Poent eo ho karet
Eu gwirione.

Stouet d'an douar
Gant an anken
Mantret gant glac'har,
Keün 'm euz, m'hen lavar,
Mantret gant glac'har,
Na bec'hin ken.

Arru eo an de
Ma gonsakrin
Ma nerz, ma bue,
D'ac'h, o ma Doue,
Ma nerz, ma bue,
D'ho servijin.

6. — Doue hag ar pec'her.

Pec'her dal-let gant pli-ja-du-rio ar bed, Ziouaz
a-boe ke-ment a vla-ve-zio Ec'h out, hep mar, war
vord an i-fern kousket, Hag ust d'az pen za-vet falc'h

ar ma-ro.

DISKAN

Gwerc'hez Vari, gwir vam Zalver ar bed
Ma mam ive, daoust d'am oll bec'hejo
Deut da zikour eur paour kez pec'her dallet.
Rag chanj a ran : zellet ouz ma daero.

Pec'her, ma mab, distro eta ouz Doue
Na gavi ket ar peuc'h pell diont-han,
Kuitat e teuz eun tad leun a garante
'Vit mont da heul an tirant ar goasan.

Chetu digor ma divrec'h, d'az tigemer
C'hoaz e zo plas evid-oud em c'halon
Goulen eta pardon ouz-in da Zalver,
Hag evid-oud me am bezo pardon.

Respont ar pec'her.

Me eo, Jezuz, me eo an danvad kollet
A oac'h o klask aboe keit-all amzer,
Glac'haret on da vean keit gortozet,
Bremant da-vad ec'h on d'ac'h ma Zalver.

Eneb d'an env, eneb d'ac'h am euz pec'het
Eneb d'am zad ha d'am gwellan mignon,
M'ho ped, ankoat ma fec'hejo tremenet,
Ha gret eur zell ouz glac'har ma c'halon.

Ho madelez zo braz meurbet, ma Doue,
Pa bardonet kement a bec'hejo,
Bremant 'vid-oc'h me a rofe ma bue,
Ha diouz-oc'h n'etra n'am felleo.

Ma ine paour, pa digoueo ar maro
E vi kaset da c'hloar ar baradoz
Pe d'an ifern barz an tan hag ar poanio,
Unan anhe a c'hellez da c'hortoz.

VI. — AR FINVEO DIWEAN

1. — Ar maro.

Chi-laou-et gant spont hag es-ton A- li ar rou-e Sa-
lomon La-ket-han don en ho spered, Ha bi-ken pec'het
na re-fet.

An oll hen goar, ret eo mervel,
Pa deu hon barner d'hon gervel,
Ret eo raktal mont dirak-han
Da glevet hon setanz gant-han.

Meur a den a goll he ine
Ha na rafe ket mar jonje
Barz he finveo diwean
Ha berr-amzer ar vue-man.

Ar c'horf na glask dre he natur
Netra nemed ar blijadur
Ha kouskoude zouden hep mar
Ec'h ei da vreinan en douar.

Ho korf eta mortifiet
Ha bezet rust out-han bepred,
Rag goude vo bet re vaget
A vo ive boed ar prenvred.

Ar bed-man a zo ken traitour
Evel eur bluen war an dour,
An nep en em fio en-han
Avo zur-mad tromplet gant-han.

Prometti a ra hurr-vue
D'ar re a zo o vont n'ho be,
D'ar re iac'h na glanvoint ket,
D'ar re glanv a bromet iec'hed.

Dastumet mado an ine
Ho krei pinvik dirag Doue,
Mado ar bed oll dastumet
Na n'int netra nemet moged.

Kaer po poanial hed ho pue
Da dastum arc'hant ha leuve,
Na delont netra d'hoc'h ine
Mar na pe gret ar vad gant-he.

Rag goude bean labouret
Evit dastum mado ar bed
Petra a po evit ho poan
Pa gwitafet ar vue-man ?

Eur goz ninsel, pevar flanken,
Eun dorchen blouz dindan ho
Chetu aze hoc'h heritaj, [pen
Ha na po ken evit partaj.

Na fiet ket en ho iec'hed,
N'ho iaouankiz pe 'n ho kened,
Hep poan ar maro a diskar
Ar re nerzusan d'an douar.

Pinvidigez nag enorio,
Na galloud, na plijadurio
Na bella diou-ac'h ar maro,
Ho falc'hat a rei pa garo.

Tost d'ac'h eo arri ar maro
E man en-kichen ho seulio,
Gant aon na dalefe ken pell
Bezef bepred prest da vervel.

Pa vet maro deui d'ho kerc'het
Ho kerent hag ho mignonet
Ho kas a reint beteg ho pe,
Hag eno ho lezoint neuze.

Ha chetu ho reuz achuet,
Neubet diou-ac'h a vo komzet,
Hag ho relego vo krignet
Gant ar c'hontron hag ar prenvred

Piou a jonjo neuze en-hoc'h ?
Ha piou a bedo evid-oc'h ?
Gret eta breman kals a vad,
An den maro zo prim ankoat.

Na n'ei ganac'h dirag Doue
Nemed obero ho pue,
Fall ha mad ec'h int bet poezet
Gant ar barner 'neuz ho gwelet.

Jonjet erfad barz an treo-ze
Aliez en-pad ho pue
Ha pa deui ho korf d'an douar
Hoc'h ine vo lojet er gloar.

2. — Da c'houlen gras ar maro mad.

Chi-laou-et ma Je- zuz, Chi-laou-et ouz ma fe-den.
Mer-vel a zo spon-tuz, em ma-ro deut d'am di-fen.
Diskan.
Gwerc'hez Va-ri, ma mam leun a dru-e, Em ma-ro
gant Je-zuz ro- et zi-kour d'am i- ne.

Pa deui spes ar maro da spontan ma daoulagad,
Diskouezet d'in, Jezuz, bizaj ha kalon eun tad.

Pa deui c'houezen ma zal ha ma diou jod dizlivet
D'ober heuz d'ar re-all, c'houi, ma Jezuz, tostaet.

Pa n'ellin ken klevet komjo an dud, ma Zalver,
Komzet c'houi d'am c'halon gant ho mouez dous ha tener.

'Vit ar wej diwean pa larin : Jezuz, Jezuz,
Chilaouet, ma Zalver, mouez ho pugel truezuz.

Pa goueo an daero diouz ma lagad o vervel,
Biniget-he, Jezuz, gret ma voint daero zantel.

O Jezuz, pa welfet ma c'halon baour o ranna,
War ma foan, ma auken, skuillet eur beradik joa.

Pa vo ret d'in kuitat treo ar bed evit jamez,
Bezot c'houi, ma Jezuz, ma mad, ma finvidigez.

Pa n'em dispartio ma c'horf paour deuz ma ine
Resevet, ma Jezuz, an ofranz deuz ma bue.

En ho parnedigez pa vezin, o ma Jezuz,
Bezot dous em c'henver, reit d'in ar vue evruz.

Me laka ma feden, ma bue ha ma maro
Entre daouarn Jezuz ha Rouanez an envo.

3. — Ar varn bartikulier.

Ton : *Chilaouet ma Jezuz.*

Zonjomp en gwirione, zonjomp en eternite
Oll goude hon maro vefomp barnet gant Doue.

DISKAN

Gwerc'hez Vari, ma mam leun a drue,
Ar varn a zo spontuz, ah! gret ma-z-imp oll d'an ee.

Neuze gant eur spont vraz heg galloud en em guzan
A rentfomp piz hon c'hont, ha d'ar barner ar rustan.

Ar setanz a glevfomp a vue pe a varo,
Hag hon stad goude-ze da virviken a bado.

Nemet eur wej hepken ar baradoz na goller
Biken deuz an ifern en em dennan na eller.

Doue an euz roet ar choaz d'imp-oll, kristenien,
D'an eil pe d'egile e vo ret mont da viken.

Ar bed a dremeno, ha ni dremeno ive,
Med an ifern a chom hed an oll eternite.

Ziouaz, pegen braz eo dalledigez ar pec'her
Klask war vord an ifern plijadurezo dister.

Pegen fur eo an den a ra pinijen aman,
Rag mont a rei d'an env pa gwitao ar bed-man,

An-den fur na neuz ket a velkoni o vervel,
He galon a zigor d'ar joated eternal.

Kovesaet erfad ho pec'hejo tremenet
Ha goulennet pardon gant eur galon glac'haret.

Bevomp breman gwelloc'h hep kontan pell da vevan
Tremenomp pep devez vel pa ve hon diwean.

Greomp brezel d'hon c'horf, d'ar bed ha d'an drouk-spered,
Ha gant zikour Doue pellaomp diouz ar pec'het.

Neuze dirag Jezuz ni hello de hon maro
N'em brezanti hep spont, ha mont gant-han d'an envo.

4. — Ar Purkatoar.



Al-laz na ou- fe den kompren } Hon fi-ni-jen a
Pe-gen es-klam eo hon an-ken }

Diskan.



A bep tu d'imp neuz nemet tan
Tan war c'houe ha tan dindan,
C'houi a memp-ni kement karet,
En han' Doue hon zikouret.

Jonjet en ho tad en ho mam
Er purgatoar en kreiz ar flam,
Ma mab, ma merc'h, ah! chila-

[ouet]

En han' Doue hon zikouret,
Ni n'ellomp dre hon fedenno
Distan na berrat hon foanio,
Doue anomp na chilaou ket,
En han' Doue hon zikouret.

Da gontanti justiz Doue
Evid-omp-ni pedet bemde,
Dre 'n aluzen, mar hon c'haret.
En han' Doue hon zikouret.

Kals a c'hellet dre ho poanio,
Ho iunio hag oferanno,

Ken didrue na vezet ket,
En han' Doue hon zikouret.

Ila pa vemp-ni en gloar Doue
Evid-oc'h ni bedo ive
Ouz-omp eta oll chilaouet,
En han' Doue hon zikouret.

Pegeit eta e welin c'hoaz
Zerret an env 'vid-on, ziuaz!
Pegouls e vin er baradoz
O veuli Doue de ha noz!

Zent hag ele, ma mignoned,
C'houi zo barz an evurusted
Pedet stard ma Zalver Jezuz
D'am rentan prestik evuruz.

Ila pa vin arri en envo
Me veulo Doue, ma otro,
Neuze, hed an eternite,
Me gano kan an drugare.

5. — An Ifern.



DISKAN

Mari, Gwerc'hez gallouduz, mam dous ha mam dener,
Bezet bepred truezuz en kenver ar pec'her,
Reit d'imp gras ar maro mad, goulet digant Jezuz
Eur plas evid-omp en env; an ifern zo spontuz.

An ifern a zo eur plas leun a dewalijen
Ha na vo biken en-han gwelet nep sklerijen
He dorejo zo zerret ha prennet gant Doue,
Ila biken na digoroint : kollet eo an alc'hoec.

Eur forn c'horet er bed-man na n'eo nemed moged
En kichen tan an ifern a lisk ar re daonet,
Gwell a ve dewi 'n eur forn ahan da fin ar bed
Kentoc'h 'vit bean 'n ifern eun heur hepken dalc'het.

An ifern e 'n eil maro, ar maro eternal
En-han c'halver ar maro, ha n'eller ket mervel,
Rag Doue 'vit 'n em venji hed an eternite
A ro d'an tan-ze galloud d'ho derc'hel en bue.

Tan an donar c'hell hepken tourmanti ar c'horfo,
Tan an ifern a dourmant dreist-oll an ineo,
Na ouzont ket pelec'h trei, dre-oll ee'h int poaniet.
Rag dindan ha war c'houe a dan int goloet.

A boez ho fen a iudont evel chas konaret
En dizesper int koeet pa welont int daonet;
Gout ouzont zo eun Doue, med biken n'hen gweloint,
Hen anveout a reont, med biken n'hen karoint.

Barz an ifern vo tado, mammo ha hugale
Ha breudeur ha c'hoarezed, ha priedo ive,
An eil eneb d'egile a losko mil malloz,
Dre m'ho deuz 'n em zikouret da goll ar baradoz.

Ar re a oa mignoned 'vit an droug er bed-man
A dremene ho bue d'ober labour Satan
En em gavo en ifern da viken unanet
An eil eneb d'egile da viken konaret.

Eur rann-galon eo d'imp-ni, eme ar re daonet
Gwelet dirag-homp dalc'hmadau hou bue dremenet,
War an douar a mamp bet dizprizet aliez
Ar graso rae Doue d'imp 'vit hon zilvidigez.

Mar g-omp ni daonet eta, ni hepken zo kiriek
Na n'eo ket na tad, na mam, breur, c'hoar pe amezek,
Mar karjemp bean bet fur, ha bet doujanz Doue,
Ni vije bet evuruz er baradoz ive.

Ziouaz d'imp, war an douar a mamp kollet hon foan
Kollet a mamp hon amzer, tremenet eo buan;
Ha breman na van gan-imp, elec'h plijadurio,
Nemet anken, ha glac'har hag eur mor a boanio.

Birviken hon fec'hejo na voint d'imp pardonet,
Ar jonj hag ar gwell anhe vo dalc'hmadau n'hon spered
Hep galloud biken kaout ar gwir gontrision,
Dre-ze a chomfomp dalc'hmadau hep konsolasion.

Evit an eternite gant Doue eo c'houeet
An tan a zo en ifern, biken na vo mouget,
Hag eno ar re daonet da viken a lisko
Ha hep paouez d'ho liski biken n'ho distrujo.

Ar remorz a gonsianz vel eur prenv ho c'hrigno,
An diaoulo ho bue fall d'he c'hoaz a damallo;
Pebez glac'har da jonjal n'ho deuz ket bet miret
Alc'houeio ar baradoz a oa 'n ho dorn laket.

Eternite a c'hlac'har, eternite a boan
Kri eo bean da viken dalc'het ebarz an tan
Ia ! vit eur c'hristen prenet dre varo Jezuz-Krist,
Mont d'an ifern da liski a zo eun dra gwall-drist.

Pec'her ! c'hoant e teuz d'espern da gorf ha da ine,
Da drei diwar an ifern ha da welet Doue ?
Heuill gourc'hemenno Doue, diwall diouz ar pec'het,
Ha n'ez ket da heuill roujo an dud zo 'n em daonet.

6. — Ar varn jeneral.

Bar-net a vo ke-ment den zo bet war an dou-ar,
N'ouzer nag heur nag am-zer Doue hep-ken hen goar.
Ar zent a ie-lo d'an env ar re fall da lis-ki, Honez
zo eur wi-rio-ne a gle an oll kri-di.

DISKAN

Jezuz, c'houi vo er bed-all eur barner didrue,
Med war an douar pa-z-oc'h ken leun a drugare
Beit d'imp ar c'hras rog mervel d'en em zantifian,
Ha dirag-hoc'h de ar varn ni ielo hep krenan.

Dirak tribunal Jezuz a vefomp oll galvet
Hag eno a rentfomp kont deuz kement a mamp gret,
Zujidi ha rouane, tud pinvik ha tud paour.
Euvro mad a vo neuze gwell 'vit arc'hant nag aour.

De braz ar varn jeneral a lako da grenan
Ar re nevo disprizet ho Zalver er bed-man,
An de-se vo 'n de spontuz, de na neuz ket he bar,
De a goler, a hirvoud, a spont hag a c'hlac'har.

Pa dostaio fin ar bed a vo gwelet o tont
An Antekrist milliget a rei krenan gant spont
Kenkouls ar gristenien vad vel ar bec'herien **vraz**,
Trubuill, brezel vo dre-oll vel na zo bet biskoaz.

Ar fals-profet-se a vo Satan a du gant-han,
Ober a rai burzudo, den na c'harzo out-han,
Ha mar na deuje Doue da diwall ar re vad
War an douar na furnez na fe na vije kad.

Na neuz den war an douar a oufe lavaret
An drubuill hag ar glac'har a lako dre ar bed
An Antekrist, ar brezel, ar c'hurun o strakal
Ar zinio barz ar stered hag ar mor o krozal.

Diwar ho zreid gant ar spont an dud a dizec'ho
Ha goude 'n trubuillo-ze an douar a greno,
Al loar a vo ru vel goad, ar stered a goeo,
Ha biken ken deuz an heol sklerijen na deuo.

Barz an noabl, war an douar, dre-oll neuz nemet tan
Neuz ken den war an douar, maro eo peb-unan,
Med chetu breman 'n drompill en pevar c'horn ar bed
Gant an ele vit ar varn d'an oll a vo zonet.

Ar maro a zo spontet hag an douar ive
O welet ar re varo o sevel deuz ar be,
Rag dre-oll deuz fonz ar mor ha deuz ar berejo
'Vit mont d'ar varn jeneral a zav bew ar c'horfo.

War eur goabren lugernuz vo gwelet en keit-se
O tiskan deuz an envo Jezuz hag he ele ;
He groaz kaeroc'h vit an de vo douget dirak-han,
Enor d'ei ! war-n-hi eo bet marvet vit hon prenan,

Resusitet eo an oll, zavet int deuz ar be,
Klevet ho deuz an drompill zonet gant an ele,
Dastumet dirag Doue, breman e voint barnet,
Ar barnet zo azeet hag he levr digoret.

Ha kenkent dirag an oll a vezo diskleriet
Petra neuz gret pep hini ha Petra na neuz ket ;
Evuruz neuze ar zent da vean bet miret
Ho ine pur ha divlam, rag breman int zalvet.

Eno vo dizoloet stad an oll galono
Ho pue vo anveet gant tud an oll broio ;
An tad, ar vam a welo bue ho bugale,
An eil pried a welo dizurjo egile.

Pec'her, pec'herez lubrik, et da goach gant ar vez
Gant ho pue impudik, hoc'h oll fallagriez,
Ar c'hrimo a peuz gwej-all d'ho kovezour nac'het
Dirag an oll zo breman gant Doue diskuillet.

Meur a hini er bed-man gant an dud istimet
Abalamour d'ho viso en ifern vo tolet,
Ha meur a hini ive gant an dud dizprizet
Lugernuz ha kaer meurbed mesk ar zent vo gwelet.

Braz a vo evurusted an ineo zantel
Pa deui gant eur vouez zeder ar barnet d'ho gervel,
Ha pa rei d'anaveout an oll vad ho deuz gret,
Ho iunio, ho fedenno, ho vertuio kuzet.

Gant an ele pad ar varn a vo gret diou loden,
En unan ar re zalvet, ar re daonet 'n eben ;
Ha mouez spontuz ar barnet a vo klevet raktal
O lenn setanz ar re vad ha setanz ar re fall.

D'ar re vad a vo laret : « Deut mignonet Done,
Deut gan-in d'ar baradoz hed an eternite. »
Ar re daonet a glevo ar c'helo-man ken kri :
« Et pell diou-in gant Satan d'an ifern da liski. »

Neuze, pebez ran-galon ! vo gret an disparti
Entre daou den, daou vignon bevet er memez ti
Entre diou c'hoar, daou bried, tad, mam ha bugale,
Unan anhe vo zalvet, ha daonet egile.

Zellet neuze dizesper ha poan ar re daonet,
Dalc'hmad a voint o liski, na vo dizkuiz ebet,
Biken na weloint Doue, pad an eternite,
Biken kaer a vo iudal na deuoint ahane.

Zellet c'hoaz deuz an tu-all evurusted ar zent,
Gant Doue d'ar baradoz a nijoint oll kenkent,
Ha hed an eternite a voint korf hag ine
O veuli Doue en env, pebez joa evit-he!

Hed he vue aliez eo mad d'an den jonjal
Pesort setanz a nevo de ar varn jeneral;
Impliet evit Doue berr-amzer ar vue
Neuze dirag ar bed-oll veet meulet an de-se.

F. G.

7. — Ar baradoz.

Je-zuz pe-gen braz e Pli-ja-dur an i-ne. A vev
en gras Dou-e Hag en he garan-te, A vev en gras
Dou-e Hag en he ga-ran-te.

Berr gavan an amzer
Hag ar poanio dister
O sonjal de ha noz
En gloar ar baradoz.

Pa zellan en envo
Entrezek ma gwir vro
Nijal di a garlenn
Evel eur goulmik wenn.

Gant joa e c'hortozan
An tremen diwean,
Hast am euz da welet
Jezuz ma gwir bried.

Rag neuze me esper
Dre verit ma Zalver
An heritaj evruz
Prenet d'in gant Jezuz.

Kenkent ha ma vezo
Torret ma chadenno,
Me a zavo en er
Evel eun alc'houeder.

Tremen a rin al loar
Evit monet d'ar gloar,
Dreist an heol, ar stered
Me a vezo douget.

Pa vin ust d'an douar
Traouien leun a c'hlac'har,
Neuze me rai eur zell
Ouz ma bro Breiz-Izel.

Neuze me lavaro :
Kenavo d'id, ma bro,
Kenavo, bed poaniuz
Gant da becho riskuz.

Kenavo, paourante,
Kenavo, vanite,
Kenavo, trubuillo,
Kenavo, pec'hejo.

Pelloc'h na doujin ket
Ardo an drouk-spered,
Biken mui n'am zromplo
Goude pred ar maro.

Goude pred ar maro,
Joauz me a gano :
Torret eo ma chaden
Ha me libr da viken

A bep tu pa zellin
Kement tra a welin
A rai d'am daoulagad
Ha d'am c'halon mil vad.

Dorio ar barodoz
Digor ouz ma gortoz,
Ar zent, ar zentezed
Prest d'am digemeret.

Me vo digemeret
En palez an Dreinded
En kreiz an enorio
Hag ar meulodio.

Hag eno evit mad
Welin Doue an Tad
Gant he Vab eternal
Hag ar Spered-zantel.

Me a welo Jezuz
Gant eur visaj joauz
O lakat war ma fen
Ar gaeran kurunen.

Ouspen, me a glevo
Deuz he beurz ar c'homjo :
« Deut, jervijer fidel,
Deut d'ar gloar eternal. »

— Ho korfo evuruz,
A lavaro Jezuz,
Oa tenzorio kuzet
En douar biniget.

Evel grouio roz-gwen,
Pe lili, pe spern-gwen
En kornig eul liorz
Ez oc'h en kreiz ma forz.

C'houi zo em baradoz
Evel bokedo roz
A zivleun d'ar mare
Hag a vleun adare.

Evit poanio dister,
Evit ankenio berr
Me vezo paet mad
Gant Doue ma gwir dad.

Er baradoz hepken
Ni a hello kompren
Petra eo an envo
He c'hloar hag he joaio.

Kaer a vezo gwelet
Ar Werc'hez biniget
Gant daouzek stereden
A ra he c'hurunen.

Gwelet a rin ive
Ele hag arc'hele
O rei meulodio
Da grouer an envo.

Me welo ar sened
Deuz ar batriarched
Ha deuz ar brofeted,
Tud a goz kurunet.

An ebistel evruz
Gant diskiblet Jezuz
Hag an oll verzerien
Enor ar gristenien.

Eno me welo c'hoaz
Leun a c'hloar hag a c'hras
Hon zado, hon mammo,
Hon breudeur, tud hon bro.

Gwerc'hezed a bep noad,
Zentezed a bep stad
Groage, intanvezed
Gant Doue kurunet.

Evruzted hep he far,
En gortoz me ho kar
C'houi am c'honzol bepred
Em oll boanio spered.

Em oll boanio kalet
A gorf hag a spered
Me jonjo de ha noz
En gloar ar baradoz.

8. — Kimiad an ine.

Klevet komz an i- ne pa renk ki- mi- a- di Ouz ar
c'horf a gui- ta pa ia mez deuz an ti. Ouz ar c'horf
a gui- ta pa ia mez deuz an ti.

AN INE

Deut eo, ziouaz, ma c'horf, an termen diwean
Ref eo d'in az kuitat ha kuitat ar bed-man.

AR C'HORF

Gwir eo 'ta ma ine, ec'h et da vont 'n ho tro
Ma nerz neuz ma c'huitat, ien eo ma muzello.

AN INE

Doue neuz ma galvet, achu eo da vue
Ec'h an breman da vont barz an eternite.

Dispartiet ec'h omp gant ar maro digar
Chetu me em unan tre 'n env hag an douar.

Tre 'n env hag an douar evel eur goulmik c'hlaz
A iez ermez an arc'h da c'hout ha glao oa c'hoaz.

AR C'HORF

Ia, med ar goulmik c'hlaz endro oa distroet
D'an arc'h lec'h ma oa kent, ha c'houi na refet ket.

AN INE

Eo, me distroio c'hoaz, hen touet a ran d'id,
Ben ar varn dinvean me 'n em gavo gan-id.

AR C'HORF

Pa vin-me, ine kez, en eur be astennet
Pa vin et en ludu, debret gand ar preved.

Na penoz ec'h in-me d'ar bed-all ganac'h c'houi
Pa vezo dispennet ha torret m'izili ?

AN INE

Doue zo gallouduz hag a neuz gret pep tra,
Az kraio a neve pa vi et da nelra.

Ni 'n em gavo ken gwir, ken gwir ma c'han breman
Dirag ar varn gentan, ziouaz, ken a grenan.

Doue glev anean, Doue respout buan :
Deuz eta, ine paour, na vi ket pell en poan.

Ma jervijet e teuz keit a ma oaz er bed
Breman az tevo lod ebarz ma joausted.

AR C'HORF

Kenavo 'ta, ine, kenavo pa eo ret,
Doue d'ho kas d'al lec'h m'oc'h euz c'hoant da vonet.

C'houi vo difun bepred, me, ziouaz a gousko,
Diouallet d'am ankoat, ha hastet an distro.

An ine nij da krec'h, skei a ra war an or
Digant Otro zant Per hi a c'houlen digor.

AN INE

Oh c'houi, Otro zant Per, c'houi zo karantezuz,
C'houi am digemero en baradoz Jezuz?

ZANT PER

En baradoz Jezuz e vi digemeret
Pa hen digemerez keit a ma oaz er bed.


AN INE

Kenavo d'id ma c'horf, ha d'id trugare vad
Kenavo, kenavo da draouien Jozafat.

Eno 'n em gavfomp c'hoaz hon daouik unanet
'Vit mont d'ar baradoz, hon oll evurusted.

VII. — WAR AR FE

Diskan.



Kri-di a ran, o ma Dou-e } Ke-ment tra oc'h euz
A ga-lon hag en gwi-rio-ne }



dis- kle- riet Ha dre an I- liz d'imp dis- ket.

Gant Doue ec'h omp bet krouet
'Vit he anveout, he garet,
He jerviji mad er bed-man
Ha mont eun de d'an env gant-han.

Vit kavet an evruzted-ze
A bado eun eternite
Tri zra da gaout a renker
Evel ma disk d'imp hon Zalver.

Chetu aman an tri zra-ze :
Fe, esperanz ha karante,
An ter vertu-ze a zo ret
D'au oll evit bean zalvet.

Dre ar fe a gredomp parfet
Pez a neuz Doue propozet
D'he Iliz zantel, ha dreiz-hi
D'imp oll er bed-man da gridi.

Chetu aman petra zo ret
Da gridi gant eur fe barfet
Chilaouet gant atansion,
Ho miret don en ho kalon.

Na zo 'met eun Doue hepken
Zo da viskoaz ha da viken
Eur Spered pur hag oll barfet
A neuz a netra gret ar bed.

Neuz netra kuzet evit-han,
Pep tra a wel, dre-oll e-man,
Gwelet a ra fonz ar galon
Rak-se, pec'herien, ho pet aon.

Tri ferson a zo en Doue
Distinct an eil deuz egile,

An Tad, ar Mab, ar Spered-glan,
A zo gwir Doue peb-unan.

Med p'ho deuz ho zri kouskoude
Eun hevelep divinite,
Na nint 'met eun Doue hepken
Vel ma disk d'imp ar fe gristen.

Ar mister-man a zo hanvet
Mister adorabl an Dreinded,
He gompren zur-mad n'ellet ket,
Med he gridi ferm a renket.

An den kentan dre ar pec'het
Da Satan nevoa hon gwerzet,
Doue neuz bet true ouz-imp
Ha roet eur Redemptor d'imp.

Mab Doue 'vit dont d'hon prenan
Zo bet konsevet er bed-man
Dre vertu ar Spered-Zantel
Herve komz an el Gabriel.

Gant Mari he vam biniget,
Mam, ha chomet gwerc'hez bepred,
Oe ganet en eur c'hraou dister
Vel eur paour en kreiz ar vizer.

Ouspen ma eo 'ta gwir Doue,
Ec'h eo gant se gwir den ive,
An hano oa d'ean roet
A zinifi Zalver ar bed.

Jezuz eo eta hon Zalver,
Hon viktim, hon beleg, hon skouer,
Hon fen, hon mest hag hon otro,
Pastor, bue hon ineo.

Nemet dreiz-han dirag he Dad
N'ellomp kamed bean deut mad,
Hep-han en-homp nep zantelez,
Evid-omp nep zilvidigez.

Er bed-man neuz bet eur vue
Leun a boan hag a baourante,
Vit diski d'imp eo dre boanio
A renkomp gonid an envo.

'Vid-omp oll ive war ar groaz
En zakrifis en em ofraz,
Ter heur er groaz eo bet chomet,
Ha kals a boanio neuz zoufret.

He gorf a oe sebeliet,
Hag he ine dispartiet
A diskennaz d'an ifernio
Da dilivran an ineo.

Ben an drived devez goude
Zav deuz ar be leun a vue,
Ha daou-ugent de goude-ze
E pignaz he-unan d'an ee.

Eno war eun tron peurbaduz
En tu dew d'he Dad gallouduz
Eo azeet vel par d'ean
En eun hevelep gloar gant-han.

Eno a neuz jonj ahanomp
A brepar plaso evid-omp,
Eno a memp dirag hon Zad
Eun Doue evit avokad.

Ahane a devio eun de
Da varn an dud hag an ele,
Neuze da zon an drompillo
A resusito ar c'horfo.

Neuze ar re fall a ielo
Da liski en kreiz ar flammo ;
Ar re vad a iel gant Jezuz
Hag a vo da viken evruz.

D'ar Pantekost an Ebestel
A resev ar Spered-Zantel,

Gant-han dalc'hmad eo asistet
Iliz Jezuz hag ar Pabet.

Ebarz an Iliz a gavet
An denvéd hag ar bastored
Dindan ar pastor eternal
Ha dindan ar Pab he vikel,

Ermœz an Iliz na neuz ket
A voien da vean zalvet ;
Na oufe biken 'n em dromplan
Na dre-ze ive hon zromplan.

Gant an iliz a neuz lezet
Jezuz eun tenzor kaer meurbed,
Pini eo ar zakramancho
A zo leun deuz he verito.

Dreiz-he a memp graso Doue
A viomp a greskomp anhe,
Ha dreiz-he c'hoaz, mar ho c'hollomp
A neve-flam ho hadkavomp.

Gret neuz seiz zakramant gwirion
Badeiant, Konfirmasion,
Hini an Oter, Pinijen
Urz, Priedelez ha Nouen.

Ar Vadeiant hon rent divlam
Deuz a bec'het hon tad Adam,
Hon gra bugale da Zoue
Ha heritourien deuz an ee.

Ar Gonfirmasion gristen
Ro ar Spered-Zantel d'an den,
Nerz bepred da zouten hon fe
Dirag an dud fall ha dife.

Er zakramant a Binijen
A resever dre 'n absolver
Ar pardon deuz a bep pec'het
Goude 'r Vadeiant kometet.

Ebarz zakramant an Oter
E man Jezuz-Krist hon Zalver
Evit magan hon ineo
Ha kriski en-he he c'hraso.

An Nouen zantel a efas
Ar pec'hejo a chomfe c'hoaz,
Hon c'hrenva da c'houzanv hon foan
Ha da enebi ouz Satan.

Ha pa ve profit an ine
A ro d'ar c'horf iec'hed ive
Rag-se pa 'n em gaver gwall-glan
A gleer reseo anean.

An Urz a ro d'imp beleien
Evit laret an oferen
Evit zikour an dud fidel
Da vont d'ar vue eternal.


Ar Briedelez a laka
Daou bried kristen da veva
En union, en karante,
Da zével mad ho bugale.

Henez eo an tenzor dispar
Neuz an Iliz war an douar
Hag a fourniz d'ez-hi graso
'Vit-he ren beteg an envo.

Ma Doue, chetu ma c'hreden,
Kent renonz d'ez-hi a varvfen,
Me a gred c'hoaz kement a gred
An Iliz zantel ho pried.

Gwerc'hez, pedet ho mab Jezuz
Da rei d'imp ar c'hras presiuz
Da gridi ha da heuill ive
An oll artiklo deuz ar fe.

Reglen a vue.



bem-de Da zan-ti-fi-an ma i-ne.

Aman a gavfet eur reglen
Evit bevan en gwir gristen.

Pa difunet, roit da Zoue
Ho kalon ho labour en de.

Goude m'oc'h zavet ha gwisket
Gret ho pedenno daoulinet.

Bezef fidel da labourat
Evit gloar Doue en ho stad.

Lavaret pa vefet tentet
Jezuz, Mari, ma zikouret.

Bemnoz oll en ho tiegez
Gret ar pedenno asamblez.

Hoc'h examिन kент ar renoz,
Marteze e varvfet en noz.

D'ar zul an ofiso heuillet
Ha festo ar bed dilezet.

Koveseit mar gallet bep miz,
Ha komuniet dre aviz.

N'et ket d'en em rei d'ar pec'het
Dreist-oll d'an hini oc'h techet.

Na leret ket leio-douet
Na komjo brein ha goloet.

Pep kristen a gle c'hoaz diwall
Da drouk-komz ha da droug-
[jonjal].

Diwall deuz an drouk bianan,
Dougen a ra d'an droug brasan.

Diwall deuz al leziregez
Ha deuz ar gwall gompagnonez.

En hoc'h obero 'n ho tillad
Bezef bepred herve ho stad.

Roet skouer vad da dud ho ti
Na roet da den gwall-ali.

Na drouk-komzet kamed deuz
[den],
An teodo-fall hellet repren.

Zikouret gant gwir garante
An dud a zo er barourante.

Karet ho Toue da gentan,
D'an eil evel-d-oc'h ho nesan.

Jonjet er varn hag er maro,
Jonjet en ifern, en envo.

Kantik al labourer devot.



Bi-ni-get ma Dou-e } Reit ar ba-ra-doz d'he i-ne.
Poa-nio al la-bou-rer } Pa vo fin d'he vu-e dister.

Aman pell deuz an drouz
Hag oll streuvel ar bed,
Ar mezo am c'helen didrouz
Kouls hag a rafe tud disket.

An douar a fourniz
Freuz neve d'ar poaniour,
N'ho ro ket d'ar feneantiz;
N'euz ket a vlavez hep labour.

Me a wel ar guenan
Zavet da c'houlou-de,
Me ive a gle kemer poan
Da dennan freuz deuz gras Doue.

An dour a red bepred
A dreuz ar boukedo,
War hent an env'meuz da gerzet
Hep luian er plijadurio.

An derved gant fianz
A heuil ar bastored,
Heuil Jezuz eo ma asuranz
Rag treitoure eo an drouk-spered.

Ar gwe braz gant avel
A bep tu zo hinjet
Koean rin mar zavan huel
Zurroc'h eo eur vertu guzet.

Glaz a chom an deillo
Pa veint stag ouz ar gwe,

'Vel deillo kouett me a zec'ho
Mar 'n em zistagan deuz Doue.

An ekleo a respont
Er c'hoat pa hen galvan,
Doue am galv hag elec'h mont
Vit he glevet nep van na ran.

Ar bokedo a zao
Hag a zec'h en eun de
Allaz! na vevin ket atao,
Hep dale me goueo ive.

Al lapoused a gan
Meulodi ho c'hrouer.
Dre ma bue ha ma oll boan
Me hen meulo en peb amzer.

Gwennat a ra ma bleo
Gant erc'h ha frim ar goan,
Ma douarn a skar gant ar reo,
Med waz mil gweja veritan.

Devet on pad an hanv
Gant c'houezen ha tomder
Tomder hag heol a zo treo skany
En kichen poanio ma Zalver.

Oll evid-oc'h eta,
Doue a garante,
Poan, labour, trubuillo ha joa
Ilirie hag en-pad ma bue.

VIII. — GWERZ AR ZUL

Diskan.

Pli-jet gan-ac'h ma Dou-e skuil war-n-omp ho pen-noz.
Ni zan-ti- fi- o ar Zul vel ma rae hon zud koz.

Ni gar- fe hed hon bu- e be- van 'n-ho ka- ran-te,
Mervel vel ma varv ar zent ha mont d'an env gant-he.

Dalc'het jonj mad, kristenien, dimeuz an de zantel
A deu dre zon ar c'hleier en pep sun d'ho kervel
Da vont d'hoc'h iliz parouz vit meuli hon otro
Ha goulen graso neve en-tal an oterio.

An de-se 'zo biniget, zakr eo dreist ar re-all
Neb a deu d'he brofani na n'eo ket didamal,
C'hoec'h devez zo d'al labour, unan zo d'an ine,
An den a neuz c'hoec'h devez, ar zul zo da Zoue.

Gant glac'har hen lavaran, war meur a digare
Kals a dud' zo a dispriz hag a laer de Doue,
War vor kouls ha war douar a zo meur a hini
N'ouzont ken na diskuizan, na zenti, na pidi.

Hi a jonj bean furoc'h vit n'eo krouer pep tra,
Hag en desped d'he lezen a glaskont kad bara,
Tud kez, chilaouet hirie levr kaer an Aviel,
Jezuz vo ar prezeger, chilaouet he gentel.

« N'ho pet nec'h nag aon ebed, ha na lavaret ket :
Petra gavin da dibri, penoz a vin gwisket ?

An tad oc'h euz en envo zo mad he daoulagad,
Hen rei d'he jervijerien ho boed hag ho dillad.

Zellet ouz an evnigo a nij a-ust d'ho pen,
N'ouzont hadan na dastum, n'ho deuz ket eur c'hreunen,
Ha bemde dre c'hras Doue a gevont ho begad
Ha c'houi ive bet fianz en madelez ho Tad.

Zellet ouz ar bokedo a zav hen stank er prat,
Biskoaz n'ho deuz bet flisket na nean na grouiat,
Ha kouskoude Salomon war-n-han he vantel aour
En kenver eur bod lili a oa c'hoaz gwisket paour.

Mar eo ken kaer-ze livet boukedo ken dister
En em zigor ar beure hag a vo zec'h en-berr,
Laret d'in-me, tud dife, penoz halfe Doue
Lezel en noaz pe hep boed an dud, he vugale.

Glasket gonid da gentan rouantelez an ee
War hent ar gourc'hemeno na skuzet o vale,
D'ac'h a vo ar baradoz ha zo-ken ar bed-ma,
C'houi nevo digant ho Tad ha dillad ha bara. »

Chetu komjo ho Salver, krenv int ha dizolo
Meur a hini kouskoude a chom hep ho chileo,
An dud hep enor na mez a weler peurvuan
O rei ar zul d'al labour hag al lun da evan.


Pell-zo, ziuoaz, an douar a zo evel mouzet
Kazi en desped d'ean a ro d'imp freuz hag ed,
Goude kement a labour an est a ve tano ;
Mar na viromp ar zulio da baour ec'h ei hon bro.

Ia, kredet-se, ma breudeur, ret eo benoz Doue
War-n-oc'h ha war ho loened, war ho parko ive,
Na labouret ket d'ar zul, deut devot d'an iliz,
Ha zur ho po amzer vad, heol-tom, glao ha gliz.

C'houi ielo ive d'an env goude fin ho pue,
Eno c'houi gano gant joa kantiko an ele,
Kaeran zul da diskuizan eo an eternite !
An iliz dreist ar re-all eo baradoz Doue.

IX. — VIT AMZER AN AVENT

Diskan.



Krou-er gal-lou-duz ar ste-red, Gwir skle-ri-jen an dud
a gred, Ma Je-zuz pa-c'h euz hon pre-net, Ouz hon
fe-den-no chi-laou-et.

Deut Zalver ar bed diskennet
Deuz a Satan hon dizammet,
Diskennet diouz ar baradoz,
Ni zo pell-zo ouz ho kortoz,

Adam 'nevoa war ho lavar
Kuitat baradoz an douar
Hag aboe an dud war ar bed
A neuz kals a daero skuillet.

Bugale Adam evel-t-han
A goeaz en pecho Satan,
Rag he-man stignaz he ardo
Evit daoni an ineo.

War ar bec'herien kaledet
Dour an diluj a oe tolet,
Oll dud ar bed a oe beuet,
Eiz den hepken a oe miret.

Goude eur gentel ken kalet
Satan a wash an dud bepred,
Dorn Doue a sko tour Babel
Evit rei d'he eun eil gentel.

War hent an drouk an dud dallet
A dalc'haz bepred da gerzet,

Ha kouskoude e c'hortozont
Eur zalver en amzer da zont.

Doue nevoa laret d'Adam
A deuje ar Mab hag he Vam
Da flastran he ben milliget
D'hon enebour, an drouk-Spered.

Aboc Abraham a zo brud
A vo eur zalver vit an dud
Deuz Abraham hag he ligne
A deuo d'imp ar zalver-ze.

Moïzez hag ar brofeted
Deuz ar Zalver a neuz komzet,
Rog m'eo ganet ar bugel-ze
He c'hoar zo anveet gant-he.

Eun El zo bet en Nazaret
Gant eun neventi gaer meurbed,
Da Vari a neuz diskleriet
A vo hi Mam Zalver ar bed.

Neuze gant ar Werc'hez Vari,
Elisabet ha Zachari
Jervijerien braz da Zoue
Neuz kanet kantiko neve.

Doue Israël eme-z-he	Evruz eta neb a welo
Roet hoc'h euz d'imp hon Roue,	Jezuz hon Zalver, hon Otro,
Neuz ket ezom ken d'hengortoz,	O tont er bed-man d'hon prenan
D'ho hano mil ha mil benoz.	Ha d'hon lemel digant Satan.

X. — VIT AMZER AN NEDELEK

Diskan.



Ka-nomp gant an e-le gloar en env da Zou-e.
Dre oll war an dou-ar peuc'h d'an dud vad i-ve.
Ka-nomp nou-el! nou-el! da Je-zuz hon Zal-ver,
Ga-net en Bet-le-em en eur c'hraou-ik dis-ter.

Spered zakr ha divin, m'ho ped reit d'in ar c'hras
Da disklerian erfad eur mister zo ken braz,
An donedigez kaer a Jezuz Mab Doue
Deuz henoaz war ar bed ebarz ar baourante.

E oamp pell-zo amzer o c'hortoz anean
Da disken deuz an env evit dont d'hon prenan
Torret vo hep dale chadenno ar pec'het
Ganet e 'n Betleem gwir redemptor ar bed.

An env hag an douar o welet ar bugel
A drid gant eur joa vraz, a gan : Nouel ! Nouel !
Klevet a rer en noabl zonio ar baradoz,
Hag eur sklerder neve a splann enpad an noz.

Eun El er sklerijen raktal a diskennaz,
Chetu neventi gaer, kaeran, zo bet biskoaz,

Difunet, eme-han, ha zavet, pastored,
Ganet eo ho Salver, et d'ar c'hraou d'he welet.

Pa glev ar bastored gant an El ar mister
Penez a oa ganet ho Mestr hag ho C'hrouer
E lezjont ho denved war ar maez da beuri
'Vit mont da Velleem er c'hraou d'hen adori.

Na oa ket skler an de pa gavjont anean
Ebarz eur marchosi hep na golo na tan,
Na mezer na lien n'hen devoa war he dro,
Nemet gouriz he vam, netra ken d'hen golo.

Hag hi oll d'an daoulin tro-war-zro d'ho C'hrouer
Evis hen adori evel ho gwir Zalver,
Rei a rejont d'ean vel merk a garante
Pep hini he brezant herve ho faourante.


Me ho ped, pobl ar bed, heuillet ar bastored,
Adoret ho Krouer war ar plouz astennet
Jonjet, en he gichen, a gle, pa vezo braz
Asten he izili evid-oc'h war ar groaz.

He baourante zo kaoz d'hon oll binvidigez
Deut eo d'hon c'honforti dre he zempladurez,
Goul a ra hon c'halon evit renoz en-hi
Glac'har braz en defe mar ve kollet hini.

Eun Nouel koz.

Diskan.

Ka-nomp nou-el da Vab Dou- e Ga- net he-noaz er
baou- ran- te, Da Je- zuz ha d'he Vam Zan- tel



Ka-nomp mil gwej : Nou-el, nou- el!

Petra zo henoaz a neve
Pa zo kals a dud war bale,
Perag a ia a vandenno
Ar bobl en noz d'an ilizo ?

Henoaz a ganer an ofis
Da hauer-noz barz an iliz
Evit enori ar Messi
Ganet henoaz evid-omp-ni.

Tro pevar mil vla zo renket
Gortoz an Ilini oa galvet
A oll-viskoaz evit bean
Mam da Redemptor ar bed-man.

Er ger vian a Nazaret
Gabriel a neuz bet kavet
Ar Werc'hez a oa dibabet
'Vit bean mam Zalver ar bed.

Vel ma treuz an heol ar weren
Pe nerz an tan dreuz al lien.
Eo konsevet hep ofansi
Jezuz en poul-kalon Mari.

Pelec'h ez oc'h Patriarched ?
Pelec'h ez oc'h-hu Profeted ?
E oac'h pell-zo o hirvoudi
Ret eo henoaz ho konsoli.

Gloar da Zoue, tado zantel,
Kanet gan-imp : Nouel ! Nouel !
Ganet eo henoaz ar Messi
Gant eur Werc'hez hanvet Mari.

Mari hep koll he furete
A zo gwir vam da Vab Doue,
Mam d'ar Zalver oa promettet
D'hon tad Adam ha d'he bried.

Eun El en env 'n em ziskoeaz.
D'ar bastored a lavaraz :

« N'ho pezet aon na spont ebet,
Zalver ar bed a zo ganet. »

« En Betleem en eur c'hraouik
C'houi a gavo eur bugelik.
Et di pastored da welet
Ho Salver zo neve c'hanet. »

Neuze oe klevet an ele
O kanan war eun ton neve
Ar *Gloria in excelsis*
Gwell na ve kanet en iliz.

Ar bastored karget a joa
Evel m'ho c'hlevjont o kana,
A laraz an eil d'egile :
« Demp da welet Mabik Doue. »

Laret a ra ar bastored
En Betleem p'int arriet :
« Ni hoc'h ador, Zalver ar bed,
Ni zo deut aman d'ho kwelet. »

« Ziouaz, emeint-hi, Mabik koant
Ni n'hon deuz nag aour nag
Med mar plij ganac'h, Mabik
Kemeret hon bolonte vad. »

Neuze ar bastored joanz
Dre m'ho devoa kavet Jezuz
'N eur distrei da vet ho loened
A gan : Doue ra vo meulet !

Kenvo ! kenvo ! Mabik Jezuz !
Kenvo ! bugel karantezuz !
Reit d'imp-oll ar c'hras d'ho
En env en palez an Dreinded.

XI. — NOUEL KOZ EN ENOR D'AR ROUANE

Diskan.

Gel-vel omp dre dru-ga-re gant Dou-e d'a-na-ve-out
ar gwir fe, Ni fell d'imp heuil ar fe gris-ten Vel
ma heuil ar Rou-a-ne ar ste-re-den.

Chilaouet oll Bretoned
Me ho ped
Eun Nouel zo neve c'hret
Evit ober solennite
Da Jezuz, da Jezuz
Ha d'ar Rouane.

Tri virakl braz a gavan
Pa lennan
Ofis zantel an de-man
Me ho ped 'ta oll kristenien
D'ho chilaou, d'ho chilaou
Evit ho c'hompren.

Er c'hentan ar miraklo
Hep gir gaou
Oe badeet hon Otro,
A oe badeet hon Zalver
Gant zant Ian, gant zant Ian
Er rivier Jourden.

An eil mirakl zur a oe
Kredet-ze,
Eured Kana 'n Galile
Pa oa an dour en gwin chanchet
Dre vertu, dre vertu
Jezuz en eured.

An drede oa pa deuz
Gant joa vraz
D'adori ar Messiaz
Tri Roue deuz an Oriant
Ha gant-he, ha gant-he
Oll peb a brezant.

Eur stereden zo zavet
Gant sklerdet
Diouz al lec'h ma oe ganet,
Ha war he lerc'h ar Rouane
A zo deut, a zo deut
Da glask ho Doue.

Ar c'hentan a oa Gaspar
Hep tam mar,
An eil a oa Baltazar,
Chetu hano an tri Roue,
Melkior, Melkior
An oa an drede.

D'an daoulin ho deuz stouet
Gant resped,
Aour, mir, ezenz deuz roet,
Ha dre-ze ho deuz diskoet
Ho devoa, ho devoa
Ho Doue kavet,

Baltazàr mir a roaz
Gant prez vraz
Da Jezuz ar Messiaz,
Rag Jezuz, Doue eternel,
Evel den, evel den
A glee mervel.

Ar Roue Gaspar a ro
Deut he dro
Kaeran aour a zo 'n he vro,
Ha d'an oll dud ar prezant-se
A diskoe, a diskoe
Oa Jezuz Roue.

Hag a Roue Melkior
Gant enor
Ro ezenz d'hon Redemptor
Ha dre an ezenz a diskoe
A anve, a anve
Jezuz vel Doue.

An tri Roue a ia kuit
Magnifik
Goude rentan ho bizit,
Gant Doue int avertiset
Da chanj hent, da chanj hent
Ha da vont bepred.

'Velse ive kristenien
Pec'herien,
Heuillet oll plen ho lezen,
Chanchet hent, dilest ar pec'het
Mar fell d'ac'h, mar fell d'ac'h
Bean pardonet.

Laromp gant ar Rouane
Trugare
D'hon Zalver ha d'hon Doue,
Ofromp d'ean hon c'halono
D'hen karet, d'hen karet
Beteg ar maro.

XII. — EVIT ENORI HANO JEZUZ

Ka-nomp oll eur c'hantik a joa D'hon Zalver Krou-
er ar bed ma, Na zo ne-tra ken du-di-uz E-vel
an ha-no a Je-zuz.

Reit d'in eta, Zalver ar bed,
Spered an ele biniget,
Ha hirie me veulo joauz
An hano zantel a Jezuz.

D'an noz pa ven et d'am gwele
Jezuz a gomz ouz ma ine,
Ha d'am izili oll skuizet
A ro eun nerz neve bepred.

Pa difunan deuz ar mintin
A ro d'in he venoz divin
Ha kentan gir a lavaran
Eo hano Jezuz a garan

Da c'houlou-de dal ma zavan
A greiz ma c'halon hen pedan
Da lakat ma ine nerzuz
Evit meuli hano Jezuz.

Da zerr-noz hen pedan ive
Gant eurfe grenv, gant karante;
Er c'houstet ma c'halon joauz
A gomz ouz he Zalver Jezuz.

Pa ven bec'hiet gant ma foanio
Ec'h an da glask ma gwir otro,
Ha kenkent ma meuz he gavet
Ma glac'har a zo achuet.

An nep a deu a greiz kalon,
Da jerviji he vestr gwirion
Hen karo betek ar maro.
Hag en he doujanz a vevo.

Hag an nep a neuz hen kavet
A dra-zur n'hen dilezo ket,
Dre-oll a heuillo anean
Ha na skuizo kamed gant-han.

Renonz a rei d'an treo krouet
Evit hen meuli, hen karet,
Ha gant eur joa garantezuz
Ec'h embanno hano Jezuz.

Pebez vad a ra d'am ine
Hano zakr Jezuz, ma Doue,
Hep-han me gav pep tra c'hoero
Hag an amzêr hir ha garo.

Pa zioueran he sklerijen
A gouean en devalijen
Ha ma hent, ziouaz, a gollan
Pe na ven ket renet gant-han.

Neubet a dousder a gavan
Er c'homjo pere a glevan
Mar na ve ket gant-he mesket
Hano Jezuz, Zalver ar bed.

Dousoc'h meurbed eo d'am geno
Hano Jezuz, ma gwir otro,
Evit na n'eo ar mel puran
A c'helfer tanva er bed-man.


C'houi a zo mad, o ma Jezuz,
Vit an nep ho klask aketuz
C'houi a rent evuruz meurbed
An ine a neuz ho kavet.

En em gonsolet pec'herien,
Pere a ra gwir binijen
Prest eo Jezuz ho pastor mad
D'ho reseo pa effet d'hen kad.

Pebez heur-vad a vo d'in-me
Mont entre daouarn ma Doue
En eur laret a greiz kalon
Hano Jezuz ma gwir vignon.

XIII. — EN ENOR D'AR BASION

Diskan.



M'ho tru-ga-re-ka, ma Je-zuz } Oc'h euz
Deuz ar ma-ro kri ha poa-niuz }



dre ga-ran-te zou-fret E-vit ma ve-fomp oll



zal-vet.

Ele an env deut d'an douar
Diskennet war vene Kalvar
Da ober kanvo d'hon Zalver
Pe na gar ar bed hen ober.

Pa gonzideran he boanio
Pa jonjan en he dourmancho
Pa ia ma spered d'ar c'halvar
A rann ma c'halon gant glac'har

Zellet, pec'herien, ouz ho Tad
Zellet he vizaj leun a oad
Eur gurunen spern war he ben
He galon trist gant an anken.

Zellet maro he daoulagad
Zellet he daou dorn, he daou droad
Grouiet treuz-tre gant an tacho
A sko en-he ho pec'hejo.

Zellet c'hoaz he goste toullet
He gorf gant ar foeto blonset,
Ho kalon a zo didrue
Mar n'eo touchet dre ar well-ze.

An douar hag ar meneio
Zo esklamet deuz he boanio
Ar stered, an heol hag al loar
Zo 'n em vouchet gant ar glac'har.

Ha te pec'her kri kaledet
Na rez van na zebtant ebet

Vit gwelet maro da Roue
Da Dad, da Zalver, da Doue.

Gwaz out evit ar Judevien
Ha gwasoc'h vit he vourevien
Rag darn diont-he a ouelaz
Gant true out-han pa varvaz.

Ar re-ze n'he anveent ket
Jonjal a rent oa fals-profet,
Med te pec'her, te oar piou e
Te oar ec'h eo gwir Vab Doue.

Kement gwej oc'h kouett er pec'het
Ouz ar groaz oc'h euz hen staget
Hag e tigoret gant esklam
He c'houllo a neve-flam.

Mar oc'h euz out-han nep true
Dilezet prim ho kwall-vue,
Mar guitaet ho techo fall
He boan a baouezo raktal.

Gret ive ho kovizion
Gant glac'har ha kontrision,
Mar c'heuz gret gaou, restituet,
Mar c'heuz droug ouz den, pardonet.

Mar c'heuz c'hoant d'ober pinijen
Iunet, pedet, reit aluzen,
Neuze a gonzolfet Jezuz
En kreiz he boanio truezuz.

Ha c'houi, ma Jezuz, ma Doue,
Pa guitai ma c'horf ma ine
Ma resevet, me ho supli
En mesk an ele d'ho meuli.

Ar Basion.

War an ton a zo aman, pe war don : *Au sang qu'un Dieu
va répandre.*

Diskan.

A- do- romp oll war ar c'hal- var Je- zuz-Krist gwir
A varv er groaz vit ar pe- c'her vit zan- te- lat

Vab Dou- e, } Par- do- net d'imp, o ma Je- zuz, par-
hon i- ne, }

do- net hon fe- c'he- jo, Ni zo 'n ho ken- ver tud in-
grat hag a zo kaoz d'ho ma- ro.

Jonjet, kristenien, er poanio a zoufr hon Zalver Jezuz,
Evit ho pec'hejo a zoufr eur maro kri hag euzuz,
Dre anoudegez-vad eta, bevet, marvet evit-han,
Rag hen, ho mestr hag ho krouer, neuz ho karet da gentan.

D'ar jardin Olivet eo et goude ar goan diweañ,
Eno a lar d'he ebestel beillal ha pidi gant-han,
Hen he-unan a bed Doue en eur c'houezan dour ha goad ;
« Ra vezo gret ho polonte, ha nan ma hini, ma Zad. »

Goude teu an traitour Judaz gant eur vanden zoudarded,
Dre eur pok hen ro d'anveout d'he enebourien touet.
« Piou a glesket ? eme Jezuz. — Jezuz deuz a Nazaret.
« — Me eo, eme-han. » Ha raktal gant kerden eo ereet.

He gas a reont da Annaz, beleg braz Jeruzalem,
Skoet, goapeet eo gant-he, med Jezuz a zoufr hep klem ;

Kaset eo c'hoaz da Gaïfaz evit bean kondaonet,
Fals-testo a gomz 'n he eneb, med hen na lar gir ebet.

Neuze a zav ar beleg braz zouezet a gement-se,
« — Me ho ped da disklerian d'imp ha c'houi zo gwir Vab Doue. »
« — Ia, me eo, eme hon Zalver ; eun de welfet Mab an den
Azeet en tu dew d'he Dad war goabr an env o tiskan. »

Kaïfaz pa glev ar gomz-ze a neuz roget he dillad ;
« — Na mep ken ezom a desto, he glevet a peuz erfad,
Dirag-omp oll eneb Doue a neuz laret gwall gomjo, »
Hag hi oll da laret raktal : « Meritout ra ar maro. »

Pad ma zoufr a beurz ar re-ze, Per zo o toman ermez
Hag a nac'h ter gwej he vestr mad, kemeret neuz aon ha mez ;
Med Jezuz gant eur zell hepken, gant eur zell a gwir vignon
A neuz laket Per da ouelan, touchet a neuz he galon.

Pa oe skler an de oe kaset da gad gouarner ar vro
Rag ar beleg braz n'elle ket he gondaoni d'ar maro.
Pilat a c'houlaz digant-he petra damalent d'ean ;
« — He-man a ro kentelio fall dre-oll da dud ar vro-man. »

Neuze Pilat a azeaz war he gador a varner
Hag en em lakaz dirak-he d'interroji hon Zalver ;
« — Gwir eo, vel ma lar ar re-man, oc'h roue ar Judevien ? »
« — Gwir mad eo ze, roue ec'h on, med n'eo ket er bed vel den. »

Pilat a lar d'ar Judevien n'all ket kondaon an den-ze.
Neuze hen c'hasont d'Herodez, gouarner ar Galile ;
He-man hag he dud na reont nemet goapat anean,
Ha Jezuz na respont netra da bez a c'houl digant-han.

Kaset eo c'hoaz da gad Pilat, ha he-man a c'houlennaz
« — Pini anhe a vo losket, pe Jezuz pe Barabbaz ? »
Ar bobl konnaret a respont : « Losket da vont Barabbaz,
Ha Jezuz, mar zentet ouz-imp, a vo staget ouz ar groaz. »

Jezuz zo neuze diwisket dre urz ar barner Pilat,
Deuz he ben d'he dreid skourjeet, kignet oll beteg ar goad,
Goude gant eur gurunen sperr he ben zakr zo kurunet,
Mouchet gant ar vourevien gri, pouillet, skoet, goapeet.

Zellet-han breman pec'herien, henez a eo an Doue
Ho kar, hag a ro evid-oc'h he vue dre garante,

Hen goud a ret, n'eo ket d'ean, d'ac'h oa gleet an tolio ;
Ar goad a welet o redek a skuill vit ho pec'hejo.

Jezuz 'n eur stad ken truezuz zo diskoet d'ar Judevien ;
« — Zellet, eme Pilat, zellet, rag chetu aman an den. »
Hag ar bobl da grial gwasoc'h : « Ra vo staget ouz ar groaz,
Ra goueo he oad war-n-omp oll ha war hon bugale c'hoaz. »

Douget krenn eo ta ar setanz, war ar groaz renko mervel,
War vene kalvar gant he zam Jezuz a renko zével
Na vo ket reit d'ean zoken amzer evit diskuizan,
Raktal ma goue dindan he groaz e man an tol war-n-ean.

O welet Jezuz ken dinerz a gemer ar vourevien
D'hen zikour da dougen he groaz Simon ar Sireneen,
Ho c'hasoni a oa ken braz ken dija oa mall gant-he
Kad ar blijadur d'he welet stag er groaz war ar mene.

O welet Jezuz goloet a oad, a boultr, a c'houezen,
Eur vaouez kalonek a deu, ha gant-bi eul lien gwen,
Hep aon a dosta ouz Jezuz, hep aon rag ar zoudarded,
Ha gant-han a dorch he vizaj d'hon mestr zakr ha biniget.

Na c'houi ve ken kalonek all, c'houi kristenien aonik
A gren dirag ar waperien, ha rag eur gomz a dao mik !
Kemeret skouer war ar plac'h-man, ha bezet tud a galon
Tud hag a oar en peb amzer difen ho relijion.

War hent ar c'halvar eur foul vraz a deue warlerc'h Jezuz,
Hag en ho zouez a oa groage hag a ouele truezuz ;
« — Gouelet, eme Jezuz, gouelet war-n-oc'h, war ho pugale,
Mar grer evel-hen d'ar c'hoat glaz, d'ar c'hoat zec'h vo waz eun de. »

Me a well klanv al loened mud hag a ve true out-he,
Med ouz Jezuz Zalver ar bed neubet zo a neuz true,
Gwall hast a zo d'hen diwiskan ha d'hen stagan ouz ar groaz,
Ha da skei a dolio morzol 'n he izili tacho braz.

Jezuz ken dous evel eun oan a zent ouz he vourevien,
Ha deuz he c'heno na deu ket an disteran klemmaden ;
C'hoaz a lar pa ve goapeet gant an dud pa dremenont :
« — Pardon, ma Zad, pardonet d'he, n'ouzont ket petra reont. »

Neuze rog mervel d'al laer dew a bromet ar baradoz ;
« Bet fianz, eme-z-han, d'an env gan-in ec'h effet fenoz. »

Eur gomz all a lar da Zant Ian, eun all da Vari he Vam ;
« Ma mam, chetu aze ho mab. — Ma mab, honez vo ho mam. »

Vit koach eun torfed ken euzuz a deuz tewalijen,
An heol enpad ter heur amzer a bakaz he sklerijen,
Ha neuze gant eur voez nerzuz a oe klevet hon Zalver
O laret he gomz diwean : « Na meuz ken netra d'ober. »

Ma plijo breman gant Jezuz rei d'imp ar c'hras diwean
Ar c'hras da vevan, da vervel dre garante evit-han ;
Ha de ar rezurreksion da zevel kaer deuz ar be
Evit mont d'he veuli d'an env enpad an eternite.

F. G.

XIV. — EN ENOR D'AR GROAZ

Diskan.

E-nor da groaz hon Zal-ver, ba-niel ar gwir gristen,)
E-nor i-ve da Je-zuz hon maestr da oll vi-ken.)

Ka-romp ar groaz vi-ni-get dalc'h-mad hed hon
bu-e, Grempe bre-zel d'an drouk-spe-red heuillomp
le-zen Dou-e.

Gwej-all-goz ar baianed a grene pa gaveint
Eur groaz benag war ho hent, diwar-n-hi a droeint,
Heuz a rae d'he he gwelet, rag out-hi a vije
Staget laeron da vervel ha muntreien ive.

Med aboe m'e bet Jezuz krusifiet war-n-hi
Aboe ma eo bet ruet gant goad ar pemp gouli,
War ar bed kristen a bar kaeroc'h evit an heol
Ha de ar varn a vo c'hoaz kaeroc'h dirag an oll.

Kement a gar hon Zalver a gar he groaz ive
Med biskoaz n'eo bet karet gant an diaoul hag he re
Dal m'ho lezer en ho roll na weler a bep tu
Nemet kroajo bruzunet pe tolet el ludu.

Jezuz evit eun amzer na ra van na zeblant
He vrec'h a boezo poner da skei pa nevo c'hoant,
Hag eun de a dibabo he re deuz re Satan
Darn vit an evurusted, darn-all evit an tan.

Enpad ma vo enoret gant an oll kroaz Doue
Bet dinec'h gant ho labour ha gant ho pugale,
Mar koue e vrallo ar vro hag e kreno pep ti,
Netra na bad er bed-man mar na ve harp out-hi.

Laket ar groaz war an tour huelan ma c'helfet
Da diskoe ec'h eo ho pro da Jezuz goneet,
Laket-hi er c'hroaz-hencho, ha laret 'n eur dremen
War ho taoulin mar gallet da Jezuz ho peden.

Staget ar groaz en ho ti, hag en hoc'h ankenio
Elec'h damant ha pec'hi, jonjet en oll boanio
A c'houzanvaz hon Zalver pa oa en pign out-hi
Poaniet pad ter heur amzer, hep kleme eneb hini.

Gret zin ar groaz war ho tal, ma vo dous ho spered,
War ho keno d'en prennan d'ar c'homjo difennet,
War ho kalon d'he zomman gant karante Doue
War ho tiouksoa d'ho c'hrenvat dindan bec'h ar vue.

Na groget ket 'n eur benvek, ha n'et ket da brejan
Hep ober dirag ho tud zin ar groaz da gentan,
D'an noz o vont da gousket, o tifun d'ar beure
Zaludet Jezuz ha gret zin ar groaz adare.

Pa vet tentet d'ober drouk gret bepred zin ar groaz
Ha gant trubuilho ar bed pa vefet poaniet braz,
Gant Jezuz dre zin ar groaz a vefet diboaniet
Dreiz-hi gresko ho fianz, ho nerz, ho choauzted.

Mar enoret kroaz Jezuz en keit ha ma vevet
War ho pe pa vet maro eur groaz a vo zavet,
Endro d'ar groaz-ze bep sul ho tud a daoulino
Ha Jezuz d'ar baradoz hep dale ho tougo.

XV. — VIT ZUL FASK



Kle-vet, bu-ga-le, me ho ped, } A zo hi-rie re-
Je-zuz hon Zal-ver bi-ni-get }

Diskan.



su-si-tet, Meu-lomp Dou-e. Je-zuz zo za-vet deuz



ar be, meu-lomp Dou-e.

Ar zul a beure beure-mad
Ar groage zantel oa war droad
Vit kas d'ar be louzou c'houez-vad.
Meulomp Doue.

Eun El tal ar be azeet
A laraz neuze d'ar merc'hed
Jezuz ahan a zo zavet.
Meulomp Doue.

Madelen a gas ar c'helo
D'an ebestel a oa war-dro
Daou anhe a deuz eno.
Meulomp Doue.

Zant Ian da gentan nec'het braz
D'ar be arog Per a redaz,
Ha kichen ar be a chomaz
Meulomp Doue.

Ho daou a c'hoantejont gwelet
Petra oa er be digoueet,
'Med lienaj n'ho deuz kavet.
Meulomp Doue.

D'an diskibien oa unanet
Jezuz a zo 'n em ziskoeet
Ar peuc'h d'he oll a neuz roet.
Meulomp Doue.

Hag an ebestel oll nec'het
Raktal m'ho deuz ho mestr gwelet
A jonje weleint eur spered.
Meulomp Doue.

Med Jezuz a neuz laret d'he :
« Perag a jonjet kement-se?
Ha n'eo ket ho mestr ec'h on me? »
Meulomp Doue.

« Ma daouarn, ma zreid, zellet-he
Eur spered kamed na neve
Kig hag eskeru vel a meuz me. »
Meulomp Doue.

Med Thomaz pa neuz bet klevet
A oa Jezuz resuscitet
Neuz ket ar burzud-se kredet.
Meulomp Doue.

Zell, Thomaz, zell ouz ma c'hoste
Ouz ma zreid, ma daouarn ive

Ha na vez ket pelloc'h dife.
Meulomp Doue.

Thomaz o welet kement-se
A respont da Jezuz neuze :
« C'houi eo ma Otro, ma Doue. »
Meulomp Doue.

Evruz an nep neuz ket gwelet
Hag a neuz an dra-man kredet,
En envo a vo kurunet.
Meulomp Doue.

F. G.

Ar regina coeli.

En em gon-zo-let e-vit mad Rou-a-nez deuz an en-vo
Zec'het dae-ro ho taoulagad Hag ankoet ho poa-nio

Che-tu re-su-si-tet ho mab Leun a c'hloar a dri-on-fo.

DISKAN

Alleluia, o pebez joa
D'ac'h-hu, mam a garante,
D'imp-ni ive, alleluia,
Pebez laouenedigez
He welet goude hon prenan
Adare leun a vue.

Gwerc'hez Vari bezet joauz
Rag breman oc'h diboaniet

Resusitet eo Jezuz
Evel ma nevoa laret.
Dirag-han, mam drugarezuz
Ni ho ped, hon difennet.

Ma Doue o resusita
Ho Mab Jezuz hon otro
Oc'h euz karget ar bed a joa
Gret d'imp dre he verito
Ila re an Itron Varia
Mont oll da c'hloar an envo.

XVI. — VIT GOUEL AN ASANSION

Diskan.

Me hoc'h a- dor ma Je- zuz, ma Zal-ver ma Rou-e,
A- ze- et barz an en- vo en tu dew da Zou-e }
Gret oc'h euz d'imp eun tron kaer a- ze en ho ki-
chen, Gret ma c'he-fomp oll gan- ac'h d'ho meu- li
da vi- ken.

Daou ugent de a chomaz Jezuz war an douar
Da gelen he Ebestel arok pignal d'ar gloar;
De Iaoù an Asansion pa oaint endro d'ean
A laraz rok ho c'huitat he gomzo divean.

Laret neuz d'he mont dre-oll da brezek he lezen
Evit rei ar vadeiant hag an env da bep den;
War ar mene Olivet a ro d'he he venoz.
Hag ahane dirak-he a zav d'ar baradoz.

Ha daou El gwisket en gwen neuze a diskennaz
D'an ebestel glac'haret raktal a lavaraz :
« Vel ma c'heuz gwelet Jezuz o pignal d'an envo
Da fin ar bed de ar varn ahane diskenno. »

An oll ineo a oa dalc'het barz al limbo
Prenet gant Jezuz a bign war he lerc'h d'an envo,

Eno a veulont Doue hed an eternite.
Goulomp gant Jezuz ar c'hras da vont di evel-t-he.

Beteg neuze vit an oll an envo oa zerret
Hag aboe pec'het Adam an orejo prennet,
Digoret int evid-omp goude maro Jezuz
He boanio a lak anomp da vean evuruz.

Ha breman pa man Jezuz war he dron en envo
A skuill ahane war-n-omp he venoz he c'hraso,
C'hoant braz a neuz d'hon gwelet en env en he gichen
Gret a neuz d'imp pep a dron d'hon lakat da viken.

War an douar an tado a gar ho bugale
Hag a blij d'he ho gwelet en ho c'hichen bemde ;
Evelse ive Jezuz, vel eun tad ar gwellan,
A neuz c'hoant a iafemp oll d'ar baradoz gant-han.

Jezuz hon Zalver a zo roue ar rouane
Ha gant-han bew ha maro a vo barnet eun de,
Hen a zo hon avokad, hen a vo hon difen.
Hen eo hon mestr hag hon zad, d'hon ren ha d'hon c'helen.

Galvet omp da vont d'an env, kristenien, gant Jezuz,
Da gad evit poanio berr evurusted paduz ;
Deuz treo ar bed 'ta dalc'homp distag hon c'halono
Evit jonjal aliez barz an env hon gwir vro.

F. G.

XVII. — VIT ZUL AR PANTEKOST

Ton : *Spered-Zantel, spered a sklerijen.*

DISKAN

Deut, ni ho ped, hirie Spered-Zantel,
Deut da nerzan kalon an dud fidel,
D'ho pugale reit ho tonezono,
A garante tommet ho c'halono,

An dekved de goude ma oa pignet
D'ar baradoz hon Zalver biniget,
An ebestel d'ar beure a glevaz
Ar Spered-glan o tont gant eun drouz vraz.

Hag a weljont kenkent vel teodo tan
A diskenne ust da ben peb-unan,
Hag a diskjont gant ar Spered-Zantel
Skient neve ha iezo dizhanvel.

Ha pa deuz bet donezono neve
Ec'h int et oll da brezek ar gwir fe
Dre ar bed-oll, dirag an oll boblo,
Da gas ar peuc'h dre-oll d'an ineo.

Trec'h d'ar bed-oll dre an nerz ho deuz bet
War-lerc'h Jezuz ho deuz bepred kerzet,
Hag evel-t-han evit difen ar fe
Evuruz braz ho deuz reit ho bue.

D'imp-ni ive roet, Spered-Zantel,
Ar sklerijen evel d'an ebestel,
Ar garante, an nerz hag ar furnez
Evit kerzet war hent ar zantelez.

Ni vo nerzuz gant ho seiz donezon
Mar ho miromp bepred en hon c'halon,
Gant-he ive ni a drec'ho bepred
Ardo Satan ha tromplerez ar bed.

Ha mar ve ret eun de rei hon bue
Evit anzao ha difen ar gwir fe,
Ia ! ni zo prest, kentoc'h vit nac'h Jezuz
Da zoufr hep klem an oll boanio mezuz.

Spered-Zantel en-hoc'h man ma fianz
Gret ma vevin bepred en ho toujanz ;
Ha mar heuillan hoc'h oll gourc'hemeno
E vin gan-ac'h kurunet en envo.

F. G.

XVIII. — VIT GOUEL AR ZAKRAMANT

A- do- romp oll en hos- ti ku- zet Je- zuz Dou- e
 Eur wej e- vid-omp eo bet ga- net, War an o- ter
 a ga- ran- te, } Pe- gen braz eo galloud ar be- leg
 e teu bem- de, }

La- ret a ra eur gomz hep-ken Hag e tis-ken an
 oll- c'hal-lou-dek, Dou- e a zent ouz mouez an den.

DISKAN

Gloar d'an Tad eternel, hon c'hrouer
 Ha krouer kement a zo mad,
 Gloar ive da Jezuz, hon Zalver
 En deuz hon prenet gant he oad.
 Gloar d'ar Spered a ro d'an ine
 An nerz da gerzet 'n he lezen.
 D'an tri ferson er memez Doue
 Gloar ha meulodi da viken.

Er mister-man, Tad madelezuz
 En em roet d'ho pugale ;
 Ho korf zantel, ho koad presiuz
 Zo magadurez an ine.
 Med evit ma vezimp preparet
 D'ho tigemer en hon c'halon
 Digaset war-n-omp oll ho spered
 Ho kras, ho penediksiou.


O banket zakr, en-hoc'h en em ro
 D'imp-ni oll hon Zalver Jezuz,
 C'houi digas jonj d'imp deuz he varo
 Ha deuz he basion poaniuz.
 Hon ine dreiz-oc'h a ve karget
 A c'hras hag a donezono,
 Ha dreiz-oc'h d'imp-ni a ve roet
 Arrez an envo hon gwir vro.

Bezomp joauz, zec'homp hon daero,
 En draouien-man leun a c'hlac'har,
 Dont a ra Jezuz-Krist, hon Otro,
 D'hon bizitan war an douar.
 Hirie a deurve dont da vale
 Dindan ar gwe hag an deillo,
 Kuzet en hosti evel bemde
 A glev gant joa hon c'hantiko.

Hon douaro a zo bizitet
 Hirie gant Jezuz, hon Zalver,
 Unanomp eta gant joazted
 Hon mouez-ni gant mouez ar c'hleier
 Da ganen meulodi da Jezuz
 War an douar hag en envo
 Ofromp c'hoaz d'hon mestr karantezuz
 Evel prezant, hon c'halono.

XIX. — VIT GOUEL AN OLL-ZENT

G. Pe- n'oc'h et d'ar ba-ra-doz, Oll zent la- ret d'imp-
 Gou- de ar boan en ho poz Pe- tra gaer a peuz



A memp a- man ka-vet.

- G. Gan-ac'h memp c'hoant da glevet
Pegen kaer eo Doue,
'Vel-d-oc'h memp c'hoant d'ben gwelet
Er baradoz eun de.
- R. Biskoaz netra ken kaer all
Lagad den neuz gwelet,
Biskoaz netra a hanval
Skoarn den na deuz klevet.
- G. Mar n'ellet ket rei da c'houd
Petra eo ho choaio
Petra eo deut da dalvoud
Kement a vertuio ?
- R. Aman na zo ken nep poan
Ec'h omp kichen Doue,
Ni hen ador dre hon c'han
Hag hen meul noz ha de.
- G. C'houi, merzerien, a zo bet
Trec'h d'an oll vourevien,
Goude ho maro kalet
Petra peuz 'n ho loden ?
- R. Hon c'hurunen a dougomp,
'N hon dorn man al lore

Ha breman ec'h azeomp
Kichen tron hon Doue.

- G. Ha c'houi, doktored zantel,
War an douar brudet,
Roet d'imp c'hoaz ho kentel
War hoc'h evurusted.
- R. Pell a man pez a laremp
Gwej-all war an douar
Warlerc'h ad treo kaer a memp
Aman ebarz ar gloar.
- G. Ermited fur ha dister
Ha tud a binijen
Laret d'imp pebez freuz kaer
Zo reit d'ac'h da viken.
- R. Goude hon reuz, hon foanio
Hag hon bue galet
Gant an oll blijadurio
Hon c'halon zo karget.
- G. Gwerc'hezad et maez ar bed
Priejo da Jezuz,
Goude ho pue guzet
Ha c'houi zo evuruz ?
- R. Ni zo aman en envo
An tostan da Zoue
Dre ma oa hon c'halono
D'ean hed hon bue.
- G. C'houi, pevien gez distolet
Gant ar pinvik avar .
Ho naon a zo torret
Evel hini Lazar ?
- R. Ouz tol Doue azeet
Na c'houlomp netra ken ;
Med an avar zo tolet
En ifern da viken.

- G. Pec'herien a neuz gouelet
Kement ho pec'hejo,
Laret d'imp-ni ha zec'het
Eo breman ho taero ?
- R. Zec'het eo hon daoulagad
Na mamp ken a c'hlac'har.
Hon daero a zo da-vad
Eur gurunen a c'hloar.
- G. C'houi pere gant ho mado
A neuz gret aluzen,
Tud pinvik, barz an envo
Pinvik oc'h da viken ?
- R. Evit mado mamp roet
War an douar d'ar paour,
Eur gurunen a mamp bet
Gwell vit arhant nag aour.
- G. Pegeit eta a bado
An evurusted-ze ?
Laret d'imp hag hen a vo
Hirroc'h vit ho pue.
- R. Doue a neuz berraet
Ankenio hon bue
A rei pad hon evrusted
Hed an eternite.
- G. Oll zent laret d'imp breman
'N hon zraouien a daero
Pini eo an hent gwellan
Evit mont d'an envo ?
- R. Ret eo d'an den heuill erfad
Gourc'hemenno Doue
Ha deuz ar pec'het dalc'hmad
Eo ret pellat ive.
- En jervij Doue biken
N'ellomp re labourat ;

Poaniomp eta, kristenien,
Hob foan vo paeet mad.
Gwelet ha karet Doue
Hed an eternite,
He veuli gant an ele
Chetu ho pae aze.

F. G.

XX. — VIT PASK AR VUGALE

Jezuz hag ar vugale.

Ton : *Me gred ferm hep doutanz ebet.*

- JEZUZ. Me am euz hirie preparet
Eur banked zakr ha biniget,
Hirie me rei d'am bugale
Ma c'horf, ma goad ha ma ine.
- AR VUGALE. En hon c'henver, o ma Jezuz,
C'houi zo meurbed karantezuz
Preparet hoc'h euz eur banked
Ar c'haeran a gaver er bed.
- JEZUZ. Me am euz gret, ma bugale,
Evid-oc'h oll dre garante
Ar Zakramant euz an Oter
D'en em rei d'ac'h en peb amzer.
- AR VUGALE. En gwirione, o ma Jezuz,
C'houi zo eun tad madelezuz
C'houi 'n em ro d'imp dre vadelez
Vit bean hon magadurez.
- JEZUZ. Na oa ket krouet ar bed-man
Ma c'hortozen an devez-man,
Diskennet ec'h on deuz an ee
Evit antren en hoc'h ine.

- AR VUGALE. Piou a oufe hep he garet
Klevet Jezuz o lavaret
A neuz kuitat ar baradoz
Vit dont 'n hon c'halon da repoz.
- JEZUZ. Me a oa aboe pell amzer
Ouz ho kortoz war an Oter,
Med hirie ec'h on konsolet
Pa welan teuet d'an c'havet.
- AR VUGALE. Med ni, ziouaz, na gredomp ket
Tostat ouz-oc'h, Zalver ar bed,
Na n'omp met krouadurien gez
Skanv ha leun a zempladurez.
- JEZUZ. Mar oc'h euz eur pec'het marvel,
Pellaet diouz an dol zantel,
Et da resev an absolven,
Chetu aman ho peleien.
- AR VUGALE. D'hon c'hovezour mEMP diskleriet
An oll bec'hejo a mamp gret,
Evit-he mEMP bet pinijen,
Induljanz, pardon, absolven.
- JEZUZ. Deut prim eta, deut, bugale,
Tostat ouz-in gant karante
Ma gemerin evid-on me
Ho kalon, ho korf, hoc'h ine.
- AR VUGALE. O Jezuz, na veritomp ket
Bean gan-ac'h kement karet
Penez ellet-hu hon gervel
Da vont oll d'ho panked zantel?
- JEZUZ. C'houi, bugale, c'houi a glaskan
Hag a greiz-kalon ho karan
C'houi na peuz ket c'hoaz resevet
Ar pez am euz d'ac'h preparet.
- AR VUGALE. An enor-ze, o ma Jezuz,
A zo re vraz, re bresiuZ,

- Med pa fell d'ac'h, Zalver ar bed,
Ni ho resevo gant respet.
- JEZUZ. Bugale, kent komunian
Goulennet pardon da gentan
Ouz ar re hoc'h euz ofanset
Ha na peuz ket aoalc'h karet.
- AR VUGALE. Ouz-oc'h, ma Jezuz, e komzomp,
Pardon, pardon e c'houlennomp
Deuz a gement hon deuz klevet
Gret ha jonjet pe lavaret.
- JEZUZ. Dre ar garante m'euz ouz-oc'h
Na refuzin ket ahanoc'h,
Gret breman a greiz ho kalon
Gret eun akt a gontrision.
- AR VUGALE. Ni oll zo meurbed glac'haret
Da vean kement ofanset
Eun Doue ken mad 'n hon c'henver
Hag a neuz hon frenet ken ker.
- JEZUZ. A greiz ma c'halon me ho kar,
Ha pa c'h euz kement a c'hlac'har
Me bardon d'ac'h, bugaligo,
Me bardon d'ac'h ho pec'hejo.
- AR VUGALE. Ni a c'houl ive a galon
Ouz hon zad hag hon mam pardon,
Ni bardon da gement hini
A zo bet kaoz d'imp da bec'hi.
- JEZUZ. Nep zo deut d'en em ofansi
A zo ret d'he c'hoaz pardoni
Hag ober zatisfaksion
An eil d'egile a galon.
- AR VUGALE. Ia, mar mEMP bet 'n em ofanset
An eil egile gwej ebet
A wir galon a bardonomp
An eil egile ahanomp.

- JEZUZ. Breman eta ma bugale
A veritet ma c'harante,
Chetu preparet ho kalon
Da reseo ar gomunion.
- AR VUGALE. Ma Jezuz na veritomp ket
An enor d'ho tigemeret
Med gant eur gomz o ma Doue
C'houi a beurwalc'ho hon ine.
- JEZUZ. Zentet ouz-in, hastet timat
Deut d'am c'haout pa-z-on ho tad
Ma kemerin d'ober ma zron
Hag hoc'h ine hag ho kalon.
- AR VUGALE. Mont a remp eta, hon Zalver,
Pa laret d'imp-ni hen ober
Mont a remp d'ar gomunion
Vit ho resev en hon c'halon.
- JEZUZ. Zouden a vet zantiflet
Hag a bep sort graso karget
Zouden c'houi a vo mignoned
D'an tri ferson deuz an Dreinded.
- AR VUGALE. O ma Jezuz, dre ho komjo
A eo tommet hon c'halono,
Penez galloud trugarekat
Eun tad ken dous, eun tad ken mad.
Gwerc'hez Vari, mam druezuz,
Ofret hon c'halon da Jezuz
Ni zo vont da gomunian
Plijet gan-ac'h hon asistan.
Ele an env deut d'an douar
Da rentan meulodi ha gloar
Da Jezuz hon Zad, hon Zalver,
En iliz-man war an oter.
Patron hon farouz, zant Ervoan,
Deut c'houi ive d'hon asistan

Digant Jezuz d'imp goulennet
Ar c'hras da vean fur bepred.

Zent ha zentezed deuz an ee
Pa z-oc'h mignoned da Zoue
Hirie asistet ahanomp
Ha pedet Doue evid-omp.

Ni vo zentuz ha dous bepred,
Evit an oll leun a respet
Biken divergont na vefomp
En kenver kosoc'h evid-omp.

C'houi, kristenien, dre garante
Evid-omp-ni pedet Doue,
Ha goude, pa vefet maro
Evid-oc'h zur ni a bedo.

XXI. — VIT AR GONFIRMASION

Donezono ar Spered-Zantel.

Ton : *Breudeur ni glev ho klemmo.*

De ma c'honfirmasion, de a joa d'am c'halon,
Ar Spered-Zantel a deu gant he seiz donezon
Deuz an envo em ine evit ma c'honfortin,
O de mil gwej evuruz ! biken n'az t'ankoain.

A bep sort fallagriez ar bed a zo karget,
Dre-oll war hent ar vue he becho zo stignet,
Pe na ro d'am daoulagad nemet fals-klerijen,
Roet d'iu, Spered-Zantel, ho furnez d'am c'helen.

Hi a rei d'in anveout gant gwir anoudegez
Petra dal treo an douar vit ma zilvidigez,
Hi a rei d'in labourat vit jerviji Doue
Ha bevan en esperanz da vont d'an env eun de.



Ni a roi-o a- lu- zen e-vit zi-kour ho pro, Ni

a za- vo be- le- ien ha d'ac'h ni ho c'ha- so.

C'houi pere zo kristenien, ha na glevet-hu ket
Eur voez zo leun a anken er pevar c'horn ar bed ;
Chilaouet oll hon feden, hon c'hlemmo truezuz
Chilaouet petra c'houlen ho preudeur maluruz.

Kristenien a Vreiz-Izel ho pet true ouz-omp
Ar joazted eternel, an env a c'houlennomp
Rag ni zo war an douar tud paour hag emzivad,
N'anaveomp, c'houi hen goar, na Jezuz nag he Dad.

Gwejjall pell diouz sklerijen, pell diouz lezen Doue
Er memez tevalijen ho pro a oa ive,
Mil benoz d'an ebestel a neuz ho kelennet,
Gret kement-all tud fidel breman en hon andret.

C'houi breman zo evuruz p'oc'h euz ar sklerijen
Hag eur fe ken zouezuz, — ho pro a zo kristen, —
Hag ar sklerijen gaer-ze n'oufe biken kouean
Mar deuet dre 'r garante en ho touez d'he magan.

Mar neuz Jezuz promettet penoz n'anakoaje ket
Eur werenad dour roet d'ho preur en he zec'hed,
Petra dalvo, kristenien, ar gwennek biniget
Gant pini da virviken ineo vo prenet.

Ah ! Doue da rei kalon, nerz d'ar misioner,
Joa ha konsolasion en he boan ha mizer,
D'ac'h ive benoz Doue, d'ac'h-hu oll kristenien
A ro gant gwir volonté ho gwennek d'hen zouten.

Deut eta, beleg iaouank, kuitat bro, mam ha tad
Daoust d'an daero puill ha stank a skuill ho taoulagad,

Deut zaeo-du Breiz-Izel hast a mEMP d'ho kwelet
O prezeg an Aviel en bro ar baianed.

En fleuren ho iaouankiz kals aman renk mervel,
Med ho ine a c'hone ar vue eternel,
Roujo ho zreid biniget chom merket en hon bro,
Ra deuio c'hoaz Bretoned, kals c'hoaz hanval out-ho.

Tud fidel, a wir galon, o welet ho foanio
Zikouret hon mision, zavet d'imp ilizo
Digaset ar skol gristen d'imp ha d'hon bugale,
Ni bedo evit goulen war-n-oc'h benoz Doue.

Ha c'houi misionerien, ganet en Breiz-Izel
Gant ar maro diskaret en kreiz ar broio pell,
Deuz ar baradoz pedet vit Breuriez ar fe,
Goulennet ma chomo stard en Breiz-Izel ive.

XXIII. KANTIKO EN ENOR D'AR WERC'HEZ

1. — An Angeluz.



Eun ar-c'hel a beurz an O- tro A dis-kennaz

deuz an en- vo D'an-nonz da Va- ri oa choazet

E- vit mam da Zal-ver ar bed.


Mari a respontaz neuze ;
Jervijerez on da Zoue
Bezef gret eta em andret
Ar pez oc'h euz d'in annonset.

Neuze konsevez eur bugel
Dre vertu ar Spered-Zantel,

Hag an eil ferson an Dreinded
En touez an dud a neuz bevet.

Pedet, mam zantel da Zoue
Evid-omp oll he vajeste
Ma vezimp dign' deuz ar graso
A bromet Jezuz. hon otro.

2. — An Ave Maris Stella.



Chi-laou-et ouz hon pe-den- no.

Resevet ar zalud zantel
 A rez d'ac'h an El Gabriel
 Reit ar peuc'h ferm d'imp er bed-ma
 O chanj an hano a Eva.

Torret chaden ar bec'herien
 D'ar re zo dall reit sklerijen,
 Pellat diouimp pep drouk dalc'hmad,
 Ha goulennet d'imp pep sort mad.

Diskoezet ez-oc'h eur vam vad
 En kenver an dud emzivad,
 Gret m'hon chilaouo an hini
 Oc'h euz ganet evid-omp-ni.

Gwerc'hez dispar en pep feson
 Dous, dreist an oll pur a galon
 Deuz hon fec'hejo dizammet
 Gret ma vomp dous ha chast bepred.

Gret ma vezo hon bue pur
 Preparat d'imp eun hent asur,
 Ma vefomp o welet Jezuz
 Eun de gan-ac'h bepred evruz.

Gloar bepred d'an Tad eternel
 D'ar Mab ha d'ar Spered-Zantel
 D'an tri ferson deuz ad Dreinded
 Ar memez enor zo gleet.

3. — Ar Salve Regina.



lud gant kals a re-ve-ranz.

D'ac'h-hu, Gwerc'hez e kasomp hon feden,
 Ni divroed, ha ziouaz, pec'herien,
 Ouz-oc'h Gwerc'hez e kriomp er bed-ma,
 Ni pere zo bugale da Eva.

D'ac'h-hu bepred e tenn hon c'halono,
 D'ac'h e kasomp hon c'hlemmo, hon daero,
 Hon fianz-ni zo en ho madelez
 En draouien-man leun a dristidigez.

Rak-se pa-z-oc'h hon avokadez ker
 En hon c'henver bepred dous ha tener
 Plijet gan-ac'h distrei ho taoulagad
 War-n-omp ni oll, hag ober d'imp pep-mad.

Pa deni an de da guitat ar bed-man
Pa vo achu reuz hon bue aman
Diskoezet d'imp neuze, mam druezuz,
Bizaj ho mab hag hon zalver, Jezuz.

O Gwerc'hez zakr, meurbed karantezuz,
O Gwerc'hez dous, o Mari truezuz,
Ni ho supli, chilaouet hon feden,
Ha na n'et ket d'hon dilezel biken.

Evid-omp oll, mam zantel da Zoue
Plijet gan-ac'h pidi he vajeste,
Vit ma c'helfomp kad an evurusted
A neuz Jezuz d'imp-ni oll goneet.

4. — Konsekrasion pe goestadek d'ar Werc'hez.

Ton : *Ni ho salud stereden vor.*

Jezuz er groaz arog mervel
A roaz d'imp he vam zantel
Vit ma vije hon mam ive
Ha ma vijemp he bugale.

Ho pezet jonj, o mam dener
Deuz komz divean ho Mab ker,
Jonjet ec'h omp ho bugale
Ha c'houi hon mam, dre urz Doue.

Evel eur vam ni ho karo
Ha gant fiauz ni ho pedo
Ha birviken an drouk-spered
Na harzo anomp d'ho karet.

Pell-zo ec'h ouzomp, o Itron
Pegen tener eo ho kalon,
Kalon eur vam d'he bugale
A ve digor en peb mare.

Gant aon e krenomp aliez
Pa welomp hon zeupladurez,
Evit trec'hi hon enebour
Digant piou a momp-ni zikour ?

Diganac'h-c'bu, Gwerc'hez zantel,
Rag c'houi dindan ho tiouaskel
Evel eur vam vad ha tener
Hon diwallo en peb amzer.

Ni ro d'ac'h hirie, mam garet,
Hon c'horf, hon c'halon, hon spered
Pa-z-omp d'ac'h eta a vremen
Na baouezet d'hon asistan.

5. — Peden d'ar Werc'hez.

The image shows three staves of musical notation in a treble clef with a key signature of one flat (B-flat). The notes are represented by black diamonds and squares. Below the staves, the lyrics are written in Breton. The lyrics are: "Gwerc'hez di- war ho tron en ee Gret war-n-hon eur zell a dru-e, Chi-laou- et ouz ma fe- den bre- man, O mam ar gwel-lan O mam ar gwel-lan."

Gret ma karin bepred Jezuz
Ma vin war he lerc'h vertuuz,
Gret ma vin d'ean ha d'ac'h fidel,
O ma mam zantel. (*bis.*)

En heur ar maro me ho ped
Deuz a Satan ma diwallet,
Deut c'houi da zerri ma daoulagad
O mam dous ha mad, (*bis.*)

Gwerc'hez rouanez an envo
Kaset d'ho Mab ma fedenno,
Goulennet evit ho pugale
He oll drugare. (bis.)

Mari esperanz ar pec'her
Hon rekomandet d'hon Zalver,
Goulennet evit ho pugale
He oll drugare. (bis.)

6. — Enpad miz mae.

Ton Zul Fask.

DISKAN { Bemde bemnoz hag en pep ti
Meulomp Mari.

Pegen kaer eo ar c'hantiko
Pegen evruz ar paroujo
Pa lavar an oll galono
Meulomp Mari.

Kristenien deut d'an ilizo
He-man eo miz ar c'hantiko
Klevet a rer en oll broio:
Meulomp Mari.

Plijet gan-ac'h, zent hag ele,
Unani ho mouez gant ho re
Hon c'han a vo kaeroc'h neuze.
Meulomp Mari.

Ni zo da Vari konsakret,
Da Vari ni vezo bepred
Kanomp eta gant joauzted:
Meulomp Mari.

Kals a doug respet da Vari,
Ha kals ho deuz fianz en-hi
Aman an oll a zo d'ezhi.
Meulomp Mari.

Hirie, Rouanez an envo
Plijet digemer hon veuio,
Ni a ro d'ac'h hon c'halono.
Meulomp Mari.

Mari, war an ele renet
An anaon deuz ar boan tennet
Torret oll nerz an drouk-spered.
Meulomp Mari.

Mari repu en peb mare
Mam dous bepred d'ho pugale
C'houi hon c'honduo da Zoue
Meulomp Mari.

Mari, n'ellomp kaout pardon
Na trec'hi an dentasion
Nemed dre ho proteksion
Meulomp Mari.

Hep Mari na ver ket zalvet,
Gant Mari na ver ket kollet,
Mari, ni a vo d'ac'h bepred.
Meulomp Mari.

Chilaouet, Mari, hon feden,
Hed hon bue deut d'hon difen
Deut war hon maro d'hon zouten.
Meulomp Mari.

Mari, pa-z-oc'h ken gallouduz
Bezeta ive trugarezuz,

Hon frezantet d'ho mab Jezuz.
Meulomp Mari.

Gret ma vezo justis Doue
Dous en kenver ho pugale
Gret ma-z-imp da ganen en ee.
Meulomp Mari.

7. — Kantik zant Kazimir roue.



O ma i- ne ka- nomp bem-de Da Va- ri meu-
Hec'h o- be-ro hec'h oll bu- e A zo leun a



lo- di- o. } Gloar da Va- ri ha meu- lo- di, Pe-bez
vur-zu-do. }



bur-zud e- vu- ruz, Ma-ri gwerc'hez ha mam i- ve,



Gwerc'hez ha mam da Je- zuz.

Teod an den a zo gwall dister
Evit komz deuz a Vari,
Med he c'halon a zo tener,
Oll e c'hellomp he meuli.

Diouz Mari an Iliz zantel
A denn gloar ha sklerijen,
Hag he bue celestiel
A zo skouer ar gristenien.

Mari lavar d'he bugale :
Zentet, zentet ouz Jezuz
Karet-han en hoc'h oll bue
Hag ho rento evuruz.

Kalono trist ha glac'haret
Deut da gaout ar Werc'hez
Gant Mari e ver konfortet
En pep sort poan hag enkreuz.

Reit, pec'her, reit a wir galon
Peden, enor da Vari,
Evit kaout gras ha pardon
Laket ho fianz en-hi.

Ine devot, pedet Mari
Hi eo mam an oll c'hraso,
He c'harout hag he jerviji
Eo kemer hent an envo.

O Mari, gwir vam da Jezuz
Gret m'am bezo gras Doue,
Diouz ar pec'het, mam druezuz,
M'ho ped, miret ma ine.

Ma chilaouet, gret ma goulén,
Pareet ma goulío,
Reit d'in en ho kraso loden
Ha peurz en ho vertuío.

Chast a modest, dous a galon,
Humbl ha fidel da Zoue,
Fur em spered, em c'homz gwirion
Ra vezin en peb mare.

Bezef zikour ar gristenien
En ho zouez ar peuc'h dalc'het,
Deuz a bep drouk, a bep anken
Hon c'halono diwallet.

Evid-omp oll pedet Jezuz,
Pedet, mam a drugare,

Finvez ar bed a vo spontuz,
Difennet ho pugale.

Ar re a deu en gwirione
War an douar d'ho pidi
Gret ma c'heint oll gant an ele
D'ar baradoz d'ho meuli.

Da Jezuz ar Mab eternal
En amzer mab da Vari
D'an Tad ha d'ar Spered-Zantel
Gloar, enor ha meulodi.

8. — An hano a Vari.

Ra vo ho ha-no bi-ni-get Gan-imp ha gant an oll
meu-let, Ma-ri, Gan-imp ha gant an oll meu-let.

O Mam dener piou a laro
An dousder a zo 'n ho hano.
Mari.

Hano Jezuz eo ar c'haeran
Hag ho hini eo an dousan,
Mari.

Choazef a viskoaz barz an ee,
Ho hano deu digant Doue,
Mari.

Mari ziniti rouanez,
Itron, stereden ha mestrez,
Mari.

Hag eun hano ken gloriuz
A oa gleet da vam Jezuz,
Mari.

Rag mar eo Jezuz hon roue
C'houi zo hon rouanez ive.
Mari.

Rouanez leun a garante,
A vadelez, a drugare,
Mari.

Jezuz a zo hon mestr kentan,
Ha c'houi a zo mestrez gant-han.
Mari.

Jezuz a zo heol an den
Ha c'houi a zo he stereden,
Mari.

Stereden gaer ha lugernuz
War hon hent terval ha riskuz,
Mari.

Jezuz ho mab eo hon otro
Ha c'houi itron hon c'halono
Mari.

Itron ha n'he deuz ket he far
Nag en env na war an douar,
Mari.

Ho hano dousoc'h vit ar mel
A ra joa an ine fidel,
Mari.

O pegen dous eo d'hon geno,
Dousoc'h eo c'hoaz d'hon c'ha-
Mari. [lono].

Hen a louena an envo
Hag a spont an drouk-sperejo
Mari.

Ha me petra fell d'in klevet
Nemet ho hano biniget
Mari.

Me hen meulo da c'houlou-de,
D'an noz me hen meulo are,
Mari.

Em joaio me a lavaro
Ra vezo meulet ho hano,
Mari.

Em foanio me hen meulo c'hoaz
Evit ma voskanvoc'h ma c'hroaz.
Mari.

Pa zantin an diaoul o tostat
Me laro evit nen pellat
Mari.

Na pa ve' o iudal ouz-in
Gant nerz ho hano hen trec'hin,
Mari.

Pa vin skoet hant ar 'c'hlenved
Digan-ac'h a glaskin iec'hed,
Mari.

Evit konfort war ma maro
Na c'houlan nemet ho hano,
Mari.

Pa vo zerret ma daoulagad
Me jonjo em mam dous ha mad
Mari.

Evuruz mar gallan mervel
'N eur laret ho hano zantel,
Mari.


Neuze me iel gant an ele
D'ho meuli, mam a drugare,
Mari.

9. — Mouez Mari.



Me glev eur vouez te- ner ha klemmuz, Kals dousoc'h
O la- ret d'in-me ken tru- e- zuz : Ha be- an


Diskan.



e- vit mouez eun El. } Mari mam zantel, (O Gwerc'hez
vi- te ma bu- gel? } Mari mam zantel, O Gwerc'hez



fi- del, C'houi a c'houlou-de hon c'haran-te. } Vit mad
fi- del, Vit mad ec'h omp ho pu- ga-le. }



ec'h omp ho pu- ga- le.

En gwirione Satan en konnar
Na ra peuc'h ebed d'az ine
N'euz ket a wir joa war an douar
Ar gwir joa zo ebarz an ee.

Ma c'hrouadur lavar gant fianz
D'am c'halon da oll drubuillo
Me rai ar peuc'h d'id hep douetanz
Me a dousai da oll boanio.

Ar voez ken dous ha ken truezuz
Eo moez Mari d'he bugale,
Ouz hon stad ken trist ha ken poaniuz
Kalon hon mam a neuz true.

Pa welomp pegement a zoursi
A neuz mam Jezuz d'hon zouten
Laromp d'ei ive : Gwerc'hez Vari,
Ni ho karo da virviken.

Pa glevan ho komz karantezuz
Komz eur vam d'an den glac'haret
Hi am laka da vean evruz,
Evit mad ec'h on diboaniet.

10. — Da Vari.

O ma Je-zuz, pe-gen dous e, En-pad an noz,
 en-pad an de, Ar zon-je-zon deuz an i-ne a
 gar Ma-ri mam da Zou-e.

Petra rai d'in an drouk-spered
 Pa-z-on gant Mari diwallet,
 Raktal ma glevo ma feden
 He zroad a vruzuno he ben.

Ar c'hig, ar bed a fell d'ezhe
 A stagfen ma c'halon out-he,
 Ma c'halon-me zo da Vari
 Pell-zo meuz he roet d'ezhi.

War ma maro na grenin tam
 Rag neuze me welo ma mam
 En mesk hec'h ele o tostad
 Da zerri d'in ma daoulagad.

Dre Vari, mam zantel Jezuz
 A momp ar graso presiuz
 Vit bevan enpad hon bue
 'N he doujanz ha 'n he garante.

Rag dre-oll lec'h eo bet pedet
 Ar Werc'hez Vari neuz roet
 He zikour d'ar bec'herien gez
 Vit ober ho zilvidigez.

Karet ar Werc'hez ma itron
 Ha neuze zantfet eveld-on
 Pegen evruz eo an ine
 A gar Mari mam da Zoue.

11. — Mari eo ma c'harante.

M'ho kar, Gwerc'hez, hag a de-zir ho ka-ret E-
 vel ma rae ma Zal-ver er bed-man, M'ho kar Gwer-

c'hez e-barz ma c'ha-lon be-pred, Gou-de Je-zuz
 Diskan.
 d'ac'h vo ar plas ken-tan. Ma-ri ma i-tron, Ma
 c'haran-te, Re-net em c'halon hag en noz hag
 en de.

M'ho kar, Gwerc'hez, rag me well war ar c'halvar
 Ar groaz oc'h euz glebiet gant ho taero
 O laret d'in : Ar Werc'hez ive da gar
 Pa ro he mab evit da bec'hejo.

M'ho kar, Gwerc'hez, ha gan-ac'h ec'h on karet
 Pebez heur-vad, pebez tenzor d'in-me !
 Nag a c'hrao dre ho taouarn biniget
 D'an neb ho kar a disken deuz an ee.

M'ho kar, Gwerc'hez, liez dirag hoc'h oter
 D'ac'h ma c'halon a gontaz he foanio
 C'houi roe d'in nerz ha kalon, mam dener,
 Mari, ma mam, c'houi zec'he ma daero.

M'ho kar, Gwerc'hez, vit bean gan-ac'h karet
 Diouz ar pec'het me viro ma ine
 War ho roujo e fell d'in bepred kerzet
 Ma c'honduet aman war hent an ee.

M'ho kar, Gwerc'hez, ha pa meuz ho karante
 Na grenin ken vit ma zilvidigez,
 Mar deu 'n ifern d'ober brezel d'am ine,
 Petra rai d'in, c'houi zo gan-in, Gwerc'hez !

12. — D'an itron Varia.

EVIT AR VRETONEZ EN EM GAV ERMEZ AR VRO

Ma-ri pa-z-oc'h mam Breiz-I-zel, Ni ho ped da deurel eur zell War meur a Vre-ton divro-et Pe-re ganimp n'ho pe-dont ket.

An deillen c'hlaz eur wej distag
 Deuz a ween he doug hag he mag
 Er poul a vreino hep dale
 Kaer e do nijal ha bale.

Evelse kals a Vretonez
 Pell deuz ar ger p'ho deuz tec'het
 A wenv a gorf hag a galon
 Hep Doue na relijion.

Darn a dismant hed an hencho
 Pinvidigez ho ineo
 Ha digare gonid arhant
 A freg zae-wenn ho badeiant.

Gonid arhant, koll ar gwir fe
 Ha gwir evruzed ar vue
 Dispriz ho bro hag ho c'herent,
 Ankoat an anaon hag ar zent.

Darn en arme pe war ar mor
 A difen ho bro gant enor,
 Hag a lez hep ober brezel
 D'an diaoul ha d'ar pec'het marvel.

Kasset, o Gwerc'hez, d'ho gwelet
 Unan benag deuz hoc'h eled,
 Unan deuz ar re zo breman
 Gan-imp endro d'ac'h o kanan.

Hoc'h El a lavaro d'ezhe,
 Deuz ho peurz hag hon feurz ive
 Daoulinan bep mintin ha noz
 Evel ma rae ho zado koz.

Hoc'h El a lavaro d'ezhe
 Jonjal en ho farouz bemde,
 Klevet d'ar zul an oferen
 Ha tostet ouz ar Binijen.

Ober goab diouz an dud dife
 Hag anzav Jezuz dirak-he,
 Neb a neuz mez deuz he greden
 Na n'eo na breton na kristen.

Hoc'h El a lavaro d'ezhe
 Bean tom ouz-oc'h, mam Doue,
 Ha distrei liez ho c'halon
 Ouz zantez Anna hon itron.

Ar gwennili d'an neve-han
 A dired c'hoaz d'he nez kentan,
 He evned bian vo zavet
 En doen lec'h eo bet maget.

Digaset an oll Vretonez,
 Micherourien ha zoudardet,
 Mari, digaset he d'ar ger
 Gret evit-he gant ho c'hrouer.

Ma vevoit en-touez ho breuder,
 Ma varvoit en peuc'h ho Zalver
 Ha ma vo ho c'horf diskennet
 En-tall ho mam baour er vered.

13. — Enpad miz mae d'ar Werc'hez.

War don : *Enor ha gloar.*

DISKAN

Mari Rouanez an envo
Gloar ha meulodi d'ho hano
Hon zikouret en hon foanio.

Barz ar c'herio ha war ar maez
An oll gristenien en eur voez
A gan er miz-man d'ar Werc'hez.

Ni ive gant joa diredet
Ouz oter hon mam biniget
A gan a heno, a spered.

Zent hag ele dimeuz an ee
Unanet ho moez gant hon re
Ha kanet gan-imp-ni ive.

Ni ho salud, mam da Zoue
Leun a c'hras hag a garante
Biniget dreist an oll groage.

Dous eo an heolda c'houlou-de
Dous eo ar gliz en pad miz mae
Mari zo dousoc'h evit-he.

Barz an env ar zent, an ele
A zo huel dirag Doue,
Mari zo hueloc'h vit-he.

Piou a zo kaer evel Mari ?
Mad ha gallouduz evel-t-hi ?
Ken tener en hon andret-ni ?

C'houi eo repu ar bec'herien
C'houi eo zikour ar gristenien
Chilaouet eta hon feden.


Obtenet d'imp graso neve
Vit gallout jerviji Doue
En spered hag en gwirione.

Pa vomp er park o labourat,
Mari zellet ive d'hon c'had,
Gan-ac'h hon bec'h a vo skanvat.

Hed hon bue ni ho meulo,
Hed hon bue ni ho karo,
Da c'hortoz kanan en envo.

F. G.

14. — Da Vari Bepred.



Ken-tan komjo a dis-kiz war an oa-led er ger, }
A oa ha-no- io Ma-ri ha Je-zuz he mab ker, }



Ouz ma c'herc'hen e tou-gen en pign he me-da-len



Ha « Me ho sa-lud Ma-ri » Oa ma c'hentan pe-den.

DISKAN : War don : *A vianig am euz pec'het.*

A vianig am euz karet
Hag enoret ar Werc'hez
Bepred am euz hec'h anzavet
Evit mam ha rouanez.

Nag a wej he dorn tener aboe ma badeiant
A bellaz deuz ma c'havel pecho an aerouant
Nag a wej he daoulagad evel diou stereden,
War an dro gant re ma mam a baraz war ma fen.

Liez em bugaleaj ma mam d'in a lare :
Eur vam all hoc'h euz en env welloc'h evid-on-me,
War he brec'h pa oan krenvoc'h d'an iliz am dougaz,
Hag enon dirag Mari d'an daoulin am lakaz.

Brasat a rae ma fianz bep ma kresken en noad :
Aon da displij da Zoue e heuilliz an hent mad,
Beteg an de m'am renaz beteg an dol zantel
Elec'h a disken Jezuz en kalon he vogel.

Ha breman pa ven nec'het gant klenved pe glac'har,
Pa zantan an drouk-spered o c'hesa ma diskar,
Deuz ma c'halon d'am geno a zav eur griaden,
Mari, ma mam da viskoaz, diredet d'am zouten.

Em c'hozni evel breman, pa greno ma mempro
Nag a ve stanket ma moez ha mud ma muzello,
Me jonjo em mam garet, ma hirvoud divean
A dougo tresek an env hano Mari gant-han.

15. — Da Vari Avokadez ar bec'herien.

Ton : *Kentan komjo a diskiz.*

Zantez Mari, mam Doue, en peb amzer gwerc'hez,
Jezuz a zo ma roue ha c'houi ma rouanez
Evel ma-c'h-eo ma barner bezet ma fatronez
Hag evid-on dirak-han bezet avokadez.

Me a laka ma fianz, Gwerc'hez, en ho sikour
Plijet gan-ac'h ma difen eneb ma enebour,
Pa deui ma heur divean, m'ho ped mam a drue
Reit d'in ar c'hras da vean en env gant an ele.

O mam leun a drugare, o Gwerc'hez viniget,
M'ho ped : en peb lec'h, bemde, dalc'had ma zikouret,
Prezantet d'ho mab Jezuz peden ho pugale,
Biken na hell ho refus, zur omp a gement-se.

Gwerc'hez gloriuz Vari, repu ar bec'herien
Me ho ped d'am c'honforti em foanio, em anken,
C'houi am difenno erfad, ho mab eo Mab Doue ;
Ar pez a ra d'in krenan, ma barner eo ive.

Hen gout a ret, o Gwerc'hez, hon bue zo poaniuz,
Hen gout a ret, ar bed-man zo eur mor gwall riskuz,
Pellaet diouimp eta pecho an drouk-spered,
Rag c'hoant a mep da vean kristenien vad bepred.

Obtenet d'in ar pardon deuz ma oll bec'hejo
Gret d'in kuitat ar pec'het ha heuil ho vertuio ;
Goulennet c'hoaz evid-on gwir garante Doue,
Rag henez eo an hent mad am reno eun d'an ee.

Pad ma bue 'n em labour ma zikouret bepred,
Dreist pep tra war ma maro, o n'am dilezet ket,
Dre ho taouarn d'am Zalver prezantet ma ine
Zur ec'h in d'ar baradoz war ho lerc'h goude-ze.

16. — Da Vari konsevet hep pec'het.

Diskan.

Sa-lud Ma-ri, mam ha gwerc'hez, Leun a c'halloud,
a va-de-lez, Dou-e gan-ac'h a zo be-pred, Ha
dreist an oll oc'h bi-ni-get.

Doue mammen an oll c'hraso,
O pegen kaer donezono
Oc'h euz skuillet en peb amzer
War ar Werc'hez hon mam dener.

Den na deu er bed-man divlam,
Dre ma-z-omp bugale Adam
Ni oll, ziuoz, zo bet ganet
Gant hon mammo barz ar pec'het.

C'houi hepken, Gwerc'hez evuruz,
Dre c'hras Doue oll-c'hallouduz,
Zo bet miret diouz ar valloz
Tolet gwej-all war hon zud koz.

Evel ma weler eur rozen
Kreiz ar spenn o sevel he fen,
Evelse, Mari, ho kened
A splann dreist an oll barz ar bed.

C'houi zo Gwerc'hez ar gwerc'hezed,
Hoc'h ine a oe glan bepred,
Hag eun Doue en ho kalon
En deuz plijet zewel he dron.

Merc'hed kristen, zellet Mari
Ha kemeret skouer war-n-ezhi,
Evel Mari bezet bepred
Dous ha glan ha net a bec'het.

Mar kerzet oll war he roujo
C'houi he gwelo barz an envo,
Hag endro d'he zron alaouret
A vefet eun de azeet.

Mari, ni zo ho pugale
Med pec'herien ec'h omp ive
Gret eta, mam garantezuz
Ouz-omp eur zell trugarezuz.

D'imp-ni, ganet oll er pec'het,
Digaset ho mab biniget,
Evit hon diwall diouz an tan
C'houeet endro d'imp gant Satan.

17. — Zantez Mari, pedet evid-omp pec'herien
en heur hon maro.



Ma-ri pa deu- io eun de ar ma-ro d'am zoupren,
Ha gant he falc'h di-dru-e p'am dis-ka-ro zou-den,
Pa la-va-ro an oll d'in : a- chu eo da am-zer, E-
vit ho pu-ge-lik paour go-ne-et he var-ner.

DISKAN

Mari, pedet evid-on, Jezuz ho chilaouo,
Jezuz a rei d'in ar c'hras da repozi em bro.

Gan-ac'h evuruz neuze, dre ho sikour, Gwerc'hez,
Ar pec'her paour en envo ho meulo da jamez.

Pa deui kerent, mignonet, da bidi 'n eur onelan
En kichen treid ma gwele d'am momet divean,
Pe larin d'he kenavo en env gant an ele
Me ho ped, Gwerc'hez Vari, pedet evid-on me.

Pa n'allo ken ma zeod ien, sklaset gant ar maro
Laret d'ac'h eur bedenik na laret ho hano,
Pa n'ellin tresek an env zével ma daoulagad,
Pedet vit eur pec'her paour, pedet, mam dous ha mad.

Mari pa vo krog ma goad da sklaskan em mempro,
Pa bizeno war ma zal c'houezen ien ar maro
Pa deui an heur evid-on da guitat treo ar bed,
Pedet vit eur pec'her paour, pedet, Mari, pedet.

Pa n'ellin gant ma daero goalc'hi ma fec'hejo
Pa n'ellin dre 'r Binijen efasi ma c'hrimo,
Pa n'ellin n'eur c'houl pardon skei war boul ma c'halon,
Neuze vit eur pec'her paour Mari goulet pardon.

Pa goueo ar c'hрусifi deuz ma daouarn maro
Pa mo skuillet war-n-ean ma diwean daero,
O sonjal eo gouliet he gorf gant ar pec'het,
Evit eur paour kez pec'her pedet, Mari, pedet.

Pa laro 'r beleg : ine lezet ho korf mortel,
Hag et da vet ho Toue, et, et ine fidel,
Et, et, en hano an Tad, ar Mab hag ar Spered,
Neuze vit eur pec'her paour pedet, Mari, pedet.

Deut ive d'am binigan, deut kichen ma gwele,
Ha d'am momet diwean kemeret ma ine,
Konduet-han da Jezuz, goulet gras evit-han,
Bezeta ma avokadez neuze, mam ar gwellan.

18. — Kantik al labourer d'ar Werc'hez.

An den a vor en he va-gik A za-lud en-hoc'h
D'al la-bou-rer en he bar-kik E lu-ger-net er

he ste-re-den } C'houi a zo eur vam ga-ran-te-zuz. }
ve-re-laou-en } Dous hag he-ga-rad d'al la-bou-rer. }

Be-pred e- vit-han fre-al-zuz En peb di-goue hag
en peb am- zer En peb di-goue hag en peb am-zer.

Dre eur burzud skler hag anad,
Doue prederuz d'he vugale
En ho c'henver ar gwellan tad
Ho gwisk hag ho mag gant larjente,
Med ar c'haeran deuz he vurzudo
Eo ho kalon, o Gwerc'hez dinam,
Dreiz-hi madelez an Otro
En em ziskoe en kalon eur vam. (bis).

Skuill a reomp en douaro
Hon c'had gant hon c'houezen distrempet,
Med aliez hon trevajo
A ve dre wall-amzer distrujet.
Diouz ar goalenno, an aerouant,
Diwallet hon zamik tiegez
Ha ni anoudeg ha kontant
A rei mil benoz d'ho madelez. (bis).


Gant bokedo hon parkeier
Mesket gant ar roz hag al lili,
Ni dalc'hq bleun war hoc'h oter
Mar karet derc'hel d'hon prederi,
Ha gant moezio an evnedigo
Ni a vesko hon moezio nerzuz,
Da ganan ho kanouenno
Elec'h re ar bed ken inaouuz. (bis)

Pa zon ar c'hloc'h d'an Angelus
A zeblant d'in klevet an ele
O kanan gant ho moez skiltruz
« Ni ho salud hon gwir Rouanez. »
Chilaouet, Mari, hon fedenno,
Biniget hon fenno dizolo,
Rag bepred ho meulodio
En hon c'halon a gavo ekleo. (bis)

O miz Mari, miz dudiuz
Te zo ar skeuden war an douar
Diouz an evurusted paduz
A gaver gant mam Jezuz er gloar.
En peb streuvel hag en peb amzer
Jonj an env a freskai ma c'halon,
Bepred ma c'harante dener
A vo vit ma Mam ha ma Itron. (bis)

En deio kaer enpad miz mae
Pep tra en he iez hag he lavar
A gan meulodi mam Doue
Out-hi a venn tridal an douar,
War dioueskel an alc'houederik
Ni garfe nijal beteg en-hi
Rag er bed-man ken reuzeudik
Na neuz ken levezet nemet-hi. (bis)

19. — Ar Stabat Mater.



En he zav Mam an oll c'halc'har
A ouele war vene Kalvar
Gant he Mab krusifiet.

He c'halon a huanade
Dre an anken, hag hec'h ine
Gant eur c'hleve oa treuzet.

Pegen trist, pegen glac'haret
Oa neuze hon Mam biniget
N'he doa met eur mab hepken.

Ar Vam dener-ze a ouele
Hag a hirvoude pa zelle
He mab Jezuz o tremen.

Piou eo an den ha na ouelje
Mar nije gwelet mam Doue
Dindan eur bec'h evelse.

Ha piou na ve ket glac'haret
O welet ar Werc'hez poaniet
Gant eur mab hag a gare.

Abalamour d'hon fec'hejo
A welaz Jezuz er poanio
Gant ar skourjeo blonset.

Hi a well oll joa he c'halon,
He mab ker en he bazion,
O kad eur maro kalet.

O mam ar garante dispar
Gret d'in zantout nerz ho kla-
Evit ma ouelin gan-ac'h. [c'har]

Laket em c'halon karante
Evit Jezuz-Krist ma Doue,
Ma plijin d'ean gwelloc'h.

M'ho ped, mam zantel, ma itron,
Skrivet don ebarz ma chalon
Gouliou ho mab karet.

Pa n'eo evit ma fec'hejo
Eo leun ho mab a c'houlio,
Reid d'in lod en he boanio.

Gret ma ouelin a wir-galon
War Jezuz en he basion
Ken a vo fin d'am bue.

En barz ar groaz en ho kichen
M'euz c'hoant da veskan ma an-
Ha ma daero gant ho re. [ken]

Mari Gwerc'hez ar gwerc'hez
Bezot dous em c'henver bepred,
Gan-ac'h a ouelin ive.

Gret m'en em blijin en daero
Ma kavin ma joa er c'hroajo
Hag en goad ho mab bemde.

Gret ma tougin em izili
Kroaz ho mab hag he bemp gouli
Ha m'ho enorin erfad.

Ha gant aon na liskfen en tan
Pa varno ho Mab peb-unan,
Gwerc'hez bezot gan-in me.

Pa deui ar maro d'an gervel,	Ha pa vo et ma c'horf d'ar be
Vel d'eur zoudard bet er brezel	Plijet gan-ac'h rei d'am ine
Reit d'in kurunen an ee.	Ho paradoz, ma Doue.

Ar Rozera.

20. — Chapeled a joa.

Jonjomp d'ar c'hentan dizenez
Er joa a nevoa ar Werc'hez
Pa oe gant an El zaludet
Da vean mam Zalver ar bed.

En eil mister zellomp Mari
O kuitat he bro hag he zi
Evit gwelet Elizabet
A douge zant Ian viniget.

En drede mister hon Zalver
Zo ganet en eur c'hraou dister
Hag a lavar d'imp distagan
Hon c'halon diouz treo ar bed-man.

Er bevaret mister joauz
Ar Werc'hez gant he mab Jezuz
En em ofr en templ evid-omp
Gant-he da Zoue 'n em ofromp.

Er bemped mister ar Werc'hez
A gavaz goude tri devez
He mab en kreiz an doktored
Leun a furnez hag a spered.

21. — Chapeled a geun.

Ar c'hentan mister truezuz
A diskoe d'imp glac'har Jezuz
Beuet en eur c'houezen a oad
Ha stouet da bidi he Dad.

D'an eil mister a oa blonset
He gorf zantel gant tolio fouet ;
Evit ar pec'hejo mezuz
A c'houzanv eur boan ken euzuz.

D'an drede a oe kurunet
He ben zakr hep true ebet
Gant eur gurunea gret gant spern
D'ho dilivran diouz an ifern.

Er bevaret mister Jezuz
Dindan eur groaz poner, mezuz,
A gerz entresek ar C'halvar,
Heuillomp-han oll leun a c'hlac'har.

Er bempet mister Mab Doue
A ro evid-omp he vue
Piou a vezo c'hoaz ken ingrat
Vit mont eneb eur mestr ken mad.

22. — *Chapeled a c'hloar.*

Er c'hentan mister gloriuz
Kanomp meulodi da Jezuz,
Rag zavet e dimeuz ar be
Herve he gomz an drived de.

Jezuz en eil mister a c'hloar
A deu da guitat an douar,
Zevel a ra d'ar baradoz
Eno e man ouz hon gortoz.

En drede mister me a well
O tiskan war an ebistel
Ar Spered-Zantel deuz an ee
D'ober diout-he tud neve.

D'ar bevaret mister Mari
En kreiz ar joa, ar veulodi
A zo douget korf hag ine
D'ar baradoz gant an ele.

D'ar bempet a oe kurunet
Mari hon mam gant an Dreindred.
En env Rouanez an ele
N'ankoao ket he bugale.

23. — *Vit gouel Hanter-Est.*

E- le ar ba- ra- doz Ka- net gant joa- uz- ted, }
Meu- let ho Rou- a- nez O vont d'an e- vruz- ted, }

Rag hi- rie mam Je- zuz a zo pi- gnet d'an ee, Ha
za- vet war eun tron en ki- chen tron Dou- e.

Meulodi d'ac'h eta, Mari hon mam dener
Merc'h an Tad eternel, mam Jezuz hon Zalver
Pried ar Spered-glan, repu ar bec'herien,
Rouanez an ele, zikour ar gristenien.

C'houi zo gant an ele d'ar baradoz douget,
Gant an Dreinded zantel eno oc'h kurunet,
Evruz oc'h o kuitat an draouien a daero
Evit ren da viken gant Jezuz, hon Otro.

Fas ouz fas a welet Roue ar rouane ;
Ar mab oc'h euz douget entre ho taou goste,
An hini veve gwej-all war an douar kuzet
A ra er baradoz hoc'h oll evurusted.

Gwerc'hez, pebez galloud a ro d'ac'h hon Zalver,
Dre ho taouarn breman a ro d'imp graso kaer

An hini c'h euz ganet vit zovetat ar bed
Dreist an oll zent en env neuz hirie ho savet.

Med pa-z-oc'h azeet en-tal ho mab Jezuz
Mari hon chilaouet war ho tron lugernuz
C'houi hon c'har, mam dener, ni zo ho pugale,
Ho Mab a blij d'ean ober ho polonte.

Dirag ho Mab eta, bet hon avokadez
Hon zikouret er boan, trubuill ha dienez ;
Ha da c'hortoz bean evuruz en envo
War an douar aman bepred ni ho meulo.

F. G.

24. — Kantik ar bugel d'ar Werc'hez.

Tos-tat a ra heol splann ar beu-re, Poënt eo d'in
Da gen-tan e fell d'in kous-kou-de Di- fun ma
fin- val ha ze-vel. } Di- fun ha di- gor ma c'halon
c'ha-lon a vu-gel. }

Ma ge- no i- ve Da ga- nan d'am mam d'am i-
tton A- ve a- ve.

Evrig skanv en amzer o nijal	Evelse, Mari, hep paouez
Beure mad a lar he zonik	Me renk hed an de
Hed an de beteg an noz tenval	Ho saludi gant levezuz
Morse na davo he vouezik	Ave, ave.

Eun de all evid-on a darzo,
O sonjal e spont ma spered,
Sklaset em gwele ma c'horfmaro
Da c'houlou-de na zavo ket.

Deuz an envo d'am diarben
Diskennet neuze,
Ha d'ac'h me gano da viken
Ave, ave,

XXIV. — KANTIKO DA ZANT JOSEB

Mi-rer choazet gant Dou-e D'he Vab ha d'ar Werc'hez,
Bet oc'h euz en ho pu-e An-ken ha le-ve-nez.

Diskan.

Zant Jo-zeb pri-ed Ma-ri Tad ma-ger da Je-zuz, Ni
fell d'imp hoc'h e-no-ri, Pa-tron ka-ran-te-zuz.

Evit digemer Jezuz
N'oc'h euz na tan na ti,
Ho kalon zo evuruz
O tont d'hen adori.

Pa glask Herodez Jezuz
D'hen lakat d'ar maro.
Gant pebez fe burzuduz
Hen kaset da bell-bro.

Pebez poan enpad tri de
Jezuz a zo kollet,
Pebez levezuz goude,
Jezuz hoc'h euz kavet.

Ho labour a neuz maget
Ho krouer, mab Doue,
En he labour mestr ar bed
Ouzoc'h-hu a zente.

War an douar trubuillet
C'houi breman en envo
A zo gallouduz meurbed,
Reit d'in ma goulennno.

Jezuz a bleg d'ho peden
Hag he Vam, ho pried,
Eur c'hras am euz da c'houlenn,
Eur c'hras d'in goulennet.

Pa vin galvet gant Doue,
Patron ar maro mad,
Deut gant eun dorn a drue
Zerret ma daoulagad.

Tost d'ac'h ha tost da Vari
En kichen tron Jezuz
Ra z-in eun de d'ho meuli,
Ma fatron evuruz.

Da Zant Joseb.

O Zant Jo- zeb ni ho su- pli En ha- no Je- zuz
 ha Ma- ri Dou- get hon fe- den da Zou- e Ha zi-
 kou- ret ho pu- ga- le.

Evel-d-oc'h ni garfe miret
 Lezen Doue en kreiz ar bed
 Trec'hi war hon oll fall-blegio
 Ha mont eun gant hent an envo.

Ho ti zo bet ti hon Zalver,
 Ho heuill a rae war ho micher,
 Evel en ho ti ni garfe
 A chomfe 'n hon c'halon noz-de.

Ha mar deufemp dre ar pec'het
 D'hen pellat diouimp gwej ebet,
 Ni garfe raktal hen kavet
 Evel-d-oc'h p'ho poa hen kollet.

Gant ar c'houezen dimeuz ho tal
 Hoc'h euz maget Jezuz gwej-all,
 Dre hon obero ni garfe
 Magan he c'hras en hon ine.

Dreist-oll war hon heur diwean
 Pa vo ret kuitat ar bed-man
 Gwelet evel-d-oc'h a garfemp
 Jezuz ha Mari entall d'emp.

Ha neuze goude bean bet
 Aman war-eun-dro ho pedet,
 Er baradoz c'hoaz war-eun-dro
 Da virviken ni ho meulo.

En enor da Zant Joseb.

Diskan.

Zant Jo- zeb e- vu- ruz, Pri- ed ar Werc'hez Va- ri
 Tad ma- ger da Je- zuz Ni a fell d'imp ho meu- li.

An hini oe nec'het
 Gant an El pa diskennaz
 En he zi d'he gwelet,
 Da bried ho kemeraz.

Douget hoc'h euz Jezuz
 War ho tivrec'h biniget,
 War ho kalon joauz
 Pet gwej a neuz han kousket.

Roue ar rouane
 Ouzoc'h-hu a neuz zentet,
 Ha gwir vab ho Toue
 Ganac'h a zo bet maget.

En ho tiik kuzet
 An Doue oll-c'hallouduz
 A neuz ho sikouret
 En ho labourio poaniu.

Ziouaz, kals a boanio
 Oc'h euz bet en ho pue,
 Med pa skuillec'h daero,
 Dorn Jezuz ho dizec'he.

Gant Mari ha Jezuz,
 An de a renkjoc'h kuitat
 Hon zraouien ankeniuz,
 Oe zerret ho taoulagad.

Tre Mari ha Jezuz
 Dreist ar zent, ar zentezed,
 War eun tron lugernuz.
 C'houi a zo breman zavet.

Ouz-omp ho pugale
 Troet eta ho sello
 Ha beteg tron Doue
 Plijet kas hon fedenno.

Eur c'hras a c'houlennan
 O zant braz evid-on-me;
 Deut em heur diwean
 Da zigemer ma ine.

Gret ma teui ho pugel
 O ma zad karantezuz,
 Evel-d-oc'h da vervel
 Entre Mari ha Jezuz.

XXV. — DA ZANTEZ ANNA

Hanvet oc'h bet a bell-zo Pa-tro-nez Breiz-I-zel.
Hag a vis-koaz hon za-do D'ach a zo bet fi-del.

Diskan.

Mam an I-tron Va-ri- a Ha mam ar Vre-to-ned, O

I-tron Zan-tez An-na Ni ho ka-ro be-pred, ni ho ka-
ro be-pred.

Vel hon zud koz Bretoned
Hon fianz ar brasan
En-hoc'h a lekomp bepred,
Itron Zantez Annan.
Zellet en-tall ar c'havel
Ar vam-ze daoulinet
Pidi ra vit he bugel
Zantez Annan Wened.
Ar c'hlanvour gant an derjen
Dalc'het war he vele
A neuz gret d'ac'h eur beden
Hag a zo deut pare.
War ar maez en Breiz-Izel
Pa feller diskuizan
Ouz an env a rer eur zell
O tont oll da ganan.
Chetu ar mor o krozan
Daoulinet, martolod,

Da bidi Zantez Annan
Hi ho kaso d'an od.
War eur mor leun a rec'hier
Omp, ziuaz, er bed-man
Diwalet hon bag dister,
Itron Zantez Annan.
Chilaouet war ar mene
Ar mesaer o kanan,
Ho meuli a ra ive,
Itron Zantez Annan.
Ar zoudard kez er brezel
A bed Zantez Annan
Ha pa vezo ret mervel
E teui c'hoaz da ganan.
Bugale gez da Eva
Ni a glask hon gwir vro
O ltron zantez Anna.
Hon c'haset d'an envo.

Da Zantez Anna.

I-tron vad Zan-tez An-nan c'houi zo nerz Breiz-I-zel }
Hon zi-kour en peb am-zer, er peuc'h hag er bre-zel. }

An oll Vre-to-ned a-man a gan a greiz ka-lon ;

War ar maez ha war ar mor meu-lo-di d'hon I-tron.

C'houi hepken touez ar mammo hoc'h euz laket er bed
Eur bugel ker d'he c'hrouer raktal m'he deuz bevet
C'houi zo mam da vam Doue, da vam ar gristenien,
Ho merc'h a zo rouanez an oll grouadurien.

Pa oa gan-ac'h en ho ti Mari d'ac'h a blege
Kenkent ma larec'h eur gir, Mari a chilaoue,
N'eo ket bouzar nag amzent en envo war he zron
Teneroc'h evit biskoaz eo breman he c'halon.

Evel Mari ha Jozeb, pa gomzet ouz Jezuz
Hen galvet en gwirione ho Mab karantezuz,
An dud a gar ho mam-goz, c'houi zo mam-goz ive,
Med Jezuz ho mab bian a zo den ha Doue.

Evuruz eo dreist an oll ar bobl a Vreiz-Izel
Da gad evit patronez eur Zantez ken huel,
Keit ha ma talc'ho ar mor da grozal tro hon bro
En Breiz dre zikour Annan ar fe stard a chomo.

N'eo ket aoalc'h d'ar c'hristen anveout ar gwir fe,
Eur bar zec'h eo d'ober tan mar n'en deuz karante,
Annan disket d'imp karet Jezuz hag ar Verc'hez
Ha gant-hi da virviken bezet hon fatronez.

XXVI. — D'AN EL MAD

Diskan.

E- le Dou-e, e- le e- vruz, Dis-ket d'imp jer- vi- ji
 Je- zuz Veld'oc'h ni zo he vu-ga- le An env a zo
 hon bro i- ve.

Me oar e chomet noz ha de
 Em c'hichen leun a garante,
 Penoz e teufen d'oc'h ankoat
 Ma gwellan mignon, ma el mad.

Reit d'am divrec'h pa labouran
 Nerz d'ober ar pezh a glean,
 Ma hellin gonid ma bue
 Keit ha ma plijo gant Doue.

Gan-in er park p'en em gavet
 Pellaet diouin ar pec'het,
 Harzet ma geno da zigor
 Eneb ar fe pe an enor.

Pa vemp er ger tud hag eled
 Vel er baradoz unanet,
 Gret ma vevfomp er garante
 Nesan, kerent ha bugale.

Pa larin ma fater neuze
 War ma daoulin noz ha beure,
 Pedet gan-in hag astennet
 Hoc'h askel endro d'am spered.

Hoc'h askel war-n-hon astennet
 Da guzan ouz-in treo ar bed

Mouget en-hon trouz an douar
 Ma vo ma jonj gant ma lavar.

Pa vo et an heol da gousket
 Dorn ouz dorn gan-in baleet,
 Rag an diaoul hag he vevelien
 Zo gwasoc'h en devalijen.

Vel ma chomec'h ouz ma c'havel
 Chomet ouz ma gwele-mervel
 War ho lerc'h e fell d'in nijal
 Prim deuz ar bed-man d'ar bed-all.

Beteg an env c'houi am reno
 Beteg Jezuz c'houi am c'haso,
 Ha gan-ac'h a diskin kanan
 Ar c'hantiko a blij d'ean.

XXVII. — EN ENOR DA ZANT ERVOAN

Ton : *O ma ine kanomp bemde.*

DISKAN

Otro Zant Ervoan viniget
 Enor ha zikour hon bro
 An nep ho ped a neuz bepred
 Eun difenner en envo.

En hon zouez deuz a Zant Ervoan
 Braz eo ar madobero,
 O sonjal en-he peb-unan
 A wir-galon a laro :

En envo evel en douar
 Zant Ervoan zo gallouduz,
 Hag he galon d'an neb hen kar
 Zo mad ha trugarezuz.

Ia, pep hini da Zant Ervoan
 Neuz nemet en em westlan,
 En peb ezom hag en peb poan
 A vo zikouret gant-han.

Evit treo an douar nec'het
 Gant ar glao pe ar zec'hour
 Da Zant Ervoan omp diredet
 Bepred a mempe bet zikour.

D'ar beleg, d'an den a lezen,
 Avokat, beleg zantel,
 Zant Ervoan ro skouer, sklerijen,
 Ma voint en ho c'harg fidel.

Ar vam a lavar eur beden
 Da Zant Ervoan bep beure,
 Kalon he mab vel eur rozen
 A zigor war-zu an ee.

An intañvez paour en he foan.
 Gant he famil hep zouten
 En em erbed da Zant Ervoan,
 Ha Zant Ervoan he difen.

Ar bugelik kez emzivad
Tad ha mam gant-han kollet
En Zant Ervoan a gav eun tad
Gant asistans vad bepred.

Ar zoudard galvet d'an arme
Kent kuitat, da Zant-Ervoan
A ia da bidi, ha neuze
A greiz he galon a gan :

Ar martolod war ar mor don
Gwall hinjet he vag vian
A zo fianz en he galon,
He sturier eo Zant Ervoan.

Al labourer devot d'ar zant
A gav skanvoc'h an arar

Kals blotoc'h veur park pa blant,
Pa sko he bal en douar.

An devezour an den a boan
Bemde kent mont d'he zevez
Mar deu da bidi Zant Ervoan
A gano gant levenez.

Ni oll a zo devezourien
Er bed-man, ha tud a boan,
Ha c'houi dizprizfe hon feden,
C'houi otro mad Zant Ervoan ?

Kals ahanomp hep pell dale
Gle achui ho devez
Gret d'imp mont da ganan en ee
Goude kanan er vue.

Gwerz koz Zant Ervoan.

Diskan.



O-tro Zant Er-voan ni ho ped, Er vu- e man hon
zi-kouret Da heuil er-fad ho ver-tu- io, Ha da vont
eun de d'an en- vo.

Chilaouet oll, braz, ha bian
Bue an Otro Zant Ervoan,
Bue Zant Ervoan Heloury
Disket-hi oll, me ho supli.

Ervoan Heloury zo ganet
En Kervarzin, ti biniget.
Damdost d'ar ger a Landreger
Eur c'hart-lew pe wardro deuz
[ker].

He dad ganet er Vinihy
A oa he hano Heloury,
He vam oa Azo ar Genkiz,
Ho daou fur ha nobl en peb giz.

Arog ma oa Ervoan ganet
D'he vam Azo oe diskleriet
Penez ar bugel a douge
A vije eur zant braz eun de.

Ha pa oe ganet ar bugel
A oe gwelet hep dale pell
A vije leun a zantelez,
Diskoe rae kad kals a furnez.

He vam, pa oa en noad deuz-ze
Diskaz d'ean pidi Doue,
Ha goude rez eur mestr d'ean
Evit diski lenn ha skrivan.

Lakat a rejont ho bugel
Entre daouarn eur mestr zantel,
Ian a Ger'hoz a Bleuvian
A diskaz al latin d'Ervoan.

Sul-vui greske he diskamant,
Sul-vui greske furnez ar zant,
Pe na vije gant he studi
E vije kavet o pidi.

Pe oa a barzek vla noajet
Da Bariz a c'hoantaz monet,
Eno neuze vije kavet
Ar skolio ar muan brudet.

Eno oe gwelet o trec'hi
Ar re oa gant-han er studi,
Dre he zantelez ho zrec'he
Ha dre he spered lem ive.

Adaleg neuze a roe
An aluzen d'ar paour bemde,
Ar c'hig a vije reit d'ean
A gase da di'r bevien glan.

Neuze a rae gwelet ive,
Pegen zantel oa he vue
Na debre ket bara gwiniiz,
Med bara hey pe bara griz.

Gret gant-han he filosofi,
A diskaz an theoloji,
Ha da bevar bla war-n-ugent
Oa disket ha leun a skient.

'Vit diski lezen an Iliz
A guita ar ger a Bariz
'Vit mont d'ar ger a Orleanz
Lec'h ma oa tud disketan Franz.

Eno gant doktored disket
A diskaz lezenno ar bed
'Vit gout an tu da varndalc'hmad
Ar prosejo gant justiz vad.

Er ger-man a dilez a grenn
Ar c'hik, ar gwin, dre binijen,
Ouz he zec'hed dour a eve;
N'em rei a rez oll da Zoue.

Studian rae lezen Doue,
Pidi rae ive kals bemde,
Ouspen iun a rae bep gwener,
'Vit enori marv hon Zalver.

Gout a rae penoz ar skient
N'all ket he-unan ober zent,
Mar na unaner hep paouez
An œuvro mad hag ar furnez.

He studi gant-han achuet
Da varner braz a oe laket,
Da varner-iliz en Raon
Gant Moriz au arc'hdiagon.

Eskob Treger neubet goude,
Pa glevaz komz deuz he vue
Hen pedaz da dont da vet han,
Rak kals istim nevoa vit-han.

Ar zant gant humilite vraz
Ouz mouez he eskob a zentaz,
Ha pa oe d'he vro retornet
Oe gant he eskob beleget.

He eskob he lakaz raktal
Da varner, pe ofisial,
Er memez amzer he hanvez
Da berson en parouz Tredrez.

Hag eiz vla goude kement-man
Oe roet Louanek d'ean,
Ar barouz-ze a oa karget
A viso, a dud direglet.

Med Zant Ervoan a gelennaz
Ar bobl-ze gant karante vraz,
O prezek, o katekizan
A chanchaz krenn ar barouz-man

Pa oa barner ec'h alie
Liez a wej dre charite
An daou barti da akordi
Da chom en peuc'h hep prosezi.

Ha pa renke rei eur setanz
Hen roe just, en konsianz,
Rag barn a rae herve Doue,
Hep zellet ouz nep kalite.

Na oa ket hepken barner mad,
Zant Ervoan oa c'hoaz avokad,
Kaoz ar bevien a zoutene
Hep goulennetra digant-he.

Ma garfe 'r justiz zo breman
Ober evel ar barner-man,
Na ve ket ken aliez gret
A injustiz hag a bec'het.

Mar boa parfet den a justiz
Oa c'hoaz parfet den a iliz,
Na glaske nemet gloar Doue
Ha diski d'an oll hent an ee.

Liez a wej e prezege
Beteg peder gwej en eun de,
Ar Basion a brezegaz
Seizgwejde eur gwener argroaz.

N'eo ket hepken da Louanek
Pe da Dredrez ie da brezek,
Med c'hoaz d'ar paroujo wardro
Ha dre Vreiz en Eskoptio.

Gras Doue dre he zarmonio
A douche kals a galono,
A rae d'ar bec'herien vrasan
Donet d'en em gonvertisan.

O vont da brezek e kavaz
Eur pont goloet gant dour braz,
Hag an dour a arretaz krenn
Evit he lezel da dremen.

Ken braz oa he devosion
Ma fonte kazi he galon
En iliz en-pad he beden
Ha pa lare an oferen.

Glebian rae liez he dillad
Gant an daero n'he daoulagad,
Pa vije c'h'ober he beden
Arog laret an oferen.

Eur wej enpad he oferen
A zo bet gwelet ust d'he ben
Eur flammen dan deuz an envo
Keit ha ma oat er goureo.

He di a oa ti ar bevien
D'he-oll a rae an aluzen
Ho lojan rae hag ho gwiski
Ha rei d'he c'hoaz boed da dibri.

Eur wej a roaz d'ar bevien
He oll ed hep menel greunen,
Dre eur mirakl a oe kavet
He c'hriguel kenkent leun a ed.

Eur veaj-all c'hoaz n'hen devoa
Nemet eur gwennegad bara,
Hag hen vont d'hen distribui
Hep miret tam bet da dibri.

Ha goude ma nevoa roet
He dam dabep paour vit he bred,
A vanaz he vara gant-han
Kement evel rog he droc'han.

Chanchet, tud avarisiuz
Bezot ouz ar paour truezuz,
Dreist-muzur Doue a zo mad
Kenver ar re neuz kalon-vad.

Hen oa tad an emzivadad,
Difenner an intanzeved,
Zouten an oll dud ezomuz
Ha konfort ar re hirvouduz.

Ar zant ken mad vit peb unan
A oa rust out-han he-unan
He gorf a gastie bemde,
Vel eun enebour he zelle.

War he gorf zantel a douge
Eur roched reun dalc'hamad, noz
He wele oa 'n tam plouz hepken
Gant ar bibl zakr dindan he ben.

Bemde en em discipline
Ha kazi bemde a iune,
Amzer he gousket a oa berr.
Hag he vezanz a oa dister.

Erfin ar zant a zo marvet
War-dro hanter kant vla noajet;
Glac'haret braz oa tud ar vro
Pa oa klevet a oa maro.

A bep tu an-dud a deue
Da welet korf an den Doue,
Ha hed tri de eo bet chomet
Hep gallout bean interret.

Zant Ervoan a zo bet marvet
En Kervazin lec'h oa ganet.
An Eskob a rez urz raktal
D'he interri er gatedral.

En miz mae a varvaz ar zant,
Er blavez tri ha trizek kant,
Dre he viraklo ec'h eo bet
Neubet goude kanonizet.

Otro Zant Ervoan viniget
Pa-z-oc'h gant Jezuz kurunet,
Pedet evid-omp en envo
Ma heuilfomp oll ho vertuio.

Obtenet d'imp digant Doue
He doujanz hag he garante,
Ar c'hras d'he zerviji erfad
Da gavet oll eur maro mad.

Pobl ar Vinihy bet bepred
Devot d'ho patron biniget,
E man en envo o pidi
Evit parouz ar Vinihy.

Kantik neve da Zant Ervoan.

Diskan.

O-tro Zant Ervoan kle-vet hon feden, Deuz lein an en-vo reit d'imp hon goulenn, Deuz lein an en-vo reit d'imp hon gou-len.

Ni ia da ganan, oll braz ha bian,
Gloar hag enor d'ac'h, Otro Zant Ervoan.

Zant Ervoan en Breiz dre-oll zo brudet,
En Treger, Leon, Kerne ha Gwened.

Gant tud a bep stad, huel hag izel,
A beder Ervoan a dost hag a bell.

Gret neuz œuvro mad hed he oll amzer,
Breman neuz en env eur gurunen gaer.

Vit an oll a oa leun a garante,
Evel gwir vreudeur ho digemere.

Pet gwej war he hent e neuz zikouret
Tud en dienez ha tud ankeniet !

En ti Zant Ervoan vije aluzen
Ha lojeiz ive evit ar bevien.

Eno a gaveint en tu-ont da ze
Meur a ali mad evit ho ine.

Eun de e teuaz Jezuz he-unan
Da c'houl aluzen digant zant Ervoan.

En kenver an oll a oa mad bepred,
Out-han he-unan a oa rust meurbed.

Ervoan eo mignon ar vartoloded,
Nag a wej gant-han int bet zikouret !

Gwell-gaset ho pag gant ar gwell-amzer
Pedet Zant Ervoan, hen vo ho sturier !

Kals da Zant Ervoan pa deuz n'om westlet
Kreiz bean er boan zo bet diboaniet.

Otro Zant Ervoan, beleg leun a fe,
Den a viraklo bet ouz-omp true !

Doue ho rene, ho sklerijenne
Evit barn erfad ha gant gwirione.

Bep bla Zant Ervoan a deu da welet
Al lec'hio zantel lec'h ma oa ganet.

De he bardon braz pen an den zantel
A ve douget c'hoaz beteg he chapel.

Chapel Kervarzin elec'h ma laraz
An ofern tri de arog ma varvaz.

Relego ar zant a deu da dridal
Pa wel al lec'h-ze a gare gwej-all.

Eno neuz bevet, eno eo marvet,
He ine d'an env ahane zo et.

Miraklo a rae enpad he vue,
Goude he varo a ra adare.

Gwir sklerijen Breiz, skouer zantel meurbed,
Bet ar vadelez d'hon chilaou bepred.

'Vel en amzer goz ar belerined
A digas d'ar zant eun dornadig ed.

Doue d'ho paeo, hep mar Zant Ervoan
A roio d'ac'h-oll kant evit unan.

Gret ive d'ar zant eur bedennik vad
Ha dre he zikour a po eun est mad.

Na dous eo pidi pa ver barz ar boan
Er chapel el lec'h ma bede Ervoan.

Otro Zant Ervoan, c'houi bed en envo
Evid-omp dreist-oll, evit tud ho pro.

Vit Breiziz ho poa eur garante vraz,
Ha breman en env ec'h eo brasoc'h c'hoaz :

Gant fianz eta ho pedfomp bemde,
Hag eveldoc'h c'houi ni garo Doue.


Lest hoc'h euz gan-imp skouer ho vertuio
Ni ielo bepred da heuil ho roujo.

C'houi oa avokad pa oac'h er bed-man,
Bet hon avokad en envo breman.

Amen.

F. G.

XXVIII. — KANTIK AR PAB HAG AN ILIZ



Ar Pab en Breiz a zo ka-ret Gant-han Breiz zo bi-ni-get,

A greiz ka-lon gant hon fe-den Ni rei d'ar Pab a-lu-zen.

Jezuz arog kuitat ar bed
A neuz he Iliz zavet
Vit diski d'an oll dud fidel
Hent ar vue eternal.

Eur bar greffet en eur ween
Freuz mad a deu da dougen,
Bue ar c'hristen zo greffet
War Jezuz Zalver ar bed.

Da rei d'imp gened ha bue
Hon c'horf a neuz eun ine,
An iliz a neuz vit ine
Ar Spered-glan gwir Doue.

D'an oll a ro nerz, sklerijen
Da vean gwir gristenien,
D'ar veleien, d'ar bastored
Pebez galloud zo roet.

Pen an Iliz er baradoz
Eo Jezuz ouz hon gortoz,
En pen an Iliz er bed-man
Simon oa laket gant-han.

War Ber an Iliz zo zavet
Vit-se Per a oe hanvet,
Ar roc'h zo trec'h d'ar goagenno
Per zo trec'h d'an ifernio.

Hag ar Pab a dalc'h plas zant Per,
Hen eo vikel hon Zalver,
D'an ebestel Per oa ar pen
Hag ar Pab d'an ishibien.

Enor braz d'ar Pab a douger
Ouz he dreid a daouliner,
Gant ar Pab an oll zo renet,
Pastored kouls ha denved.

Da bep iliz evit ho ren
Ar Pab a ro ishibien,
Ar re na nefe ket kaset
Na veint ket gwir bastored.

Ar Pab hepken a gle diski
Pez zo d'ober, da gridi,
Hen eo ar barner war ar fe,
Pez a varn zo gwirione.

Zentomp ouz mouez hon tad zan-
Karomp-han bete mervel, [tel]
Benez d'an neb ro he diner
D'ar Pab vikel hon Zalver.


Enor karante ha respet
D'hon Tad zantel zo gleet,
Roomp d'ean c'hoaz, kristenien,
Roomp zikour hon feden.

Imprimatur :

Brioci, die 9^a Aprilis 1894.


M. LE PROVOST, vic.-gen.

Archid. Trecoren.



TOLEN AR C'HANTIKO

DRE RENK AL LIZERENNO



Adoromp oll en hosti kuzet.....	84
Adoromp oll er Zakramant an Oter.....	7
Adoromp oll war ar C'halvar.....	73
Allaz na oufe den kompren.....	43
An den a vor en he vagik.....	118
Ar c'hentan mister truezuz.....	121
Ar Pab en Breiz a zo karet.....	138
Ar Stabat Mater.....	120
A vianig am euz pec'het.....	54
A vremen beteg ar maro.....	11
Barnet a vo kement den.....	47
Bemde bemnoz.....	102
Biniget ma Doue.....	61
Breudeur ni glev ho klemmo.....	95
Chilaouet gant spont hag eston.....	40
Chilaouet ma Jezuz.....	41
Chilaouet oll Bretoned.....	68
De ma C'honfirmasion.....	93
Deut, ni ho ped, hirie Spered-Zantel.....	82
Deut oll ha deut gant fe.....	18
Diskennomp oll a spered.....	44
Doue gwir bried.....	37
Ele an env deut d'an douar.....	71
Ele ar baradoz kanet.....	123
Ele deuz ar baradoz zellet.....	16
Ele Doue, ele evruz.....	130
En em gonzolet evit mad.....	80
En he zav ar vam a c'hlae'har.....	120
Enor da groaz hon Zalver.....	76
Enor ha gloar da virviken.....	24
Eun arc'hel a beurz an Otro.....	97

Eun dezir braz am euz.....	23
Er c'hentan mister gloriuz.....	122
Gant ho sikour o ma Doue.....	60
Gwerc'hez diwar ho tron en ee.....	101
Itron vad Zantez Annan.....	129
Jezuz er groaz arog mervel.....	100
Jezuz hon Zalver bet true.....	32
Jezuz pegen braz e.....	50
Jezuz Zalver adorabl.....	9
Jonjomp d'ar c'hentan dizenez.....	121
Kanomp nouel da Vab Doue.....	66
Kanomp oll eur c'hantik a joa.....	69
Kentan komjo a diskiz.....	112
Kent ho kuitat Jezuz.....	10
Klevet bugale me ho ped.....	78
Klevet komz an ine.....	52
Kridi a ran o ma Doue.....	54
Kristenien pobl evruz.....	8
Krouer gallouduz ar stered.....	64
Laret am euz a grenn.....	26
Mam an Itron Varia.....	128
Mar fell d'ac'h klevet pen-da-ben.....	12
Mari pa deuo eun de ar maro.....	116
Mari pa zoc'h Mam Breiz-Izel.....	110
Mari Rouanez en envo.....	112
Me am euz hirie preparet.....	89
Me glev eur voez tener.....	106
Me gred ferm hep doutanz ebet.....	14
Me hoc'h ador ma Jezuz.....	81
Meulomp oll da jamez.....	19
Meulomp oll hirie.....	22
M'ho kar, Gwerc'hez.....	108
Ni ho salud Rouanez an ele.....	99
Ni ho salud stereden vor.....	98
Ofromp da Zoue 'r zakrifiz.....	11
O Kalon zakr.....	25
O ma ine kanomp bemde.....	103
O ma Jezuz chetu deut an amzer.....	28
O ma Jezuz pegen dous e.....	108
Otro zant Ervoan klevet hon feden.....	135
Otro zant Ervoan ni ho ped.....	132
Otro zant Ervoan viniget.....	131
O zant Jozeb ni ho supli.....	126
Pec'her dallet gant plijadurio.....	38
Pe n'oc'h et d'ar baradoz.....	85

Plijet gan-ac'h ma Doue.....	62
Ra vo ho hano biniget.....	105
Reglen a vue.....	60
Rog tostet ouz ar binijen.....	29
Salud Mari mam ha gwerc'hez.....	115
Spered-Zantel spered a sklerijen.....	7
Spered zakr ha divin.....	65
Tostat a ra heol splann.....	124
Trugare d'ac'h ma Jezuz.....	21
Zantez Mari mam Doue.....	114
Zant Joseb evruz.....	127
Zant Jozeb pried Mari.....	125
Zonjomp en gwirione.....	42





BUE ZANT ERVOAN

LAKET EN BREZONEK

Gant an Otro F. GUILLOUZIC

KÛRE ZANT ERVOAN

En li R. PRUD'HOMME † En li E. AR FLEM

ZANT-BRIEC † EN LANDREGER

Dek kwennek pep hini

1894